

Voici l'énumération de la plupart des ouvrages
consultés pour la composition de ce petit livre :

HISTOIRES DE BRETAGNE

Dom Morice, Dom Lobineau, chanoine Déric,
Pitre-Chevalier, Anna de Jésus.

VIES DE SAINTS

Les Bollandistes, Giry et Albert Le Grand (édition
annotée par M. de Kerdanet).

LIVRES DIVERS

Docteur Halléguen, Aurélien de Courson, Diction-
naire d'Ogée (édition annotée par Marteville, etc.) —
Supplément aux Dictionnaires Bretons de M. Rou-
daut (Introduction). — Le P. Grégoire de Rostre-
nen. — Comte de Carné (États de Bretagne), Gabourg
et Laurentie, etc., etc.

On n'a pas cru devoir citer les autorités au bas de
la page, pour ne point retarder la lecture.

BUEZ

38342

SANT MILLIAU

HA SANT MËLAR

SENT HA ROUEET A VREIZ-IZEL

SCRIVET

GANT AN AUTROU J. GUILLOU

BELEG

(PROPRIÉTÉ DE L'AUTEUR)



BREST

J. B. HAG A. LEFOURNIER

85, ru Siam, 85

KEMPER

E TI J. SALAUN, LEORIER

56, ru Kereon, 56

1883

43
242
5
712

APPROBATION

Nous, Evêque de Quimper et de Léon,

Sur le rapport de M. l'abbé SERRÉ, notre
Vicaire général,

Croyons que la *Vie de saint Milliau et de
saint Meloir* offre une lecture intéressante à
nos populations bretonnes et qu'elle est propre
à les édifier.

Quimper, le 4 Septembre 1882.

† D. ANSELME,

* O. S. B.

Ev. de Quimper et de Léon.

KINNIG

Kement hini a skriv eul leor nevez,
n'eus fors pegen disterik e ve, a renk
lavaret eur ger benak da genta d'al len-
ner, evel ma renker ive tenna an tok
d'an dud ho p'eus c'hoant kozeal gantho.
Ne zaluder ket heb dizolei ar penn :
evelse ive an hini en deus gret eul leor
nevez a renk lavaret deustu ha var eün,
en eur zizolei he zonch, perak ha pennos
en deus gret al leor-ze.

Va leorik am eus gret, kenvroës ker,
var beden eur beleg a ne garfen morse
dizenti outhan. Dime e vo d'ho trugare-
kaat, Autrou Billon, ma teu da lakaat
sant Milliau ha sant Moelar da vea mui-
oc'h anaveet, karët hag henoret.

Great am eus va labour en eur heuilla scridou ar re ho deus scrivet a bell zo histor Breiz ha sikouret ive gant bolontez vad tud guesiek meurbet, evel an Tad Dom Plaine, an Autrou Morvan, chaloni, an Autrou Gouvello hag an Autrou Belbeoc'h. Bennos Doue dezho ha da gement hini en deus roet dinn eun ali mad benak.

Oh ! kals ha kals all, a dra zur, an darnvuia soken, ho divije scrivet guelloc'h eget-hon an diou vuez-man.

Lakeat am eus va foan ha va amzer : aoualc'h eo evit beza divlam dirak va c'houstians.

Iit brema, leorik paour, iit er c'heriou ha var ar measiou da lavaret pegen santel eo bet sant Milliau ha sant Mølar ; iit da lavaret pegement a feiz hag a nerskalon so bet en hor bro evit ma ken-

dalc'ho ar vugale vihan var roudou ho zud koz.

Iit gant bennos an Autrou'n eskop Nouvel, Breizad e-unan ha Breizad a Vreiz-Izel, evel kals a iskpitien all a Vreiz. Hentchet ha kennerzet gant ar bennos-se eus tad hon eneou, ra viot digemmeret mad gant ar vugale. Ra gaffet eur c'hougnik e korn pep oaled, epad ar goanv-man, evit deski da Vreizis karet muioc'h c'hoas sent ho bro.

Ho kinnig a ran, leorik bihan, d'an hini a gar kement sent Breiz hag ar Brezounek. En eur scriva ho buez, Autrou Morvan, e lakit eur c'helc'h a henor var benn sent hor bro. Ne zisprijoc'h ket, sur on a gement-se, ar bokedik am eus dastumet evitho, pennaouet aman hag haont. Resevit anezhan evel eun testeni a anaoudegez vad evit kement a aliou

fur am eus bet diganeoc'h. Ouspen-ze, da
biou guelloc'h eget deoc'hu e c'halfen
her c'hinnig? C'hui eo ar guella harp
evit ar Brezounek en hon touez ha bis-
koas mignon karantezussoc'h n'euz bet
evit sent Breiz.

Morvan eo bet Lez-Breiz,
Ha Morvan eo bepred
Lez ar Brezounek hag ar Feiz
Etoues ar Vretouned.

BUEZ

MILLIAU HA MËLAR

SENT HA ROUEET A VREIZ

DOR AL LEOR

Pep parrez a dle anaout buez he zant Pa-
tron ; dreist oll pa ve ganet er vro. Eur zant
Patron a zo hor skuer vad var an douar,
hon difennour en envou.

Ha gousgoude ec'h erru avisiou ma na ve
ket anaveet kals ar zant a zalc'h ar renk
huela en ilis parrez. Guelet a rear bep sul
he skeuden var an auter pe e leac'h all ; ha
ma ve goulennet digant lod so : « Piou eo
ho sant Patron, petra en deus gret, e peleac'h
en deus bevët, e peleac'h eo besiet ? » meur
a hini a renkfe lavaret : n'ouzon ket.

Eun dra gaer e ve eta kaout e pep parrez, da lakaat etre daouarn ar re a oar lenn, eur memor, eur scrid berr eus buez ar zant Patron. En doare-ze ar zent a ve kals muioc'h anaveet, ha dre-ze ive muioc'h karet hag henoret. Gant Buez sent Breiz e teskfemp ive buez hor bro; ar pezh ne ve tam a re. Rak an niver brassa eus ar zent henoret e Breiz evel Patrounet, a zo ganet pe ho deus bevet gant hon tud koz.

Pa e devez eur vro benak eun histor, eur vuez ken henorus, ken didammal hag hini Breiz, he oll bugale a dleffe anaout anezhi evel dindan evor, da vihana ar pep brassa. Histor ho pro, va c'henvrois, a zo steuet a zaou dra : a vaillant hag a zantelez, a lealdet hag a feiz.

Pa lenner anezhi, ne heller ket miret da garet muioc'h hor Mam-Bro. An dud a vrezel a zalc'he ennhi ar frankis hag al lealdet; ar zent a zalc'he ennhi ar feiz gant

he diou c'hoar : Esperans ha karantez Doue.

Oh! ia zur, m'ho deus leac'h ar vugale da denna fouge eus brud kaer ho zud, Breizis a c'hell sevel huel ho fenn. Hon tud koz ho devoa skrivet var ho baniel : « *Potius mori quàm fœdari*, kentoc'h ar maro eget fal-loni », ha dalc'het ho deus mad d'ho ger.

Tud a vrezel, tud a bluen, hor bro e deus a bep seurt tud brudet da lakaat e renk gant re ar broiou all. An dud santel ive a zo bet ato niverus er vro hanvet *Bro ar Zent*. Hirio staget ous Frans, Breiz ne ra ket a zizhenor dezhi. Rak he bugale gant guirionez a hell lavaret ato : ni zo bepret Bretouned, Bretouned tud kaled; ni zo bepred Bretouned, Bretouned tud a feiz.

Meulet ra vezo Doue, Breizis va c'henvreudeur, da veza miret evidomp eul loden eus ar scridou koz a verk deomp amzeriou hon tadou. Eno, evel en eur mellezour, e

velomp petra int bet ha petra e tleomp beza,
ma fell deomp bale var ho roudou.

Ar zonch d'ober deoc'h karet muioc'h Doue
hag ho pro en deus gret dinn scriva Buez
Milliau ha Mœlar, daou zant ha daoue roue
gant e Breiz. Heb anaoudegez, karantez
ebet. Paet e vezin dreist muzur evit va foan,
ma teu al leorik bihan-man da startaat
ac'hanoc'h en ho feiz ha da greski en ho
touez ar garantez evit sent hor bro. Ne
m'eus ket kredet lezel a gostez buez sant
Mœlar. Ne hellen ket hen ober. Buez eur
c'hraouadur eo buez he dad kendalc'het. An
eil a rent henor d'egile. Santelez ar bugel
iaouank Mœlar a zo an testeni kaera eus ar
gelennadurez vad roet dezhan gant he gerent.

Ouspen-ze essoc'h e oa scriva buez sant
Vœlar eget hini sant Villiau. Kals eo hir-
roc'h he vuez er scridou koz. Evit buez sant
Villiau, avad, e m'eus renket ober kals
muioc'h a enklask ha c'hoas ne m'eus ket

kavet kement a glasken. Petra zo kaos ma
z'eo kals berroc'h er scridou buez sant Vil-
liau eget hini he vab? Martezé an dra-man :
Sant Vœlar a varvas iaouankik hag en devoa
gousgoude kals muioc'h da c'houzanv eget
he dad. Ho daou e varvont merzeriet dre ar
memez dorn ; sant Villiau merzeriet en eun
taol-kont, sant Mœlar merzeriet dre hir
amzer. He gorf a zo dispenet a nebeudou
hag ez-veo, he vuez so estlammusoc'h, he
oad tenerroc'h. He iaouankis hag he valheu-
riou ken truezus o deus lakeat, me zonch,
ar skrivaneurien eus ho amzer da boueza
muioc'h var buez Mœlar. Muioc'h a druez a
ve ato ous eur c'hraouadur, dreist oll pa
veler eur muntre o redek eus an eil kear
d'eben varlerc'h eur bugel seis vloas. Cetu,
a gav din-me, ar pezh en deus gret d'ar
barzet sôn muioc'h gant an delen en henor
da sant Vœlar. Lavaret a heller ive gant
guirionez ez eus bet collet, gant an amzer,

kals a scridou en henor sant Villiau. Mes,
dre c'hras Doue, aoualc'h so chomet evit
diskuez deomp ez eo bet eur roue truga-
rezus evit he sujidi, eur mab karantezus evit
Doue hag an Ilis.

KENTA LEOR

KENTA PENNAD

Arok lakaat dirak ho taoulagad buez Mil-
liau ha Moelar, ne gavan ket dizoare, va c'hen-
vrois, rei eun tol lagad a dro var histor
Breiz ha diskuez deoc'h e berr gomzou petra
eo bet hor Bro adalek he c'henta amzeriou
beteg vrema.

Guelloc'h a ze e komprenoc'h ar pezh a
livirin goude. Pa zibuner eur guden, e ren-
ker da genta klask ar penn. Pa ve an daou
benn eus ar guden en dorn, nemet essoc'h a
ze e ve hen dirouestla.

Ar iez a gomzomp a zo unan eus ar re
gossa zo er bed. Ar vro-ma n'eo bet biskoas
nemet d'hon tadou. Euruz omp eta da vev

var an douar a zo bet ato labouret gant hon tud koz. Erruout a rejont da genta er c'huz-heol d'an Europ, ha goudeze e Breiz, eus an Azii, var dro c'huec'h kant vloas arok done-digez hor Zalver. Da genta e teujont a vandenou bihan. Pemp kant vloas goude, ar vro a hanver brema Frans pe Bro-C'hall a oa goloet gantho. Rei a reat dezho an hano a *Celtes* pe Gallaoued koz.

Lod anezho a dremenas ar mor evit mont da Vro-Zaos. Rak-se Bro-Zaos a oue karget da genta gant tud eus ar vro-ma. Ar brezounek eta n'eo ket deuet eus Bro-Zaos e Breiz. Ar c'hontrol eo a zo guir. Hon tud koz eo ho deus kasset di ar brezounek.

Ar brezounek, evel kement iez koz a zo, a deu eus an Azii, bro an dud kenta bet var an douar, ha dre-ze soursen ar iessou kossa. En Azii, ez eus eur Vro hanvet Galazi e leac'h ma eo bet komzet pell amzer ar brezounek.

Eul loden eus Bro-Zaos a goms ato ar brezounek, muioc'h pe nebeutoc'h e giz deomp-ni, hag ar vro-ze a zoug an hano a vro ar C'hallaouet. Hirio e c'halvomp Gallaouet ar Fransisien evit lakaat kem etre-hi ha ni, Bretouned pe Vreizis. An hano a Vretouned, eme an Tad Gregor a Rostren, a deu deomp eus a Vro-Zaos. Kals a dud eat di eus ar vro-ma a renkas tec'het eus Bro-Zaos arok ar Zaozon. En em veski a rejont gant hon tud koz. Ar memez iez a gomzent, ar memez kredennou ha kustumou a zalc'hent, hag evel ma teujont er vro-ma eus Bro-Zaos gant an hano a vretouned, an oll dud eus Breiz-Izel a gemmeras prest goude an hano-ze. Abaoue an hano a vretouned a zo bet dalc'het deomp abalamour a nebeudou ec'h en em gavchomp hon unan epken da goms ar brezounek. Mes ne ankounac'haomp ket ez eo hor c'henta hano : Gallaouet. Hano mad an oll dud a zo hirio e Frans hag er

meas a Vreiz eo Fransisien. Rak hinthi a zisken eus a eur bopl hanvet e gallek *Frans*.

A nebeudou, dre ma teuas ar Romanet hag ar Fransisien er vro, ar brezounek a goezas e Bro-C'hall hag e Bro-Zaos. Daou vegad douar epken a zalc'has mad d'ar brezounek : Breiz-Izel ha bro ar C'hallaouet e Breiz-Veur pe e Bro-Zaos. Ar gallek hag ar saosmek a gemmeras plas ar brezounek el leac'hiau all eus an diou vro-man.

Breiz-Izel ha Breiz-Veur n'int ket bet ato broiou kristen. Arok donedigez hor Zalver ha soken pell goude hon tud koz a oa ive paianet.

Ar mein-hir (menhirs) a veler c'hoas a za en hon douarou hag an taoliou-mean diazeet var blodou mean ive, a zo eun testeni guirion a gement-se. Var an taoliou-mean-ze, an Drouizet, fals-beleien hon tud koz, a lakea ar goad da redet. Skuilla a reant goad an anevalet hag ive, siouas ! goad an dud

keiz evit anaout an amzer da zont ha lakaat an doueou faos da vea a du gantho.

Var dro daou c'hant vloas goude donedigez hor Zalver, Doue a zigassas er vro-ma beleien catholik da skigna ennhi ar guir feiz. Ar re genta a oue sant Clair e bro an Naonet, an avieler Adeodat (roet gant Doue) e bro Guened, ha Drennalus, beleg, e Bro-Leon. Eus a Vro-Zaos, Drennalus a ziskennas e Konk-Leon, dizrei a reas ous Doue Montroulezis, en eur dremen, hag ac'hano ez eas d'ar Yeaudet e leac'h ma oue kenta eskop. An Tad Albert, ha var he lerc'h ar barz en deus gret *Guers ar Yeaudet*, a lavar e oa an den santel Drennalus diskib da Joseph d'Arimathi.

N'eus fors ; skigna a reas da vihana ar feiz er braz eus ar vro-ma hag abaoue Breizis ho deus dalc'het mad d'ho feiz. Fisians am eus e talc'hint ato mad dezhi ; fisians am eus e kavo Jesus er beg douar-

man feiz ha karantez pa zeui da varn ar bed.

Amzer ar Romanet e Breiz

Kant vloas arok donedigez hor Zalver, ar Romanet, gantho ar c'habiten braz Coesar, a deuas d'ober brezel d'ar C'hallaouet. Coesar a en em rentas mestr eus ar vro-oll a zougen hirio an hano a Frans. Epad pevar c'hant vloas, da lavaret eo beteg ar bloas pevar c'hant goude hor Zalver, ar Romanet a jomas mistri e Frans.

Mistri e oant e Frans, da vihana dre an hano, ma ne vijent ket ato e guirionez. Guelet a rear c'hoas an hentchou braz great gantho evit mont eus an eil kear d'eben. E Kerahez e oa ho c'hear vrassa e Breiz-Izel. Konta a rear beteg nao hent braz great gant ar Romanet da vont eus Kerahez d'ar c'heriou all gant ho zromplou. Daou anezho a iea eus Kerahez da Roazon, unan da Wened,

unan da Benmarc'h dre Gemper, unan all da veg ar Raz hag a oa paveet ive evel hini Penmarc'h. Unan all a iea eus Kerahez da Blougerne dre Huelgoat, Commana, Guimilliau, Lambaol, Landivisiau, Traonien-Kerne hag ar Folgoat. Etre Kerahez ha Landreger, Kerahez ha Lannion, e oa ive daou hent all. -

Pa labourer an douar, e plas ar c'haniou savet gantho aman hag haont, var bord ho hentchou braz peurvuia, e kaver a bep seurt ostilliou bet d'ar Romanet, boc'hili, tammou podou, pesiou arc'hant, skeudennou tud ha metalinier.

Var douar Guimilliau ha Lambaol, e kenver Goas-Ourle, ar Perennou ha Kreac'h ar Bleiz, e veler c'hoas pennadou mad eus hent ar Romanet da Blougerne. E kenver Traonien-Kerne, etre Guiniventer ha Sant-Derc'hen, ar Romanet a zalc'he eul legion (e brezounek l'Heon); hag ac'hano eo deuet d'ar vro etre

Brest ha Montroulez an hano a Leon, eme
kals a dud desket.

Ar Roueet hag an Duket e Breiz

Evit en em zizamma eus gouarnamant ar
Romanet, Breizis a c'houlennas sikour digant
ho breudeur eus Bro-Zaos.

Conan Meriadec a dreuzas ar mor gant eur
vanden vad a dud iaouank d'ober brezel d'ar
Romanet assamblez ganeomp.

Ar gounid a oue da Vreizis, ha Conan Me-
riadec raktal goude ar victor a oue hanvet
roue a Vreiz, e memor eus he ners-kalon.
He lignez a c'houarnas ar Vretouned epad
pell amzer, ha kement roue soken a zo bet
en hor bro a gave eun henor lavaret e tis-
kenne eus ar roue Conan, pe 'vije guir pe
ne vije ket.

Breiz-Izel a gendalc'has da gaout roueet
beteg maro ar roue Salomon trede, er bloa-
vez eis kant pevarzek ha triugent (874).

Sant Villiau a oue unan eus an diveza roueet
e Breiz. Var he lerc'h e klevet hano eus Mor-
van Lez-Breiz, Nomenoë ha Salomon trede.
Heritourien Salomon a zavas etrezho; oll
ho devoa c'hoant da vea roueet hag hini
anezho. ne lakaas ar gurunen var he benn.

Breiz adalek ar bloas nao c'hant dek (910)
beteg ma oue staget ous Frans a oue gouar-
net gant duket eus a ouen ar roueet koz
peurvuia. Alan, lezhanvet Re-Vraz, a oue an
duk kenta a c'houarnas Breiz dindan goard
roue ar Fransisien. An duk Fransez eilvet
a oue an diveza. He verc'h, an dukez Anna
(eur maner e devoa er Folgoat hag eun all
er Penc'hoat e Sant-Thegonnec), a zimezas
da roue ar Frans Charlez eisvet, hag en
doare-ze Breiz a deuas da veza evit mad eul
loden eus rouantelez Frans.

An dimezi etre Breiz hag ar Frans a oue
gret pa zimezas hon dukez karek d'ar roue
a Frans (1491). Breiz a viras evelato an

darnvuia eus he c'hustumou hag eus he lezennou beteg an dispac'h vraz a erruas er bloavez mil seis kant nao ha pevar ugent (1789). En amzer-ze, en eur glask kompeza pep tra, e oue roet d'an oll ar memez lezennou hag ive, siouas ! ar memez chadennou.

Hirio ne viromp netra eus heritach hon tud koz nemet ho feiz hag ho iez. Aoualc'h eo. Oh ! dalc'homp mad ato d'hor feiz ha d'ar brezounek ! Ar brezounek hag ar feiz a zo breur ha c'hoar e Breiz.

EIL PENNAD

—

Lignez ha laouankis sant Villiau

Sant Villiau a ziskenne var eün-tenn eus lignez roueet koz Breiz-Izel. Unan anezho, ar roue Ian, a renkas en em denna eus Bro-Zaos evit tec'het arok ar Frizonet a lake ar freuz er vro-ze goude bea gual-gastizet Breiz-Izel en amzer ar roue Clovis, roue a Frans. Goude maro Clovis, ar roue Ian, da genta kont a Gerne, a zilammas Breiz-Izel a bez eus tre daouarn bugale roue Frans. Gouarn a reas gant kement a urs hag a skiant ma oue roet dezhan an hano : *Reith*, da lavaret eo, lezen vad. An hano-ze a verk mad aoualc'h an eurstet a roas d'he sujidi goude bea torret ar chadennou a stage anezho ous Frans. He vab, ar roue Daniel, a renas var he lerc'h. N'en deus lezet nemet brud vad en

histor Breiz. Eur seurt ouen ne helle rei nemet tud a gourach hag a lealdet.

Mab ar roue Daniel, Budik-Meur, a zou-gas gant henor he renk hag he hano. An hano Budik-Meur roet dezhan gant ar bopl a ziskues deomp en deus gret meur a daol kaer ha kresket he rouantelez. Ar bopliou ne roont morse hanoiou dispar d'ho mistri nemet gouneet mad ho deffe anezho. Budik-Meur, tad da sant Villiau, a oa eur c'hristen mad hag eur roue a galon. Lenn a reomp ar c'homzou-man a ra henor dezhan en eur breviell a eskopti Kemper, skrivet var dro ar bloas pemzek kant (1500). *Fuit quidam christianissimus Rex apud Britonos, nomine Budic.* Bet so, en amzer goz, etoues ar Vretouned, eur roue leun a relijion, he hano Budic. Ar bopl a hanve anezhan Budik-Meur, da lavaret eo, roue braz; an Ilis a hanve anezhan roue kristen, leun a relijion. Ne helle ket reseo guelloc'h testeni.

Budik, kristen mad, troet oll-gant ar relijion, ne helle ket miret da gemmeret eur pried a zoujans Doue. Lavaret a hellomp eta gant guirionez e oue savet sant Villiau gant daou bried a urs vad, gant daou zen a relijion. Loden Budik, e deskadurez he vugale, a oa ober anezho soudardet mad, bugale da garet ho bro hag he frankis. Dirak kement a daoliou kaer gret gant he dad, Milliau a garie bemdez muioc'h mui he vro; he nerskalon a greske bemdez gant an ioul da renta servich d'he genvrois. He galon iaouank a dlle tridal pa gleve hano eus ginou he dad pe abers he soudardet eus ar burzudou er vrezel great gant he dud. D'ar mare ma veve sant Villiau, ar vugale a reseve abred eur chleze e giz c'hoariell. Eun den ne vije ket din d'en em gaout e penn ar Vretouned ma ne ouije ket mania divlam an armou. Aliez soken e c'hoarvee ma kemmere Breizis evit roue ar c'haloneka en ho zouez. Evitho, an oberou

kaer a dalveze lignez huel. Morvan Lez Breiz ha Nomenoë a erruas en doare-ze da vea mistri e Breiz. Ar c'hendalc'h eus buez sant Villiau a ziskuezo deomp ne grene ket ar c'hleze en he zorn.

Karg ar rouanez, pried Budik, a oa ober eus he bugale kristenien vad. Ne m'eus izom ebet da lavaret deoc'h gant pegement a zoursi e reas he dever. Sant Villiau a oue goudeze eun testeni buezek eus ar soursi kemmeret da zevel anezhan e doujans Doue. Abred he galon a oue troet varzu an env, abred he vuzellou a zigoras d'ar beden hag he zaouarn d'an aluzen. En he galon iaouank he vam a adas an had eus an oll vertusioù, ha kreski a rejont buhan en eun douar ken deread, en eun ene glepiet bemdez gant ar gliz eus bennosioù ar baradoz.

Sevel eur c'hraouadur, eme eun den guesiek eus ar c'hantvet-man, an Autrou Guizot, eo rei dezhan eur c'horf iac'h, eur spered

eun hag eun ene vertuzus. Ar roue Budik a roas d'he vugale eur c'horf iac'h en eur ober anezho soudardet kaled, eur spered eun en eur zeski dezho penos gouarn var he lerc'h. Ar rouanez, ho mam, a reas he galoud evit rei dezho eun ene vertuzus. Pellaat a rea dioutho pep skuer fall ha derc'hel a rea dirak ho daoulagad lezen an Autrou Doue. Salo e raffe an oll mammou evelthi !

Sevel eur c'hraouadur, evel a lavar ar ger, eo sevel huel he spered hag he galon. Savit huel spered ho pugale en eur ziskuez dezho an envou, savit huel ho c'halonou en eur lakaat ennhou karantez an Autrou Doue. Karantez ar bed a ziskar ar galon pa na deu ket d'hen ruilla beteg er fank.

Siouas ! an oll vugale, goude kaout ar memez skol, ne jomont ket henvel. Ar Roue Budik en devoa daou vab dizhienvel braz an eil eus egile, evel a lavar *Gwers koz sant Villiau* :

Budik en devoa daou vugel,
Mes en ho buez dizhenvel ;
Milliau devot, leun a furnez,
Rivod difeiz ha didruez.

Milliau ha Rivod a reseve digant ho c'herent ar memez kenteliou fur. En dro dezho ar memez skueriou mad. Ma oant henvel en ho bugaleach, pebes kemm etrezho divizatoc'h. Ar scridou kavet gant an Tad du Paz divar-ben sant Volar a lavar ar memes tra. « *Huic viro Budic duo exititère filii, Meliavus videlicet et Rivodius. Sed Meliavus fuit animo mansuetissimus, fide catholicus, spe in Domino certus, omni que probitate morum conspicuus. Rivodius autem bonis omnibus execrandus.* » Budik en devoa daou vab, Milliau ha Rivod. Milliau a oa eur bugel a humor vad, krenv en he feiz, leun a fisians e Doue ha skuer vad an oll. Rivod a oa din a zisprich abers pep den honest.

Rivod a gemmeras abred hent ar fallagriez

hag a gendalc'has ennhan. Milliau a zigoras abred he galon d'ar vertus hag hen miras ato evithi. Naturiou fall a dud a zo evel ma zo ive naturiou fall a zouar. Rivod a oa unan eus ar re-ze. Mes goude tout, ar gerent ne hellont ober nemet ho dever, hag ho dever ho deus gret p'ho deus roet d'ho bugale skuer vad ha kelennadurez vad.

Milliau, er c'hontrol, a oa eun natur vad a graouadur, karantezus e kenver Doue, senthus ous he gerent, truezus ous ar paour. Kement-se troet gant ar relijion, bezit sur e valeo buhan en hent eus ar santelez. Eun testeni eus santelez he iaouankis a gavan en tolennoù koat scultret a verk he vuez hed-a-hed en ilis Guimilliau. Var an dolen huella, a gleiz, e kenver he skeuden hag a zioc'h he aoter, e veler sant Villiau c'hoas iaouank oc'h ober he beden vintin da Zoue. An Tad Eternel, azezet var eur goabren, guisket e ruz ha var he benn eur gurunen, a en em

ziskuez da sant Villiau epad he beden. Petra sinifi ar guiskamant ruz-se hag ar gurunen ? Lavaret a reont da sant Villiau e vo kurunet merzer en envou goude bea bet kurunet roue var an douar. Diskuez a reont dezhan an hent diez en devezo da ober. Mes sant Villiau, evel sant Paul, a zeblant lavaret da Zoue : « *Sufficit mihi gratia tua.* » Gant ho kras, o va Doue, gant ho krasou skuillet varnhon dre ar beden, e teuin a benn da bignat beteg va c'halvar. Evelse ar beden a gennerze dija iaouankis Milliau, sklerijenna a rea he spered ha diouall he galon. Dre ar beden hag an œuvrou mad, ec'h en em brepare da veza roue ; hag e guirionez ar guella doare da c'houzout gouarn mad ar re all eo deski en em c'houarn an unan.

TREDE PENNAD

Gouarnamant ar roue Milliau

Goude maro ar roue Budik, sant Villiau, ar c'hossa eus he vugale, a zavas var an tron, var dro ar bloas seis kant pemp ha pevar ugent (785)-ervez an Tad Morice hag an autrou Gallet. Sant Villiau a renas Breiz epad seis vloas assamblez gant he genderv Argant, eme ar breviel. « *Meliavus, avitum regnum cum Argantio sobrino suo divisum habens, inferiorem Armoricam aliquot annis cum sanctitatis laude gubernavit.* » Milliau, lodennet ganthan rouantelez he dad koz Daniel, etre hen hag he genderv Argant, a c'houarnas Breiz-Izel gant furnez ha santelez epad seis vloas.

Argant a oa mab da Constantin, antereur da Vudik-Meur, ha dre-ze Milliau hag

Argant a ioa kendirvi. Diez e ve lavaret d'ar just beteg peleac'h e tape loden sant Villiau. Ar pezh so sur eo Kerne a bez a oa dezhan, dre heritach. Argant a rene e bro Guened ha var eul loden eus Costéz-an-Nord. Dre he zimezi gant ar brinsez Aurelia, merc'h d'ar c'hont Judocus, sant Villiau a gemmeras ive guir var bro Leon ha Treger. « *Et accepit Meliavus uxorem, nomine Aurillam, de patriâ quæ vocatur Domnoneâ, filiam Jidoci comitis egregii, ex quâ primo regni sui anno Beatum Melorium suscepit.* » Evelse e teuas da vea guir komzou ar breviel hirio, « *inferiorem Armoricam gubernavit* » : rên a reas Milliau var Breiz-Izel. Ar zonch eus an daou roue-man a jomo ato e Breiz ; rak evit derc'hel ar memor anezho, Breizis ho deus roet da veur a ger ha da veur a vaner an hanoioù a Kervilliau ha Kerargant en tri eskopti Breiz.

Ne hellan ket lavaret pegen eurus e oue

ar bopl dindan gouarnamant sant Villiau. Ar scritur a goms eus seis bloavezh pinvidigez vraz evit an Egypt arok ar seis bloavezh kernez. Breiz-Izel e devoa ive seis bloavezh a binvidigez hag a eurstet arok bloavesiou ar gernez. Eur brud ken kaer a lezas eus he c'houarnamant ma z'eo skrivet ar c'homzouman anezhan : « Beva dindan Milliau a oa evel beva er baradoz an douar. » Ar meuleudi-ze dreist muzur, m'ar kirit, a ziskuez da vihana e oa karet gant an oll ar roue Milliau. An taillou a izellea muia ma c'helle. Renta a rea justis d'an oll, paour ha pinvidik. Pep den a renke plega d'al lezen hag al lezen a oa ato ervez hini Doue dindan eur roue ken fur, ker santel ha ker kalonek. Furnez da ober lezennoù mad, santelez da rei skuer vad d'he bopl ha da dud he balez, ners-kalon da enebi ous an dud fall, da greski vertusioù he bopl, da ziskrisienna ar visou, cetu e tri c'her petra oue sant Villiau.

Iaouank e teskas karet he genvrois a vije divezatoc'h he sujidi. Koms a rea ar memez iez gantho; hag eurus ar bopl a hell kaout eur roue eus a ligned he roueet koz. Neuze koms ar roue a ve guelloc'h selaouet ha miret. Sant Villiau a gomze eta evel dhomp ar brezounek; neket eur roue Gall e oa. En he voazied e rede goad brudet he dud koz, goad Breiz en eur ger. Ar goad-se ne oar ket tec'het er stourmad. Lavaret a ra ato : « *Potius mori quàm fœdari.* » Kentoc'h mervel eget sklabeza an hano.

N'eus ket pell, ar goad-se a Vreiz, a ziskueze adarre he nerz. Var tachennou ar brezel diveza, ar Vretouned ho deus diskuezet ne oa ket c'hoas pouloudennet ho goad. Evit Doue hag evit ar vro, eo prest ato da redet. Plenennou an Itali a zo bet ive rusiet gant ar goad-se evit difenn an Ilis. Piou en deus ankounac'heat hanoiou ar zouaffet de Parcevaux eus a Gleder, du Beau-

diez eus a Gastel, Quere eus a Blouvorn, etc. Mes dizroomp buhan da sant Villiau goude bea saludet an dud kalonek eus hon amzer.

Diou garantez hag a deu an eil eus eben ho devoa gret grisiou dôn e kalon sant Villiau : karantez an Ilis ha karantez ar bopl. Eun den hag a garo mad he Zoue, a garo ive stard he nessa. Evelse ive, eur roue hag a vev e doujans Doue, gant karantez evit an Ilis, ne hello ket miret da garet he bopl. Ar relijion a, ziskuez dezhan breudeur e pep hini eus he sujidi, beteg er paour an disterra Mar deo huelloc'h ha galloudussoc'h eget ar re all, e oar manifik e talc'h plas Doue e kenver breudeur, ez eo kulator eur bopl evit Doue. Ene Milliau a oa da Zoue, he galon d'he bopl. Doue hag ar vro, cetu ar goms a oa ar reolien eus he vuez evel ma verk he oberou. Piou a lavaro pegement a ilizou zo bet sikouret ha guisket ganthan epad seis vloas? Piou lavaro ar skoliou kristen en

deus savet evit gloar Doue ha silvidigez he
bopl, an douarou roet d'ar menec'h da zi-
founta evit maga ar paour ha skolia evit
netra he vugale.

Karet an Ilis eo karet ive ar re zo dreist
oll karet ganthi, evel he ministret, ar beorien
hag ar vinoret.

Sant Villiau a lakea dougen respet da vi-
nistret an Ilis. He unan e roe ar skuer vad
var gement-se d'ar brinset, d'ar bopl ha d'he
servicheurien. N'eus douetans ebet na vije
eur beva dizroullans etre an n'Autrou'n Es-
kop a Gemper hag hen. He zor a vije ato
digor d'ar paour, ha var eun dolen koat en
ilis Guimilliau, e veler sant Villiau oc'h ober
aluzen gant eun ear joaius. He vab sant
Voelar a zo en he genver ha deski a ra dezhan
bea trugarezus evit ar paour. Ar vinoret a
ve aliez drebet ho feadra gant ar gulatoret
roet dezho. Sant Villiau a dole pled var
gement-man hag a rente he unan ar justis

aliez, evel a reas divezatoc'h var he lerc'h
sant Louiz, navet roue a Frans. Dirak ar
barner-ze ken leal, an dud fall a oa sur da
vea kondaonet, an den divlam ken sur all
da vea digollet, ha dre-ze pep hini a en em
zalc'he en he renk hag en he wir, dre gous-
tians pe dre aon.

Ar vertus a velet dreist ar re all o lugerni
e buez Milliau, a oa he zouder pe he basian-
tet. Reseo mad a rea d'an oll gant eur vizach
ato laouen. *Guerz koz sant Voelar* a ra eus
sant Villiau ar brassa meuleudi a helfet da
ober. Lavaret a ra anezhan henvel ous an
den just Abel, ha Rivod henvel ous ar c'hri-
minal Cain.

Milliau, tad d'hor prins Mælar,
En devoa eur breur ken digar !
He hano zo Rivodus,
Eun eil Cain malheurus.

Kont Rivodus, te zo treitour,
Ne dout sur nemet eul laïour ;

Biskoas n'en deus da vreur Milliau
Gret ouzit e nep façon gaou.

Da vreur a oa karet gant Doue,
Abel guechal a oa ive ;
Caïn hen laz gant droug ounthan,
Te ra ive ar memes tra.

Rak-se-ta an Ilis, dre vouez he ministret,
a lavar e oa Milliau dous dreist an oll, leun
a feiz hag a fisians e Doue ; ar bopl, dre
vouez ar barzet, he gannadet evit meuli pe
tammal, a lavar e oue Milliau karet gant
Doue evel guechal Abel. Abel, her gouzout a
rit, a roe da Zoue ar previdiou, ar pep guella
eus he zanvez ; hag a volontez vad ho roe.
Caïn a falvezas dezhan ober ar memez tra ;
mes ne roe ket a volontez vad. Rei a rea
gant eun dorn ha dere'hel gant an dorn all.
Evit ober evel he vreur Abel, ha netra ken,
eo e roe da Zoue ar previdiou eus frouez an
douar. An dud fallakr ho deus aliez c'hoant
da dremen evit tud fur, ken braz eo kaerder

ar vertus. Ober a reint a ziaveas, en despet
d'ho bolontez fall, ar pezh a ra-an dud vad.
An diaoul he unan, evel eur marmouz, a ra
avisiou an ardou-ze. Ar c'hem a oa eta etre
Milliau ha Rivod a oa ar memez hini a ioa
etre Caïn hag Abel. E buez Milliau scultret
en he Ilis, Rivod a ra ive aluzen d'ar paour
assamblez ganthan. Milliau a ro founnus : ne
oar ket he zorn kleis pegement a ro he zorn
deo. Laouen eo eno ; guelet mad a rer e
plich dezhan ober aluzen ha ne skuisfe ket
oc'h ober al labour-ze. Ar bugelik Moelar a
red ive gant joa da gass d'ar paour eun tam
bara guenn ha rontik. Rivod a zo disseblant
dirak ar paour. An ear en deus da lavaret
evel Judas : « *Ut quid perditio hæc ?* » da
betra rei kement-se ? Eun nebeut a ve aoualc'h !

Oh ! Judas ! oh ! Caïn ! da zellou a zo kriz
ha klask a reont muzula naon ar paour !
Malheur did !

Eun henveledigez all a gavan c'hoas etre

Milliau hag Abel. Ho daou e oant dous a galon, ho daou karet gant Doue, ho daou heb difsians eus ho breudeur kriminal hag ho daou ive *laboureurien douar*.

Sant Villiau ne oa ket eur roue eus ar re vrassa p'eo guir n'en devoa da c'houarn, da hirra tout, nemet Kerne, Leon hag eul loden eus Treger. Goude bea gret he zever e kenver he sujidi, e kave c'hoas amzer d'en em rei d'al labour douar. Hag hen en deus morse lakeat he zorn er bál pe er fals ? n'ouzon ket. Kement-se a helfe bea guir buhan aoualc'h ; rak d'ar c'houls-se ar roueet ne zougent ket bemdez a vanegou. Ar c'hleze a oa ker skanv d'ho douarn hag ar bluen, ha kouls e labourerent gant an eil hag egile. Guelet a rer sant Villiau, en ilis Guimilliau, o vont da rei he ursiou d'he servicheurien d'ar park. An eost a zo gantho hag ar guiniz a goez a strolladou. Sant Villiau a erru hag a ziskuez dezho petra da ober. Me gred e man o lavaret bea

kempenn var an eost evel ma tleer beza var gement-tra roet deomp gant Doue. Eur servicher a zao he gein da selaou he gomzou ; unan all a sko ato en dra c'hell, heb sonjal e ra eun tam sklabez gant he ed. An dousder, aman evel e peb leac'h, a lugern var bizach sant Villiau. Anad eo n'eo ket rust he c'her. He viskamant roue a zo ganthan ; ne vank nemet ar gurunen. Peger kaer n'eo ket guelet eur roue o vont dre he zouarou, evel guechal an den pinvidik Booz, da velet he servicheurien, da gemmeret pers en ho foan hag en ho joa !

Pep mestr a di a dleffe ober evel sant Villiau. An urs vad a zo kazi ato e c'heuil lagad ar mestr. Lezel ar servicheurien ho unan var ho labouriou, heb kemmeret pers nag en ho foan nag en ho joaiou, a zo eur pleg fall evit ar vistri. Pa ne heuil ket ar mestr he servicheurien, pa ne laka ket an dorn el labour assamblez gantho, ar ienien a zao

buhan etre mestr ha servicher, hag ar fe-
neantis a gustum digeri he dor.

D'ar mare ma rene sant Villiau e Breiz, e
oa c'hoas kals douarou vag, kals douarou
heb perc'hen. Labourat eun tam douar fall
a oa prena anezhan. Ar menec'h a reseve
digant ar roueet tachennou mad a zouar dis-
ter; a zave eno eur gouent hag a zifounte an
douarou tro var dro. Hi eo ho deus da genta
diskuezet d'an dud divar ar meaz penos e
tlient labourat an douar. Douarou pep abbati
a ioa, evit an oll amezeien, eun tiegez a skuer
e leac'h ma velet douarou ha labouriou kom-
pezet mad. N'eus netra a nevez dindan an
heol, eme ar Skritur Santel. Sant Villiau
neket bet he unan, eloues ar roueet, o terc'hel
douar. Labour an douar n'en deus gret morse
a zizhenor da zen ebet. Daoust hag an daou
zen kenta ne oant ket daou labourer douar?
Daoust hag hor Zalver he unan n'en deus ket
sikouret sant Joseph d'ober an eler evit trei

ar c'hlasvez? Evelse-ta sant Villiau, en eur
zerc'hel douar, a roe skuer vad d'he bopl e
pep doare. Bez ez oa eur mestr kristen ha
karet en he diegez, evel ma oa eur roue
kristen ha doujet en he balez.

PEVARE PENNAD

Ners-kalon sant Villiau

Pepin, roue e Frans, lezhanvet ar Berr digarez ma oa bihan, en devoa gret brezel da Vreizis en amzer ar roue Daniel. Gounid a reas varnezho, hag e lakaas taillou var eul loden eus Breiz ha tud da zestum anezho. Pa deuas sant Villiau da vea roue e Breiz, ar roue braz Charlemagn a rene ar Frans. Abaoue ar victor gouneeet gant Pepin, Breiz oll nemet Kerne, a renke kass bep bloas eun toullad arc'hant d'ar Fransisien. Ar vretouned a gave dezho, m'oar vad, e kemmere re potret an taillou divar ho c'houst. Revus a rejont paea. Kement-man a erruas er bloavez kenta ma savas sant Villiau var an trôn (785). Ato eo bet ar c'hiz-man : seulvui a

root, seulvui e vo goulennet diganeoc'h. Ato eo bet ive ar c'hiz, muioc'h pe nebeutoc'h, d'ar roueeet galloudussa d'ober al lezen d'ar re vihan. Bismark neket bet ar c'henta oc'h ober ar vicher-ze nag an Napoleon koz ken nebeut. Ar re oa karget da douch ar guirioù kustum evit Charlemagn, a c'houlenne evit doare muioc'h-mui bep bloas. Kaer zo bea mad, dous ha patiant, dont a rer evelato da skuiza. Sant Villiau a garie ar peoc'h kals muioc'h eget ar brezel, mes ar bopl ne felle ket dezhan mui paea d'ar Frans. Unan a zaou a renket da ober ; paea gant arc'hant pe baea gant ar c'hleze. Oc'hpenneze, na kaera tro a ioa ive da revus ar guirioù kustum !

Charlemagn, d'ar mare-ze (784), a rea brezel d'ar Saxonet e tu an anter-noz d'ar Frans. Breizis a zonjas en devoa ar roue braz aoualc'h da ober en tu-ze. Den na deuo, er bla-man, emezho, d'ober brezel

deomp. Ar c'houls so deuet eta da revus an taillou. En em drompla a reant : Charlemagn, goude bea deuet a benn eus ar Saxonet, o klevout e revuze Breizis an taillou, a zigassas ar general Andulph var ho c'horf gant eun arme vad.

Ar Vretouned, gantho er penn araok ho daou roue Milliau hag Argant, a valeas eneb dezho. Sonjal aoualc'h a dlient e renkchent en em renta a benn fin an abaden. Ar Frans a oa ouspen dek guech brassoc'h eget Breiz, hag he zoudardet desket mad a oa lore'h enno c'hoas da vea gouneet ar victor e pep leac'h. Mes allas ! pa ve hiskinet re an den, ne zell ket ato e pe leac'h lemmel. Neket ar gourach a vanke d'ar Vretouned. Oh ! nan, no flijadur, er c'hontrol, a oa brezellekaat d'ar mare-ze. En dro-ma, ouspen-ze, ho devoa ar guir a du gantho ; mes an niver anezho a oa bihan ; unan ous daou da hirra, penos harpa ?

An diou arme a en em gavas e kostez Guened. Andulph, ganthan muioc'h a zoudardet desket guelloc'h, a c'hounezas ar victor. Kals Bretouned a oue paket prizounierien hag en ho zouez ar roue Argant, eme an histor. Cetu Breizis kondaonet adarre da bea an taillou. Eul loden eus ar brizouneurien a oue kasset beteg Charlemagn ha derc'hel a reas anezho ken a oue paet an taillou evel diagent. Konta a rear soken e choumas goudeze ar roue Argant, en arme Charlemagn. An autrou Gallet a lavar e varvas e stourmad Roncevaux e kenver ar Spagn. Kement-man neket re sur.

Goude ar victor gouneet gant Andulph, en hano Charlemagn, e oue digasset da c'houarn Bro-Guened ar c'hont gall Flodoald. Ar goard eus an douarou hag ar c'heriou all etre Breiz hag ar Frans a oue roet d'ar c'hont Guyon. Breizis, varlerc'h al lam tapet digant ar Fransisien, a zalc'has evel kent ho roueel.

Ar memez bro a jomas dindan lezen sant Villiau. Charlemagn ne felle dezhan nemet reseo an taillou merket hag anzavet a bell zo. Beza e oa eun impalaër mad, leun a feiz. Ma kave da Vreizis e oa re vraz an taillou a renket da zevel bep bloas, neket hen eo a oa ar penn-kaoz a ze. Mes an dud lakeat gant roueet ar Frans da zestum an arc'hant-se a c'houlenne muioc'h eget nebeutoc'h evit gelout loja eul loden vad en ho chacot o unan. Ouspen-ze, Breizis a zalc'he kement da vea libr, distag eus pep bro, m'ho divije gret brezel kentoc'h eget paea pell amzer d'an estrenn talvoudegez eur c'hochad spilliou. Neket ar pezh a renket da baea a zispilje c'hoas ar muia dezho, mes ar vez da renkout paea d'an estrenn a lake anezho da gounari. Cetu perak meur a veach e savent ho fenn hag e revuzent seac'h kass he C'houel-Mikeal da roue ar Frans. Ar vrezel ne rea tam aon ebet dezho. Goude eur stavad e

vijent prest adarre d'en em ganna. Kerkent a ma vije klevet o voudal korn boud ar galv e Menez-Arhez hag er Menesiou-Du, kerkent pep den en oad a leze he labour evit respont da c'halv ar roue eneb ar C'hallaouet. Ne glaskent morse gouzout pegen niverus e vije ho enebourien; mes dao deus tu keit a ma pade ho zud. Evelse aliez, eleac'h gounid, e tapent divar ho fri hag e renket paea ar frejou. Evit guir, Breiz-Izel n'eo ket bet gouneet morse da vad gant ar Frans. Kerne dreist oll a zalc'has ato huel he baniel dirak an estrenn. Broiou Guened, Roazon hag an Naonet pe Vreiz-Huel a vije aliessoc'h dar-c'hoet gant ar C'hallaouet hag a renkas soubla da genta da roueet Frans. E Breiz-Izel, ne zantet ket nemeur e oa eur roue e Paris. Ar bopl ne anaveze peurvuia nemet ar roue a oa e Quemper.

Breiz eta, goude stourmad Guened, a viras he roue Milliau, he c'hustumou, he lezennou

hag he frankis evel diagent. Pa oue kasset
prizouneurien Breiz dirak Charlemagn, e oa
dastumet al loden vrassa eus he bopl en dro
dezhan evit ar c'honsaill braz a vije dalc'het
bep bloas. E miz mae peurvuia, eo e c'halve
Charlemagn d'he gaout an noblans, ar veleien,
hag ar bopl, an nep anezho a garie
dont. Eno ar roue a lavare ar pezh en devoa
gret er bloavezh tremenet, ar pezh en devoa
sonch da ober en amzer da zont. Ar veleien,
an noblans hag ar bopl a rea ho goulennou,
a lavare petra vije mad da ober, hag ar roue
a zalc'he kont eus oll goulennou he bopl. An
doare-ze d'en em glevet etre ar roue hag ar
bopl a dalie ive, m'oar vad, kouls pe velloc'h
eget ar c'his so brema da gas tud da Baris
d'ober ho fenn o unan.

Sant Villiau a rea evel ar roue Charle-
magn. P'an divije izom kuzul var eun affer
vraz benak, e c'halve en dro dezhan ar bopl,
an noblans hag ar veleien. Daou a oar ato

guelloc'h eget unan, ha seulvui a dud a vo-
lontez vad assamblez, seulvui a sclerijen.
Ma ne zastume ket bep bloas he bopl evel
roue ar Frans, pep den a helle, pa garie,
mont d'he gaout d'he balez e Quemper. e
leac'h ma tremene an darnvuia eus he amzer.
Guelet a reimp divezatoc'h en devoa ive eur
palez all e Plounevez-Forzay hag eur maner
e Lanmeur, Maner ar Veuzit. Mont a rea
eur vech an amzer eus an eil d'egile, evit
gellout en em renta kont guelloc'h eus ar
pezh a dremene en he rouantelez. Ne vije ket
ar goardou o viret ous al labourer pe ous ar
micherour paour da vont d'he gaout. Pep
hini a helle ober he glemmou, he c'houlennou
ous ar roue var eun ha dichipot. Ar roue
santel ho selaoue gant dousder, ho responte
e brezounek, a c'houlenne kelou digantho
eus ar parresiou tosta hag a rea pep tra evit
unani guir an oll ha tenna er meas pep droul-
lans. Goassa pezh a oa, an dud a renk huel

n'en em glevent ket ato aoualc'h etrezho a eneb an estrenn. An dispac'h, an trein a rea ar c'hont Guyon var harzou douar Breiz a dlije bea lakeat an oll brinzet d'en em unani eneb dezhan. Mes red eo ive konta gantar voarizi. Ar roue Milliau en devoa enebourien beteg en he balez ; he vrassa enebour a oa he dosta kar, he vreur Rivod. Rivod a oa inouet oc'h c'hedal he dro da zevel var an trôn. Kals a zonch dezho eo eun ebat bea roue pe impalaer. Ne velont nemet an tu alaouret eus ar vetalen, tu an henor, ar binvidigez hag ar blijadur. En tu all e man ar skuisder, an nec'hamant, an dic'hout aliez hag ato an danjer da goll ar vuez hag ar pez so goassoc'h da goll, an ene. N'eus fors, Rivod ne bade ket gant an ioul da lakaat ar gurunen var he benn. E leac'h eta sikour he vreur da renta eurus he genvrois, e laka malloz Doue da goeza varn'ho ha varnez'han en eur skuilla goad eur zant,

PEMPET PENNAD

Maro sant Villiau

Pa vezomp eurus ha pa rentomp hon nessa eurus en dro deomp, bezit sur e vo digor en ho kenver eul lagad avius benak. An dud jalous a rei ho gualc'h evit distruja hor bonheur hag hini ar re a rentomp eurus, evel pa deuffe an den avius da vea eurusoc'h dre valheur he nessa. Rivod a gave re eurus ar bopl, re eurus he vreur, re eurus an Ilis. Ar bopl a oa pinvidik a furnez hag a vadou. Ar gouliou gret gant stourmad Guened, gant ar vrezel malheurus-se goulennet gant ar bopl er bloavez kenta, a oa peurbare pell e oa. Ar feiz a greske bemdez muioc'h-mui he grisiou etouez an dud. Ar peoc'h a renas a c'houdevez. Ar peoc'h hag ar feiz : cetu ar

pez a ra eurstet eur bopl. Ar peoc'h a ro
pinvidigez an douar, ar feiz a zalc'h an ho-
nestis etoues an dud. Kement-se oll a rea
displijadur da Rivod. Ar gouli gret d'he
galon gant an avi a greske bemdez, a voade
aliez, dirak an oll respet a zouget d'he vreur :

An noblans oll hag ar brinset (eme *Guers Milliau*),
D'ho roue ker mad 'zouge respet ;
Karet e oa gant he oll bopl
Nemet gant an treitour Rivod.

Rivod a oa den avius,
Leun a ourgouill ha visius ;
Hag a re poan en he galon
Guelet sant Villiau var an trôn.

Ourgouill hag avi ! gant an daou glenved-
se er galon, ez ear pell. An ourgouill a rea
da Rivod disprijout an oll, an avi a boulze
anezhan da bignat var an tron, n'eus forz
dre be seurt hent. Eur ræzoun all en devoa
c'hoas d'en em zizober eus he vreur.

Milliau a oa vertuzus, Rivod en em roet

d'an oll dizursiou. Buez Milliau a gondaone
he vuez. Ne helle ket ober aoualc'h he vo-
lontez dirak ar skueriou mad a roe he vreur.
Pa ve tost deomp eun den vertuzus, an dud
fallakr a ve diezet. Ober a reint goab anez-
han dre bep seurt kaketerez ; ha gousgoude
santelez an den mad-se a viro outho d'en em
ruilla ken dôn er fank. Evit Rivod, ar me-
mez tra a errue. Ne oa ket eaz aoualc'h e
kenver ar sked eus santelez Milliau. An dud
fallakr ne garont ket ar sclerijen eus ar
vertus. Dalla a ra ho daoulagad hag evel a
lavar *Guers sant Villiau* :

Rivod a gassea he vreur santel
Evel Cain he vreur Abel,
Abalamour d'he vertusiu
A gondaone he zizursiou.

Ah ! cetu ni an dorn var ar glanven bre-
man. Guelet a reomp brema perak an Ilis e
deus roet da sant Villiau an hano a verzer.
Eun merzer a zo eun den lakeat d'ar maro

abalamour d'he feiz. Santelez Milliau ne leze mui Rivod da gouskad e peoc'h. Bep noz e tlie guele en uvre ar respet a ziskueze dezhan an oll. Pa vije e penn Rivod ober eun dro gam benak, e vije ato var aon da gaout var he hent lagad he vreur. Ne helle ket herzel pelloc'h gant eur seurt buez. Malheurus, dilezet ha disprijet e oa e kenver Milliau. Milliau a zo eta a re var an douar ; mervel a renko. Evit pignat var an trôn-ze, termen eus he oll ioulou fall, e renko skuilla goad eur breur ; n'eus fors : he galon zo krenv aoualc'h, pe evit lavaret guell, fallakr aoualc'h evit se. Chacha a rei var he gein droullans ar bopl a bez ; n'eus fors c'hoas : eur gurunen a dal ive droullans eur bopl. Dastum a rei var he benn kounnar Doue ha setansou spontussa an Ilis ; petra ra ze dezhan ? Rèn a renk er bed-man var an dud a goude ma ne renfe ket assamblez gantho er bed-all ! Laza a rei he vreur ; ar gurunen a

vo dezhan, mes eur gurunen. labeet gant ar goad ha dastumet var bord an ifern. Popl eurus a Vreiz, en em breparit da zougen kaon.

Er bloas seis kant daouzek ha pevar ugent (792), ar roue Milliau en devoa dastumet he bopl en dro dezhan e kear Quemper. Izom en devoa, evit doare, da glevet kuzul he bopl var eun affer vraz benak. Cetu aman varlerc'h komzou ar Bollandistet var maro sant Villiau : « *Instigante tandem maligno spiritu, septimo regni sui anno, dum concilium primum ad utilitatem patriæ providendam fuisset congregatum, in ipso consilio Rivodus veniens, Meliavum fratrem suum occidit, et pro eo regnare cepit.* » Rivod, trelatet he spered gant an diaoul, a lazas he vreur epad ar c'honsail braz savet ganthan evit mad ar vro, er seisvet bloavez eus he c'houarnamant.

Pebes hardizegez abers Rivod ! Laza he

vreur pa oa en dro dezhan he vignounet
vrassa. C'hoant en devoa, m'oar vad, da
spounta an oll gant eun taol ken trumm evit
gellout buhannoc'h bea anaveet evel roue.
Gousgoude ne gred ket laza anezhan dirak
an oll. Mont a ra d'ar palez pa ouias e oa
Milliau e unan, ha goulén a ra he vreur. Eur
c'hleze a zo kuzet dindan he vantel.

Milliau, dous evel eun oan ha laouen evel
kustum, a ziskenn raktal heb douetans ebet
eus ar pezh a zo o vont da c'hoarveout. Ne
vel ket ar gouñnar o lugerni e lagad Rivod,
ha ken humbl, ken laouen a tra, e c'houlén
diganthan petra zo a nevez. Va breur, eme
Rivod, eun affer eus ar re vrassa am eus da
lavaret deoc'h. Deomp en eun tu benak
a gostez evit ma c'hellimp en em entent
didrouz. N'en devoa ket kavet da genta ar
fallagriez-se. Caïn ive, arok laza he vreur
Abel, a lavaras dezhan mont ganthan a
gostez, mont da bourmen var ar measiou

« *camus deambulatum.* » Rivod a oue
c'hoas hardissoc'h eget Caïn : Caïn a oa
muntrer epken, Rivod a oue eur muntrer
sakrilach.

Pa glevas sant Villiau hano eus eun affer
vraz, he sonch kenta a oue mont d'an Ilis
pe kentoc'h d'ar chapel d'ober he beden. He
gustum a oa goulén da genta kuzul Doue en
afferiou diez. Mont a ra eta d'ar chapel ha
Rivod var he lerc'h. An autrou Deric, cha-
louni eus ilis Dol, eo a verk kement-man.

Deomp da bourmen var ar meas, eme Caïn
d'he vreur ; deomp da gozeal a gostez, eme
Rivod da sant Villiau. Pebes henvedigez
etre an daou zen fallakr ! Pebes henvedigi-
gez ive etre an daou oan divlam ha leun a
fisians, Abel ha Milliau. Ho daou, a volonte
vad, gant ar sonch d'ober plijadur, ez eont
laouen d'ar maro heb er gouzout : ho daou,
evel hor Zalver, e paeont evit pec'hejou ar re
all.

Erruet er chapel, dirak skeuden hor Zal-ver, dirak ar groas a bardon hag a varno, Rivod, heb lavaret grik eus he affer vraz, a denn he gleze. Sant Villiau a vel deustu ar maro azioc'h he benn. N'eus ket amzer da grial na da c'houlén sikour. Amzer en deus a veac'h da ginnig he ene da Zoue. Rivod en deus savet he gleze en ear ha gant eun taol nerzus e tistag he benn da eur zant, da eur roue, d'he vreur, d'eur merzer.

Treitour, dinatur Rivod, kemmer a rez brema an teac'h ! Chom-ta da zellet ous da labour, den fallakr ! Mes nan : ar gourach a p'eus bet da zibenna da vreur e leac'h santel, en eun taol-kont, evel eul laër. Chom-ta da zellet ous he c'hoad o redek ; krog-ta er gurunen-ze ; did eo, ha gounee e peuz anezhi. Satan en devoa roet dezhan an nerz, ar fallagriez da laza he vreur hag ar galon a vank dezhan eur vech gret he dorfet. Allas ! sikour Satan a zo pellaat diouthan ; echu eo

breman kevridi an diaoul ; ene Rivod a zo prenet ganthan. Satan a bella ha Doue a dosta. Penn Milliau distaget eus he c'houlzoug ne goez ket d'an douar. Sant Villiau a grog en he benn gant he zorn deo ; ar goad a ziruill divar he c'houlzoug hag eus he benn c'hoas buezek. Gant eun dorn nerzus hag harpet gant Doue e tiskuez he benn d'ar muntre Rivod. Oh ! mirakl ar spontussa ! ar penn-ze a deu da gozeal evel a reas divezatoc'h hini sant Voelar. Lavaret a ra da Rivod : cetu aze ho labour, va breur. He lagad am-zigor gant eun ear a zouder a lavar : ho pardoni a ran, Rivod.

Rivod ne vel mui netra, ne gleo mui netra. Spourounet oll hag egaret e lamm dreist an treujou. Mont a ra da gaout he vignonet en eur grial eo maro ar roue. An oll a zant en ear, dreist oll er guel eus Rivod, ez eus erruet eur malheur braz benak. Klask a rer e pep leac'h ar roue Milliau, ha digoezet er

chapel, ar servicheurien a vel eno, gant spont hag euz, eur c'horf dibennet hag eur c'hleze rusiet gant ar goad.

C'HUEC'HVET PENNAD

Kaon gret da sant Villiau

Cetu lazet ho roue karet da Vreizis. Ar c'helou, evel eul luc'heden, a red dre gear Kemper ha tro var dro, ha raktal an dristidigez, evel eur vantel a gaon, a zo stignet var ar gear a bez. An Ilis a skuill daelou, ar paour a ouel, an oll zo e kaon. N'eus nemet eur gomz o koeza eus muzellou pep hini : Oh ! va Doue, emezho, petra deuimp-ni da veza ? Milliau, eal-mad ar bopl, a zo maro, hag ar muntre Rivod a zo tost. An oll a zant a beleac'h e teu an torfet, ha den ne gred henvel Rivod a vouez huel. Rivod kriz ha

treitour a zo brema ar mestr ; hag an den n'eus fors pegen fallakr e ve, a gav tud ato d'en em drei ganthan nemet e vo pinvidik, galloudek ha brokus.

Goude kals a nec'hamant, e oue gret ar zonzh da sebelia ar c'horf er palez. Lod a lavare tec'het buhan ha tec'het pell eus fallagriez Rivod. Petra virfe outhan, emezho, da glask en em zizober ive eus ar brinsez hag he mab Moelar. Lod all a lavare ne gredche biken mont beteg eno. Ervez pep doare eta, korf sant Villiau a jomas eur pennad e Kemper, eun devez pe zaou da nebeuta.

Ar brinsez Aurilla zo beuzet en he daelou e kenver korf sant Villiau. Mantret ha sklaset evel eur mean marbr, ne vel den o tont da skuilla dour benniget var gorf ar zant. Ne glev ket ar c'hlemmou truezus, ar c'hriadennoù soken eus ar bopl e kaon. Ne oar nemet gouela ; ne deus ket a nerz da glemm goude eun taol ken trumm. He daelou ebken

a ra he feden ha redek a reont puill eus he daoulagad entanet.

Sant Villiau, he benn distag eus he c'houzoug, a zo c'hoas evel laouen ous he bopl. Morse he sujidi n'ho devoa hen gullet ken kaer a ma oa var he vele a gaon. He benn hag he c'houzoug dic'hoad a zo guenn evel an erc'h ha sklerijennet gant eur gened eus an env. Lavaret a rafac'h e kemmer truez ous he bopl, truez ous he bried hag ous he vugelik Moelar.

Moelar, bugelik seis vloaz, a zo ive er chapel-kaon. Gervel a ra he dad, hag he dad ne respont mui. Gervel a ra he vam, hag he vam a jom mantret. Diskuez a ra karantez d'an eil ha d'egile, hag hini anezho ne ra seblant anezhan. Klevet a ra gouela, klevet a ra krial en dro dezhan, hag ar bugel ive a en em daol da ouela. Eur servicher a laka anezhan d'an daoulin; a groas dezhan he zaouarn, ha neuze ar c'hraouadur paour

a deu da gompren n'en deus tad ebet mui var an douar.

Oh! c'hui oll a zo ho kalon duet gant ar voarizi, deuit brema da velet ar frouez eus ar c'hlenved a grign ho kalon. Deuit da velet eur roue madelezus dreist, lazet gant eur breur avius. Deuit da velet eur rouanez, deac'h c'hoas ken eurus ha ker laouen, hirio ker glac'haret ha da viken ampoezonet he buez. Deuit da velet eur prins iaouank, esperans eur bobl, hirio minoret hag e danjer he vuez e ti he dad.

Piou a helfe lavaret an oll dizursiou a laka an avi er bed-man? Ar goad kenta a redas eus goaziet eun den, a oue skuillet gant eun den avius. Caïn ne oa nemet avius, Abel ne oa nemet divlam evel sant Villiau. David a oa eur roue karet gant he bopl ha karet gant Doue. An avi a ziskenn en he galon; koll a ra he zinamdet, koeza a ra en eur pec'het bras dre avi, skuilla a ra goad unan

eus he vella servicheurien en arme. Ar patriarch Jacob en devoa daouzek kraouadur; ar furra anezho a oa Joseph. An avi a laka ive he vreudeur da verza Joseph. Ma klas-komp c'hoas huelloc'h, ma savomp hon daoulagad beteg ar C'halvar, piou a velomp eno? Hor Zalver crucifiet.

.Ha piou en deus crucifiet anezhan? Da genta, ar Scribet hag ar Pharizianet dre avi, dre jalouzi. Ar goad eo a veler peurvuia varlerc'h an avi. Diouallomp eta hor c'halonou eus eur louzaouen ker fall.

Ar bopl a glevas buhan ar c'helou man-trus eus maro ho roue. Eus an eil kear d'eben, ar brud a redas evel eul luc'heden. Pep den a ankounac'hea he joaiou hag he ankeniou evit sonjal ebken en torfet c'hoar-veet. Seis vloas eurusdet so echu evit ar bopl. An anken, ar glac'har, so merket var bizach an oll. Ha c'hoas an aon da vea tamallet, an aon da vea diskuillet da Rivot,

a ra da veur a valloz chom var ar muzel-lou.

Rouantelez Milliau ne oa ket euz ar re vrassa. Eaz e oue da gals eus he sujidi mont beteg ar C'hoz-Yeaudet da zeiz he enterramant (1). Ne falvezas ket d'ar brinsez Aurilla ha d'he mignonet lezel ar c'horf e Kemper en tu all da zaou pe dri dervez. Mall ho devoa da bellaat gant relegou ar zant eus leac'h an torfet hag eus douar an torfetour. Ar c'hont Commor eus a Lanneur, breur-kaer da sant Villiau, a bede ar brinsez ha kement hini hen heuilje da zont var he zouar, gant he zenzor, gant korf ar zant. Eno e vijent e savete hag e c'heljent e peoc'h ha d'ho giz ober al lidou kaon d'ar merzer. Cathedral ar Goz-Yeaudet a oue choazet evel

(1) Divezatoc'h e livirin eur gerik benak eus ar gear-goz-se a zo bet ker brudet e pep amzer. Aoualc'h e vo gouzout, a vrema, e ma e kenver Lannion, e parrez Ploulec'h, var bord ar mor.

al leac'h dereata da reseo relegou sant Villiau. Guelet e oue da zeis an enterramant pegement e oa karet ho roue gant ar bopl. Leonis, Tregeris, ha Kernevis adalek ar Menesiou-Du beteg ar Mor-Braz, a deue a vandennou. Eur vech erruet e kear, pebes mall da velet an arched ! A strolladou e teuent d'ar palez, sioul ha glac'haret.

Pa deuas an heur eus ar sao-korf, oll veleien kear, an oll veleien eus tro var dro, ar menec'h, ar relijiuzet, an Autrou 'n Eskop ar Yeaudet, a deuas d'hen digemmer. Diez e ve lavaret ar c'hlemmou, ar c'heuz dispar a zavas etouez an oll pa gemmeras ar c'horf hent an ilis. Mes piou a helfe rei da anaout ar c'hri mantrus a oue klevet pa oue diskenet ar c'horf er bez. Beleien, menec'h, soudardet, tud a justis, servicheurien ha sujidi, an oll a ouele, gualc'h ho c'halon. Den ne helle mui derc'hel ganthan ar c'heuz guirion a oa en he greiz.

Pried sant Villiau, etouez kement a c'hla-c'har, a zo evel anter-varo. Guerz koz sant Voelar a ziskuez anezhi deomp er stad-se :

Houma, ar brinsez Aurilla,
A zo dinerz, mervel a ra,
O velet eur seurt trahizon
Erruet heb occasion.

He c'halon a rann gant glac'har,
Pa zonz en he mab Mølar.

Klevet a ra mouez ar brinset
Oll, a eur vouez o lavaret :
« Adieu d'ho mestr ha d'ho roue. »
Oh ! pebes malheur ! va Doue.

Assamblez gant ar roue Milliau, e oue enterret, evit eur pennad mad a amzer, eurusted Breiz, he feoc'h, he henor. Doue a gastiz aliez ar boploù evit torfejou ho mistri. Rivod, den fallakr, ne helle beza nemet eur roue fall.

Mølar a zo c'hoas var hent Rivod ; lazet e vo ive. Mes Doue a gemmero divezatoc'h

truez ouz Breiz. Ar bopl a zo divlam, ar bopl a zalc'h d'he feiz. Doue a roio dezhan Lez-Breiz ha Nomenoe hag e c'heuil an daou zen-man e kavo adarre hent an henor hag al lealdet.

SEIZVET PENNAD

Miraklou sant Villiau

Ar zent a ra henor da Zoue dre ho buez. Sant Villiau en devoa meulet ha lakeat meuli Doue. Ra vo meulet hano Doue gant an oll, cetu ioul ar zent. *Sanctificetur nomen tuum.* Sant Villiau a roas he oll nerz, he vuez oll evit henori ha lakaat henori Doue. Brezel a reas d'ar pec'hed, distruja a reas anezhan en he galon, ha klask a reas distruja ar pec'hed e kalonou an oll. Kalonou ar zent a zo evel lamprou pe kleuzeuriou karget

euz heol divin karantez Doue. N'ho deus nemet eur volontez : lakaat an tan eus a garantez Doue da gregi dre oll. « Deuet hon, eme hor Salver, da zigas an tan var ar bed-man, an tan divin eus ar garantez kristen. Sant Villiau a gemmeras ar goms-se evel eur gourc'hemmen gret evithan, evel al labour lezet ganthan da ober en he rouantelez. He c'halloud en deus gret evit skigna karantez Doue etouez he sujidi, ha cetu perak Doue a roas dezhan eur gurunen a driomph en envou hag eur gurunen a c'hloar dirag an dud.

— Ma ra ar zent henor da Zoue, Doue ive a ra henor d'ar zent. Ober a ra henor d'ar zent dre ar galloud a ro dezho da ober miraklou ha da c'hounid eneoù da Jesus-Christ. Kass a ra a bell ar brud eus ho vertusiou, ha renta a ra ive enorus ho besiou dre ar vertus mirakulus a stag outho. Salaün ar foll, paour dinam ha dilezet, so hirio muioc'h anaveét eget an oll dud galloudus eus he

amzer. Ma ne zao ket ar ieot en dro da ve-siou an dud galloudus abalamour d'ar soursi a gemmerer anezho, ne veler ket ive eur fourdelizen gaer o sevel eus ho besiou evel an hini a zavas a dreuz ar mean glaz dister a guze relegou paour keaz ar Folgoat.

Eus kement roue zo bet e Breiz, ar muia anaveet, ar muia karet, m'oar vad, ha dre zur ar muia henoret, eo bet sant Villiau. Ar bopl a veul he hano, ha goude na oueffe na lenn na scriva. Peder barrez vraz ho deus choazet anezhan evit patrour : Guimilliau ha Plounevez-Portzay en eskopti Kemper, Ploumilliau en eskopti Sant-Briec, ha Plumeliau en eskopti Guened.

Doue a ziskuezas pegen santel e oa Milliau, en eur rei d'he relegou ar vertus d'ober miraklou. Ar miraklou gret gant eun den goude he varo eo an testeni guella eus he santelez. An den, epad he vuez, ne oar ket a dra zur pe hen a zo din da vea karet pe hen

a zo din da vea kasseat gant Doue. Doue epken a anavez mad aoualc'h an den. Cetu perak ne dleomp ket barn re vuhan hon nessa goude he varo. Mes pa deu Doue d'ober miraklou e kenver bez eun den, e c'hellomp anaout a dra zur santelez an den a zo eno besiet. Ar merk-se ker skedus aberz Doue ne hell ket hon trompla.

Korf sant Villiau, besiet en ilis cathedral ar Yeaudet, a roas leac'h da Zoue d'ober meur a virakl en he hano: Cetu aman ar c'homzou a verk deomp santelez Milliau er scridou kavet gant an Tad Dupaz : « *Miracula autem ac virtutum insignia quæ per eum Dominus operatur, patefaciunt cujus meriti vir iste extiterit, etsi huic operi inse-renda minime putavi.* » « Ar miraklou a reas Doue en hano sant Villiau a ziskueza deomp peger braz e oa santelez ar roue-man dirazhan. N'eo ket fellet dinn ho merka er scrid-man. »

Poanius eo gulet ne ve ket bet falvezet d'an Tad Du Paz merka deomp en he scrid ar miraklou gret gant sant Villiau. Ne heller ket lakaat re a sclerijen en dro d'ar zent, na re a fleur en ho c'hurunen. Tevel ar miraklou guirion great gant eur zant, neket renta henor dezhan eo. Guelloc'h en deus gret an Tad Du Paz evit sant Moelar. Merka a ra deomp plean an darn-vuia eus ar miraklou great gant-hañ, ha sant Villiau a bardono eaz dezhan an ankounac'ha eus he re e-unan evit ar boan en deus kemmeret da skriva penn da benn ar miraklou great gant he vab santel. Ouspen-ze, en em gonsoli a hel-lomp en eur velet an Tad Du Paz ker dizonch e kenver sant Villiau. He scridou a lavar da vihana e reas sant Villiau kals miraklou goude he varo, ha gulet a reomp sklear n'eo ket c'hoas diverret he c'halloud. Pet ha pet all n'ho deus ket resevet ar iec'het en eur bedi anezhan. E parrez Guimilliau e

peder sant Villiau evit bea pareet eus an iskiji. Eva a rear dour eus he feunteun a zo tost d'ar bourk, var hent Lambaol, e kenver Pont an hent houarn. Pedi a rear goude-ze anezhan gant feiz, ha kals, em anaoudegez, a zo bet pareet buhan pe raktal soken eus eun diezamant ker braz. Pegement a brez n'ho deuz ket ar mammou kristen eus tro var dro da vont da gerc'het dour eus feunteun sant Villiau, pa deu an iskiji vardro ho bugale! Hennez eo ar c'henta remed a glaskont evit para anezho eus eur c'hlenved hag a laka ho bugale da vea ken egas. An dud vras, honan, a deu ive da eva, a bell hag a dost, eus feunteun sant Villiau, evit para eus an iskiji. Guella medeusin a gavont evit-se hag ive an digoustussa eo c'hoas sant Villiau.

Piou a hello niveri, a hent-all, an oll c'hrasou, ken evit ar c'horf, ken evit an ene, a zo bet resevet en hano sant Villiau. Doue epken her goar. Eun dra zo hag am eus

sonjet ennhi alies : Doue, evit lakaat ar zent oll da vea anaveet hag henoret, en deus roet he c'halloud mirakulus da bep hini anezho. Kals klenvejou, kals diezamanchou a zo o c'hoari an dro d'an den epad he vuez. N'eus mempr ebet, na goazen ebet en den paour, a ne deffe ket he foan. Cetu perak Doue en deus roet ar galloud da bep sant da barea eus eur c'hlenved benak. Unan a bareo eus an drouk-koste, unan all eus ar boan izili, eun all eus an dersien, hag evelse n'eus sant ebet a ne ve ket izom anezhan. Bolontez Doue, d'am zonch, en eur renka an traou evelse, eo ma ve muioc'h anaveet ha muioc'h pedet ar zent. Dirak Doue n'eus sant *bihan* ebet. C'hoant en deus e ve henoret ar zent oll. Loden sant Villiau eo para eus an iskiji. Guelet a reimp divezatoc'h pehini eo loden sant Voelar abers madelez Doue e kenver an dud. A dost hag a bell, eus kostez. Lesneven dreist oll, e teu offran-

sou da sant Villiau a eneb an iskiji. Lod a lavaro marteze evelhen : « Sant Villiau n'eo ket lakeat e renk ar zent gant an Ilis, en eur ger, n'eo ket bet canonizet. » (Nan zur ; mes, evit trouc'ha berr, pet eus sent Breiz a zo bet canonizet ?) Her gouzout a rit ? Daou epken, sant Guillou ha sant Yvon pe sant Eozen, patron Treger ha Tregeriad e-unan. An dra-ze na vir ket na ve oll zent Breiz guir zent. Resevet int bet oll evel sent gant an Ilis, hano a zo anezho oll er breviel hag en offern, pedet int gant ar bopl, ha reseo a reomp an oll grassou hor beuz izom, en ho hano. Hirio e karer kals chipotal ; mes en hano Doue na chipotomp ket var ar poent-man. Na deuomp ket da vea figussoc'h eget Doue. Doue a gar an oll zent, a laka grassou etre ho daouarn evit skuill varnomp ; a ro dezho, goude ho maro, an donezon a viraklou. Daoust a fors a ra deomp eus pe seurt dorn e teui deomp ar grasou hor beuz

izom anezho, nemet ec'h en em gavint?
Daoust hag ar zent oll n'int ket mignonet da
Zoue?

Pedomp eta oll zent Breiz, hor breudeur,
hor brassa mignonet e kenver Doue goude
Jesus hag ar Verc'hez.

Doue en deuz lakeat sent da zavel en hon
touez evit bea hor skuer var an douar hag
hon alvocadet en envou. Malheur d'ar Brei-
zad a ve direspert e kenver sent Breiz. Deski
a raffe, divar he goust e-unan, an istim, ar
garantez en deus Doue evitho. Oh! nan; ni
bedo sent Breiz evit derc'hel d'ho feiz. Ni
ho fedo deis ha noz evit en em gaout gantho
er baradoz.

EIZVET PENNAD

Penos henori sant Villiau ha sant Moelar

Ar guella doare da henori ar zent eo ato
kemmeret skuer var ho buez ha bale var ho
roudou. Hennez eo ive an tu guella da vea
selaouet gantho. Doue a ra ato pep tra evit
he c'hloar; ar miraklou gret gant Doue pe
dre zaouarn ar zent a vez ato gret evit
lakaat hano Doue da vea muioc'h meulet.
Ar miraklou a erru en amzer-man e Lourd,
dre c'halloud an Itron-Varia, n'int ket gret
epken evit an dud a reseo eno ar pare. Great
int dreist-oll evit an dud difeiz, da rei dezho
ar feiz, evit an dud falgalousnet, da rei dezho
an nerz; evit an dud digalous, da rei dezho
karantez evit Doue hag ho nessa.

Miraklou ha vertusiu ar zent a zo ive

eun heritach evit an oll gristenien. Deomp eo da lakaat an heritach-se da dalvezout evit ar baradoz.

Ar vertusiou a velomp o para dreist ar re all e buez sant Villiau eo he garantez evit Doue hag he nessa, he zouder e kenver an oll, he vadelez evit he servicheurien, he batiantet, he lealdet.

He batiantet ! Pegement n'hen deus ket bet da c'houzanv gant he vreur Rivod. Guelet a rea he galon fall, ha Milliau a zigemmere ato he gomzou gant dousder hag a glaske en doare-ze reizaat an tigr-se ken didruez.

He lealdet ! Pegen diez ne oa ket dezhan beza leal e kenver an oll gant eur breur avius, ourgouillus ha ne c'houlenne ket guell eget reseo ann oll henoriou hag en em lakaat dreist an oll lezennou.

He zouder ! Lezel a rea an oll da dostaad outhan, ha ma vije dreist-oll laouen ous unan benak, e oa ous ar paour, ous ar vino-

ret, ous an dud nec'het en ho afferiou. Ho roue a vije ho alvokad hag ho madoberour assambles. Rei a rea dezho sklerijen ha sikour evit en em denna e meaz a affer.

He vadelez ! Eun tad e oa evit ar paour hag he servicheurien. An urs a oa da rei eun dra benak da gement paour a deuje. Bemdez an or a vije digor evitho hag hini anezho ne gleve ar goms ankenius-ma. « Ne ma ket hirio an devez da rei. » D'he servicheurien e roe skuer vad ha kelennadurez vad. Na-leoudouet, na koms udur ne vije klevet en he di. En eur ger, he balez a ioa renket evel eun ti e guirionez kristen eleac'h ma ema ato Doue er penn eus a bep tra.

Eveld'han karomp ar batiantet hag an dousder ; eveld'han bezomp leal e kenver an oll ha madelezus d'ar paour. Karantez ar paour a zo eur sin eus a garantez Doue er galon. Ouspen-ze, rei aluzen eo dastum aour. Ar pinvidik a ro bara, ar paour a ro he

beden ; piou a ro ar muia ? Euruz an ti à ra ato digemmer mad d'ar beorien ! Ho elez mad a lezo var ho lerc'h muic'h eget na vo roet dezho.

Lezel a reint da goeza eus ho diouaskell bennosiou Doue deuet gantho eus an envou ; lezel a reint iec'het ha furnez evit bugale an ti, ha bonheur da lakaat pep tra da dalvezout.

Dreist pep tra, eur vech c'hoas, pellaomp eus hon tiegesiou ar c'hrisien fall eus an avi, penn-kaos eus maro Milliau ha Moelar. Euruz ar barrez e leac'h ma c'henem gleo an oll familliou ! Falla louzaouen a helfe da zevel en ho touarou eo louzaouen an avi. Evel an dour a lac'h an tan, evelse ive an avi a laz ar garantez etre amezeien. An avi a zigas ienien, ar ienien ar guall-gomzou, ar guall-gomzou an drouk-oberou, ar fallagriez a zigas procezoù. E c'heul ar procezoù e man ato an drouillansou padus, ar revin

aliez, an dizhenor avisiou. Dalc'hit sonch mad eus lavar guirion ar re goz : an unvaniez, emezho, eo an nerz. An emgleo vad eo ar bonheur hag ar binvidigez. Pe seurt eurstet, m'her goulenn diganeoc'h, ho devez var an douar-man amezeien hag a dremen bemdez an eil abiou d'egile heb en em gozeal. Klask a reint, sur aoualc'h, noazout an eil d'egile. N'eus mean harz ebet hag a virfe ous trouz etrezho. Ato e vezint, evel Rivod, tenval ho fenn ha tro en ho spered evit essa dont a benn eus eun taol fall benak. Ar re goz ne hellint ket en em velet hag ar vugale dre-ze ne hellint ket en em anduri. Diou gostezen a vo e ker, ha cetu eur geriad tud en drubuil ato hag en difisians abalamour n'en em glever ket. Malheurus e lakan ar seurt tud-se er bed-man da c'hedal ma renkint renta kont da Zoue eus ar gassoni zo etrezho.

Meur a zoare all zo c'hoas da henori sant

Villiau ha sant Møelar. Ne verkin aman nemet diou : rei d'ar vugale an hanoïou. Milliau ha Møelar, ha tremen gant devosion, e karantez Doue, an dervesiou ma rer ho fardon. E Treger, red mad eo hen lavaret, eo kals stankoc'h an hanoïou a Villiau hag a Vøelar eget e Leon hag e Kerne. Gousgoude an daou zant-man ho deus skuillet ingal aoualc'h ho madelezou var ar vro oll. Ar parroïiou da vihana a zo dediet da sant Villiau pe da sant Møelar a dlefe gant muioc'h a ræzoun c'hoas lakaat ho bugale da zougen hano ar zant Patroun. Aliez ho p'eus lavaret ha klevet lavaret n'eus hano fall ebet ; rak an oll hanoïou roet d'ar vugale gristen a zo bet douget gant eur sant benag. Perak eta dilezel hanoïou sent Breiz ?

Daoust hag an hanoïou-ze n'int ket brezounek ? Pere a vo 'ta neuze ? Gant plijadur e velan e tizroer eun tamik var ar poent-man,

ha sur hon e ielo c'hoas var gresk an hanoïou a Villiau hag ha Vøelar e Breiz.

Eun dra c'hoas hag a raffe plijadur d'an daou zant-man, hag a ve er memez amzer talvoudek evidoc'h, eo tremen devesiou ho fardonïou gant eur guir devosion. Mont d'eur pardon eo mont da bardouna, ha petra eo mont da bardouna ? Mont da bardouna eo mont da c'houlén pardon ; pardon eus an oll pec'hejou tremenet ha grassou nevez evit dere'hel e gras Doue. Petra da sonjal eta eus an dud-se a ia d'eur pardon evit kemmeret ho flijadur, evit gueleet nevezentiou ; evit gueleet ha bea gueleet ? Sonjal a hellit ez int kristenien baour. Evitho ar pardon a zo er meaz an Ilis, eleac'h evit ar guir pardoneurien ar pardon a zo ec'hars treid an auteriou.

Mez a reont d'ar zant Patron eleac'h renta henor dezhan ; an davarn eo an templevitho ha nan mui an Ilis. Dastum a reont eur

zamm nevez a bec'hejou pell diouc'h beza pardonet.

Pa z'id d'eur pardon braz benak, evel da bardon Remengol, ar Folgoat, ar Yeaudet, Guengam pe santez Anna-Vened, e velit eno eur vanden beorien goloet a bep seurt gouliou. Kaout a reont aluzen evit izomou ar c'horf. Eneou ar gristenien a ia da bardouna a zo ive goloet a bep seurt gouliou; lod gant gouli an enkrez, lod all gant gouli ar pec'het. Ma z'eont da bardouna gant eur guir fisians hag eur guir glac'har e kavont aluzen evit pep izom eus ho eneou. Mes siouaz ! ar pardonieu, prestik aoualc'h, ne vint mui dizhenvel eus ar foariou tud iaouank. Ar soniou eus an Ilis ne verkont mui an heur, evit kals so, da vont d'ar pardon, nag an heol ken nebeut en eur guzat, ne verk mui an heur da zont d'ar gear. A c'hoas e levirint e vezint bet er pardon, digarez ma vezint bet var ar blasen pe en davarn !

Ne hellan ket miret da scriva aman, en eur achui ar pennad-man, ar geriou diveza eus kantik kos sant Villiau. Lavaret a reint deomp, guelloc'h eget pep koms all, penos e tleomp henori eur zant Patroun deiz he c'houel.

Bezit sonch eus ho Tad sant Milliau,
Bezit sonch e tougit he hano ;
Lakit evez e nep fesson
Da dizhenori ho Patroun.

Rak evit henori ar zent
Eo red mad heuilla piz ho hent ;
Miret mad lezennou Doue,
Kassaat ar pec'het evel dhe.

Lezomp eta ar blasphemou,
Leoudouet, drouk-pedennou ;
Hag implijomp hon teod, nos-de,
Da bedi, da veuli Doue.

Dilezomp a grenn ar vizou,
An dansou hag an ebatou ;
Al lubricite, an avi,
Ar goler, hag ar vesventi.

An Autrou sant Villiau hon tad
A vo neuze hon alvokad,
Pa remerko he vugale
O kundui mad ho bue.

Oh! c'hui Roue hon tadou koz, sant Villiau hor zant Patroun, eus bar an envou roit ho pennoz d'ho pugale a Vreiz. Parea a rit ar gouliau a ra d'an den fulor ar goad; pareit ive ar gouliau a ra d'hon ene an avi hag ar vesventi, an eil pec'het originel-ma evit ar Vretouned. Divar an auteriu, evel guechall divar ho trôn, en ho torn goslen ar Roue, renit bepred ho kenvrois var hent ar baradoz ha pellait diouzomp goalinier Doue.

Mignon eternal da Zoue, ha breur-sant ar Vretouned, lakit en hor c'halonou ar garantez birvidik ho p'eus bet evit ar vertus kaer, evit al lealdet hag ar paour. Dre ar burete e vevimp a zirak Doue evel Elez, dre al lealdet, an unvaniez hag an aluzen e vevimp oll as-

semblez evel guir vreudeur, da c'hedal mont ive d'an envou da veuli Doue ganeoc'h.

NAVET PENNAD

Guers koz sant Villiau

Gret gant eur beleg a eskopti Treger er bloas
mil eis kant nao (1809).

Ar heur-vad am eus bet da gaout *Guers koz sant Villiau*, gret brema zo dek vloas ha triugent. Eun dever eo evidon scriva anezhi aman penn da benn, rak ar guersiou koz a zo eun eccleo guirion eus an amzeriou tremenet. Ne m'eus chenchet er verz-man nemet eur gerik benak, re dost kar d'ar gallek. Cetu hi aman :

Kanomp ni oll gant joausdet
Eur c'hantik nevez a zo gret
Evit henori sant Villiau,
Patron a barrez Ploumilliau.

Spered Santel, ni ho suppli,
Ha c'hui ive Guerc'hez Vari,
Roit dinn sklerijen da ziskuez
Ar zantelez eus he vuez.

Sant Villiau ganeomp henoret,
E Breiz-Izel a oue ganet
Var dro ar bloavez seis kantvet
Goude maro Salver ar bed.

Sant Villiau a oa ginidik
A lignez huel ha pinvidik ;
He dad Budik a oa roue
D'ar Vretouned en amzer-ze.

Budik en devoa daou vogel,
Mes en ho buez dizhenvel ;
Milliau devot, leun a furnez
Rivod avius ha didruez.

Pa oa Milliau erru enoad
E oue roue varlerc'h he dad,
Ken abalamour d'he furnez
D'he skiant vraz ha d'he santelez.

Kemmeret a eure da bried
Eur verc'h meurbet fur ha parfet
Eus al lignez an huella,
Hanvet ar brinsez Aurilla.

Etre ma vevchont assamblez
Er stad eus ar briadelez,
N'ho devoe nemet eur hugel,
Mælar prins devot ha santel.

He dad hag he vam a veve
Ho daou e doujans Doue ;
Bemdez e kreskent e grasou
E santelez, e vertusiou.

Milliau oue seis vloas var an trôn,
Leun a feiz hag humbl a galon ;
Hag he skuer meurbet a bouse
An oll da servicha Doue.

Evel galloud ar rouane
A deu dezho digant Doue,
Gouarn a eure he sujedet
Gant karantez ha lealdet.

Diskrisienna 'rê ar visou,
Sevel huel ar vertusiou ;
Ober a rea, dre he soursi,
Renta justis da bep hini.

Hen oa tad an oll vinoret,
Difenmour an intanvezet ;
D'ar beorien oa truezus
Dre ma z'int memprou da Jesus.

He garantez oa aketuz
Da renta he bopl eurus,
Hag an oll a veule Doue
Ma oa ker santel ho roue.

An noblans hag an oll brinset
D'eur roue ker mad 'zouge respet;
Karet e oa gant an oll bopl
Nemet gant an treitour Rivod.

Rivod a oa den visius,
Leun a ourgouill hag avius,
Hag a rê poan en he galon
Guelet sant Villiau var an trôn.

Kassaat a rea he vreur santel
Evel Cain he vreur Abel,
Abalamour d'he vertusiou
A gondaone he zizursiou.

Rivod, siouas ! sur, a veve
Heb feiz na doujans Doue ;
Ne zonje, en noz hag en de,
Nemet er gurunen a roue.

Ne helle pignat var an trôn
Nemet siouas ! dre drahizon,
O skuill evel eur malheurus
Ar goad eus he vreur vertuzus.

Mes piou benak so possedet
He galon gant an drouk-spered,
Ne deu ket buhan da spounta
'Rak ar c'hrimou an euzusa.

Rivod, he galon possedet,
Gant an diaoul a bouls d'an tôrfet,
A ia d'ar palez var an heur
E sonch mad da laza he vreur.

Eur vech erruet er palez
E kuz brao he fallagriez,
Ha Milliau ne oa ket var c'hed
Da reseo eun taol diremed.

Va breur, eme an den didruez,
Me m'eus eun affer so diez
Da zisplega d'ho majeste :
Deomp en tu benak a goste.

Pa oant eat ho daou a goste
E leac'h ne oa den memet-he
Rivod neuze gant he zabren
Ha droc'h d'he vreur santel, he benn.

Cetu penos e oue lazet
Milliau gant he vreur milliget ;
Ar vertus a zo peurvuia
Gual-gasset gant an dud falla.

Pa oue klevet eur seurt kelou
Ne oue dre oll nemet kanvou ;
Braz ha bihan a oue rannet
Ho c'halonou dre an torfet.

An eil a lavar d'egile :
Maro eo Milliau bon roue,
Maro ar zant, maro hon tad
Deomp-ni oll pebes kalonad !

Credi 'rffac'h ve contentet
Rivod goude eur seurt torfet ;
Mes ar bec'heurien kaledet,
E leac'h chench, a voassa bepred.

Rivod fallakr ha dinatur
Ne vo content, na mestr da zur,
Ken an devo lazet ive
Ar prins Mølar, mab ar roue.

Gounid a eure tud dizoue
En eur brometti kals a leve ;
Hag hi a lazaz e Lanneur
He niz propr, mab unik he vreur.

Cetu aze e pe feson
E pignas Rivod var an trôn ;
Mes Rivod hag he gonsortet
A zo maro en ho fec'het.

Sant Villiau hag he vab Mølar
A zo ho daou e ren er gloar,
Ha Doue dre ho vertusiou
En deus gret kals a viraklou.

An histor a *Vuez ar Zent*
A verk hag a ro da entent
E oue sant Villiau enterret
En ilis veur ar Yeaudet (1).

Hervez ar c'hustum ancien
Commun etouez ar gristenien,
Sant Villiau zo bet hanvet
Merzer santel ar Yeaudet.

Parissioniz a Ploumilliau (pe Guimilliau)
Bezit devot da sant Villiau ;
C'hui eo he bopl muia karet,
Henorit-hen gant pep respet.

Bet sonch en ho tad sant Villiau ;
Bet sonch e tougit he hano ;
Lakit evez e nep feson
Da zizhenori ho patron.

(1) An hano-ze, ar Yeaudet, a deuc d'ar gear vraz so bet var
bord ar ster Leguer eus ar bopl hanvet *Yadètes* a zo bet o chom
eno. An hano Gueodet bet douget gant eun ilis e Kemper ha
douget ato gant eur ru, a-sinif treis Odet, treis ar ster Odet a
red e Kemper.

Rak evit henori ar Zent
Eo red mad heuilla piz ho hent,
Miret lezennou Doue
Kassaat ar pec'het evel d'he.

Lezomp eta ar blasphemou
Leoudouet, drouk-pedennou ;
Hag implijomp hon teod nos-de
Da bedi, da veuli Doue.

Renonsomp a grenn d'ar visou,
D'an dansou ha d'an ebatou
D'al lubricite, d'an avi,
D'ar goler, ha d'ar vesventi.

An Autrou sant Villiau hoa tad
A vo neuze hen alvokad,
Pa remerko he vugale
O kundui mad ho bue.

Rak sant Villiau deomp a ziskuez
Rei da Zoue hor c'harantez,
Beza dous ha karantezus,
E kenver an oll dud truezus.

Karet Doue hag an nessa,
Beza distag eus ar bed-ma,
Cetu aze e herr gomzou
Poltret sant Villiau, hon Autrou.

Koz ha iaouank, deskomp ganthan
Servicha mad Doue er bed-man
Hag e veomp oll kurunet
Ebars e palez an Dreindet.

DEKVEL PENNAD

Kustumou hon tud koz, pa oant paianet

Plijadur, a gaff dinn, a rin d'an oll en
eur lavaret kustumou hon tud koz pa oant
c'hoas paianet, hag ho c'hustumou en amzer
sant Villiau, eur vech savet en ho zouez
sklerijen gaer ar feiz.

Arok ma teuas ar Romanet er vro-ma, e
oa e Breiz-Izel a bep seurt renk tud. Beza e
oa da genta an Drouizet pe fals-beleien, d'an
eil an noblans pe marc'heien, d'an trede al
leveourien, d'ar pevare ar fermourien, d'ar
pempet ar sklavet.

An Drouizet, barneurien var bep tra, a oa e guirionez mistri ar vro. An noblans, evel brema, a ie eus an tad d'ar mab; mes an noblans, heb ar mirit, ne roe leac'h ebet da gommandi. An dud libr a rea marc'had a volonteiz vad da heulia ha da servicha an noblans en amzer a beoc'h hag er vrezel.

Ar fermourien a laboure an douar. Mistri an douar eo a rente justis dezho. Ar sklavet a oa nebeut anezho. Lavaret a heller soken n'eus bet e nep leac'h nebeutoc'h a sklavet eget e Breiz.

Henor an noblans a ioa kaout kals tud en dro dezho, ken an amzer a beoc'h, ken en amzer a vrezel. Ar cheffou brassa a gommande beteg daouzek mil den. Pa vije lazet ho mestr, he oll dud, e sin a gaon, ho devoa ar c'hustum sod ha didruez d'en em zistruja en dro d'he vez. Coesar a goms ive eus ar c'hustum spontus-se. Mestr eur gear pe eur vanden dud a oa he hano : Tiern.

Ar mestr braz, mestr ar vistri, a vije hanvet Penn-Tiern. D'ar c'houls-se dija, da lavaret eo, pevar c'hant vloas arok done-digez hor Zalver, e oa anaveet e Breiz an halar gant killiorou, ar goel-bier hag ar c'hrouer-reün. Ar guiskamant a oa ar bragou braz hag eur saro fanfarluchet a ziskenne beteg koublou an divesker. An noblans a zalc'he ho moustachou epken hag a drouc'he ho baro. Ar bopl a zalc'he he varo hag he vleo hir. Lod soken, a zave huel eur bochad bleo e kreiz ho fenn. Ar re binvidik a helle kaout guin eus ar broiou all; evach ar re baourouc'h a oa ar bier hag ar chupere, eme ar scrivanieur Posidonius. Pa vije bet eul lein vraz benak gantho, e kariant goudeze mont deustu da c'hoari gant an armou.

Aliez e c'hoarvee ma rede ar goad ha ma chome meur a hini var ar plas goude eur c'hoari ken dangerus.

Ho ziez a oa rond ha brazik aoualc'h, evel eur c'houldri. Ar fond anezho a vije e mean, ar vogeriou e koad hag e mouded gant eun doen begok. An or epken peurvuia a roe sklerijen en ti ; ar moged a iea er meaz dre eun toull gret e beg an doen soul.

An oll Gallaouet koz a heller da lavaret a ioa soudardet. Ar mammou a roe da bokad d'ho bugale, ez vihanik, klezeier ho c'herent. Cetu petra oa badiant ar vugale-ze. Pa z'eat er meaz ar vro d'ar vrezel, ne valee nemet an noblans hag an dud libr. Mes pa renket difenn ar vro, an oll neuze a renke kemmeret armou, nemet an Drouizet. An nep a gize er stourmad a vije trouc'het diouthan he fri hag he ziouskouarn e sin a zizhenor. Meur a vech so bet gueleit tud koz, guenn ho fenn, stag ous ho c'hezek er stourmad, evit rei kalon d'ar re iaouank. Bale a reant d'ar vrezel da c'halv ar barzet ; ho armou a oa ar peuliou lemm, ar birou, ar zabren,

hag ar goaf pe lans. P'en em gave eun neve-zenti benak, ar c'henta a gleve ar c'helou a iouc'he anezhan d'ar re all hag evelse a rum da rum, eme Coesar, ar c'heleier a rede buhan dre ar vro.

Etoues an dud karget eus ar relijion e oa tri renk : hini ar barzet, hini an divinourien hag hini an Drouizet. Ar barzet a gane, da c'houeliou ar bopl, henor Breiz ha gloar an dud kalonek.

An divinourien a sikoure an Drouizet epad ar sacrificiou, hag a *glaske* divinout an amzer da zont (1).

An Drouizet, ar renk huella eus ar fals-

(1) An divinourien a rea ive medeusinerez, ha roe louzeier d'an dud. Meska a reant ar sorserez gant ho medeusinerez evel ma ra brema ar sorseurien hag al louzaoneurien a gaver avisiou var ar meaz. N'eo ket difennet kemmeret remejou digantho, pa ne reont ket ar van d'ober sorserez en eur lavaret oremuzou. Mes pec'het eo avad mont da gaout potred an oremuzou, pe evit tud pe evit loened.

beleien, eo a sine ar peoc'h hag zisklerie ar vrezel. Hinthi c'hoas eo a brezege d'ar bopl. Konta a rear e vije eun Drouiz o prezeg d'ar bopl e kenver ar Roc'h-Toull e Guiclan. Eun Drouiz braz a gommande an oll Drouizet all, hag eur vech ar bloas an oll Drouizet a en em gave assamblez evit reseo ursiou an Drouiz braz. Dougen a reant eur zae lien guenn hag eur vantel fin eus ar memez danvez. Var ho divrec'h e velet chadennou aour. Gant an Drouiz braz e vije c'hoas eur c'houriz aour ha var he benn eur gurunen deilloudero pe illio. Hen epken a helle dougen ar fals-aour evit trouc'ha an huel-var divar an derven eur vech ar bloas.

Templou ho Doue brassa Teutatès a hanvet kromlec'h (lec'h-krom). Eur mean hir a zifenne tostaad ous al leac'h-se. Ateriou an Drouizet a oa taoliou mein braz (dol-men) eleac'h ma vije lakeat da redet goad ar pri-zouneurien great ar vrezel ha soken ive goad

tud ar vro. Renkajou mein-hir hanvet karnellou a oa, d'ar c'houls-se, ho guerejou. E Karnac e veler c'hoas hirio eur renkad vad eus ar mein-hir ze, ha me zonch e teu ac'hano an hano a Garnac pe Karnellou. Aliez ive e savet mein-hir en ear, e memor eus eun dra vraz benak pe evit renta henor d'an dud kalonek ho divije rentet servich vad d'ar vro.

Amzer an Drouizet e Breiz a badas beteg ar pevare kantvet, a heller da lavaret. Neuze sklerijen ar feiz a baras dre oll er vro-man ha Breizis a guittaas a galon vad eur relijion ker faos ha ken didruez evit en em daol etre divrec'h Jesus-Christ. An Drouizet a en em zalc'he kals anezho en enezennou. Enez Eussa, enez Sizun hag enez Baz ho deus roet lojeis dezho epad pell amzer.

Meur a dra a ve c'hoas da lavaret divar-benn amzeriou kenta hor mam-vro, mes kementse a gasfe ac'hanomp re bell eus amzer sant Villiau. Eun tamik anaoudegez

eus stum genta hor bro ne oa ket a re gousgoude.

Trugarekaomp an Autrou Doue da vea digasset kannadet ar guir feiz en hon touez; rak heb ar guir relijion n'eus beva mad ebet. Trugarekaomp anezhan da vea klozet evit biken an amzer ma rede goad hor c'hen-vrois dre zorn didruez beleien an diaoul. Oh ! nan, an eccleo ne gasso ken dre an draonien hag ar menez kriaden estlamus eur Breizad o vervel var an dolmen dre gontelaz an Drouiz. Relijion hor Zalver zo eul lezen a garantez evit silvidigez hon eneou. Miromp anezhi bepred, n'eus fors pegen tru-buillus e vo an amzer. Ar groas a zo e pebleac'h eus hor bro evit diskuez eo gouneeet da Jesus. Hor lagad var ar groas, na zeimp biken da goll.

UNEKVET PENNAD

**Kustumou hon Tadou koz en amzer
sant Villiau**

Ar feiz, en eur zont en vro-ma, a reas ennhi kals chenchamant. A nebeudou e torras chadennoù ar sklavet, hag en amzer sant Villiau ne gredan ket e vije c'hoas eur sklavour benak. Tostaat a reas ive an eil rum dud ous ar re all dre ar garantez kristen. Lezel a reas gousgoude pep hini en he renk, rak bolontez Doue eo e ve huelloc'h an eil eget egile. Evel kristenien, bugale da Zoue, omp oll henvel, brankou eus ar memez guezen, fleur eus ar memez rozen. Mes brankou eur vezen, goude dont eus ar memez keff, n'ho deus ket oll ar memez hilder, ar memez teoder, ar memez huelder. Evelse e c'hoarvez ive evit an dud. Henvel dirak

Doue dre ar c'horf hag an ene, m'ar deo henvel hor mirit; omp dizhenvel dirazhan ha dirak ar bed dre ar spered, an nerz, ar binvidigez, hag al lignez. En amzer sant Villiau, evel brema, e oa pevar rum dud : an dud a Ilis, an noblans, ar vourc'hisien hag al laboureurien douar.

Ar roue a ioa er penn huella er rouantelez; mes ar roue, anezhan e-unan, ne helle ket ober netra a vraz, evel ar peoc'h hag ar vrezel, heb kuzul ar c'hontet eus ar vro. Aliez soken, hag hen lavaret am eus dija, e vije galvet ar bopl a bez, en eun assamble, evit dibuna afferiou brassa ar vro. Eno, pep hini a helle ober he glemmou hag he c'houlennou dirak ar roue hag ar c'hontet.

Ar c'hontet, dre ho ginivelez epken, ho devoa guir da vea e konsaill ar roue.

Varlerc'h ar roue, da vihana er penn kenta, e teue an Eskiptien. Pa oue savet abbati Landevennek, en amzer ar roue Grallon, e

velet anezho o vale arok ar c'hontet. Divezatoc'h ar re-man a gemmeras ar paz kenta var an Ilis.

An heol, eme an tad Maner, n'en deus biskoas sklerijennet bro ebet eleac'h ma ve chomet ken divlam ar relijion evel e Breiz. Da c'henel e ma c'hoas, emezhan, an hini en deus gueleet eur Breizad o prezeg eur relijion benak all nemet hini Jesus - Christ. Hirio marteze an Tad Maner ne helfe ket lavaret kement all. An herrol ive, siouas ! a zo o kommans sklabeza ar brezounek. Leoriou ar brotestantet lakeat e brezounek gant eun dorn malheurus benak a gass anezhi en dro (1). Lakomp evez ous ar poezoun-ze ha miromp an aviel prezeget da genta en Naonet gant sant Clair, e Roazon gant sant Moderan, e

(1) Al leoriou roet deoc'h gant bourc'hisien *evit netra*, peurvuia, ne dalvezont netra. Fall int nontek guech ha pevar ugent var gant. Diouallit ous al leoriou-ze.

Guened gant sant Patern, e Dol gant sant Samson, en Aleth gant sant Malo en deus roet he hano d'ar gear-ze, e Sant-Briec gant sant Briec, e Treger gant Drennalus, e Leon gant sant Paol, e Kerne gant sant Caourintin.

Dindan an noblans vraz, e oa noblans paouroc'h evel fermourien. An noblans vihanze a renke paea d'ho mistri, heullia anezho er brezelioù ha ne hellent na guerza, na prena douar heb ho c'honzantamant.

E Leon e oa an nebeuta eus an noblans arok ar Revolution vraz. Bro Leon a reas kals konvers gant ar Spagn ha Breiz-Huel, ha dre-ze e c'hounezas peadra aoualc'h evit prena an darnvuia eus an douar. Eus ho finvidigez, eme kals skrivaneurien, eo e teuas dezho an hano a julodet.

Ar vourc'hisien a deuas abred da vea tud eurus. Desketoc'h e oant eget al labourerien douar ha dre-ze e savchont kentoc'h er

c'hargou. An Tad Morice ne gav nemet eurger da lavaret divarbenn ar vourc'hisien en amzer sant Villiau, mes eur ger eo hag a ziskuez ne oant ket re valheurus. «Ar vourc'hisien, emezhan, a ioa libr, mes paea a renkent lod eus an taillou. » Hirio e c'hoarvez evit an oll ar memes tra : liberte ha taillou. Netra a nevez dindan an heol, eme ar fur Salomon. Ha bea zo brema muioc'h a liberte ha nebeutoc'h a daillou ? An dra-man a zo eun affer-all. Lavaret a rin epken arpez a oa guechal. An noblansou revinet aliezdre ar brezellou a gave gras guerza ho leveou d'ar vourc'hisien pe d'ar baizantet. Al liberte ne deuas ket e Breiz, *evel e Frans*, dre al lezen. Dont a reas evit an oll er vromagant ar guir relijion. Ar relijion, ma ne roas ket d'an oll ar binvidigez, a roas da Vreizis oll da vihana ar guir liberte. Douasaat a reas doare peb-den heb ober anezho oll raktal tud eurus. Ar bed n'eo ket bet

krouet en eun devez hag an oll guirious leal a zo el lezennou n'int ket deuet ken nebeut en eun taol-kont.

Eur bopl a vez bugel ive arok beza braz. An dra-ze zo guir; mes gevier a lavar kement hini a skriv ez oa an oll dud paour, evel sklavet er vro-ma, arok ar Revolution. En nep leac'h, e guirionez, n'eus bet muioc'h a frankiz nag abretoc'h eget e Breiz. En dekvet kantved, bourc'hisiñ Roazon assamblen en ilis Sant-Per a ziazezas guirious nevez var ar c'hont a Roazon e-unan. Kement-man a ziskuez sklear e oa pell zo dija an dud a zanvez hag an dud a skiant a bep renk o kemmeret pers en afferious ar vro. Ma ne oa ket roet c'hoas d'ar parrosious an hano a gommun, Breizis ho devoa dija an dra heb kaout an hano, ha divezatoc'h pa oue staget Breiz ous Frans, e kolchont lod eus ho frankis evit kaout an hano a gommun.

Pa vije mad ar roueet, pep tra a ie mad;

ha red eo lavaret ne deus ket an histor nemeur a glemmou d'ober eneb roueet Breiz. Pa ne vije roue ebet, mestr ebet, e vije muioc'h a zizurs ha muioc'h a veac'h abers ar re a glasko derc'hel he blas. An diezamant ho devoa ar baizantet eo ma renkent maga kezek ho mistri, diouall ho c'hestell ha kass dezho an eost d'ar gear. Al labourious-ze evelato a ioa eur penn-kont evitho eus eul loden Gouel-Mikeal. Ar rest eus ar baeamant a vije gret gant frouez an douar. Ar labourious-hent ne oant tam sammussoc'h eget hirio. Ervez an testenious kossa ha guirion, paizantet Guened ne renkent ober nemet c'huec'h devez labour bep bloas var an hentchou; daou zevez evit karr, daou zevez evit kezek, ha daou zevez evit an dud. E Kerne e reant tri, da lavaret eo, an tiegez brassa en devoa nao devez labour. Epad an dervesious labour-ze ar maner tosta a vage anezho oll, loened ha tud. E Frans e oa kals diessoc'h ar beva evit

ar baizantet. Rak-se pa deuas ar Revolution, ar Gambr a gavas nebeut a dra da chench e kustumou Breiz. « Eun dra vad e vije, eme ar Gambr-se ken figuz gousgoude, ma vije bet renket an traou e pep leac'h kouls hag e Breiz. »

Goude deveriou ar baizantet en amzer sant Villiau, leveromp ive ho guiriu. Guir ho devoa da gaout justis ha sikour e pep izom digant ho mistri. Guir ho devoa d'en em emell eus afferiou ar barrez. Henvel a reant tud da zestum an taillou, taillou mae ha taillou miz eost. Avisiou unan epken a bae evit an oll. Goudeze e vije digollet gant ar re all eus ar barrez. Kement-man a ziskuez ne oa ket re vraz an taillou pa helle unan paea evit an oll. E karg ar barrez e oa sevel ar vinoret paour hag ar vugale dilezet gant ho c'herent. Ar c'houentchou Menec'h a rea skol evit netra da gement hini n'en devoa ket a eaz da baea, ha lavaret a heller e

oa kouls desket an dud araok ar Revolution a ma z'int brema. En amzer sant Milliau ne lavaran ket, rak ar gallek ne oa ket c'hoas anaveet d'ar c'houls-se.

An dud a noblans vraz ho devoa guir da gass unan en ho leac'h da gonsaill ar barrez; mes ne hellent ket mont ho unan nemet choazet e vijent. Evelse-ta, ar baizantet en amzer sant Villiau evel hirio, ho devoa pers en afferiou ar barrez evel m'ho devoa pers ive en danvez dre al leve. Al leve-guir evit an oll, bourc'hisien ha paizantet, a oa anaveet e Breiz pell arok sant Villiau.

Ha lavaret am eus e ve bet eurusoc'h ar baizantet neuze eget brema ? ne gaff ket dinn bea lavaret an dra-ze. Gant an amzer hag al labour ar binvidigez so bet kresket ato e Breiz a nebeudou dindan goard an Ilis. Mes gevier, ha gevier milliget, eo lavaret e ve bet en amzer goz an oll vadou, an oll guiriu d'ar memez re. Gant gevier ar seurt-

se eo e tigasser an dour e ginou an hini n'en deus netra hag e laker ar freuz etouez eur bopl eurus. Petra erru ? Redek a rer varlec'h eur skeuden a eurstet eleac'h derc'hel d'ar pezh so, klask a rer tapa al loar gant ar biziet ha ne c'hounezet nemet dispac'h, laze- rez ha muioc'h a baourentez. Ar labourer a skiant a zo bet en em gavet ato eurus pa hell beva mad ha paea. Ar bourc'his a boell a jom peoc'hus en he stal pa vez bara guenn var an daol. N'eus nemet ar feneantet o krial ato, n'eus fors pe seurt amzer a ra, mad pe fall, evit gellout chench tu d'ar gam- proezen, frita anezhi d'ho giz hag hen dibri dirak baro ar re all goudeze. Peurlieassa, peurlieassa, evel a lavar ar re goz, ar seurt so eo ar guella.

En eun amzer a relijion, a beoc'h hag a justis evit an oll, sod eo an hini a glemm ha neket dibec'h ar re a laka freuz.

Ne drugarekaomp ket eta ar Revolution

vraz tam ebet, ni Breizis. Rak ar Revolu- tion-ze ne deus roet deomp netra vad. Ar revolutioneurien ho unan a lavar e oa renket mad pep tra e Breiz. Hon tadou koz, brema zo dija kant vloas, a ziskuezas ne oant ket malheurus, p'eo guir e kariant kement ar relijion hag ho mistri. Evit ar relijion ho deus skuillet ho goad, evit ho mistri ho devoa prenet ha miret aliez an danvez lakeat e guers gant eur Revolution lounkerez, laer ha lipouz.

Neket aoualc'h gousgoude rei meuleudi d'hon tadou koz. Ar virionez var bep tra da genta. Daou zefot a hellet da rebech da Vreizis en amzer sant Villiau : karet a reant re ar vrezel hag ar banne. Hon tud koz paian a oa krenv var ar chupere. Deuet da veza kristenien e kendalc'hont d'en em vesvi aliessoc'h eget ho zro, hag hirio ho bugale vihan n'ho deus netra da rebech d'ho zud koz var ar poent-man. Lavaret e helfet e ve

an evach dreist-muzur eun eil pec'het originel evit Breizis. Ar bopl a Vreiz, eme an Autrou'n eskop Graveran, breizad e-unan, a ve kenta popl a zo er bed m'ar gelfe tremen dirak eun hostaleuri heb chom a za. Ar bodillio pe ar bod-huelvar a gommand ar boplse ken kaled a benn gousgoude.

Guella pez so e karomp nebeutoc'h ar brezellou ha muioc'h ar peoc'h. Hon tud koz evit nebeut a dra, evit nebeut a arc'hant, a ie d'ar vrezel evit ar re all. Pa ne vije roue ebet, ne oa ket diez ken nebeut lakaat anezho d'en em ganna etrezho. Ar c'hleze, ar goaf, ar goarek a oa skanv d'ho dourn.

Pa vijent quintet var ho c'hezedigou bihan, ker buhan d'an inkane ha ker kaled ous ar boan, ne oa ket brao kaout affer ous eur vanden vad anezho. Mont a reant a dreuz koajou, laginier d'an daou-lamm ruz hag en eur zistaga tennou bir evel divar nij.

Beza kalonek so mad, karet ar vrezel evit

ober brezel so fall. En heritach, hon tud koz ho deus lezet ganeomp guelloc'h eget n'ho devoa ho-unan : an nerz-kalon da stourm da vad pa vez red, heb klask brezellekaad hebizom. Oh ! ia, evit Doue hag evit ar vro, evit ar feiz hag an henor, Breizis, pa vo red, a zavo ato ho fenn hag ho c'haloun. Malheur d'an hini a douchfe ous hor c'hroasiou hag hon ilizou, malheur d'an hini a dolfe eun dorn sakrilach varnezho da essa mouga hor relijion ; guelet ha santout a raffe ez omp bepred Bretouned, Bretouned tud a feiz.

DAOUZEKVET PENNAD

Ar Yeaudet

Unan benak eus ar re ho deus skrivet en amzeriou diveza, divarbenn an traou kaer c'hoarveet guechal e Breiz, a lavar n'eus bet kear ebet biskoas en hor bro da zougen an hano a Lexobi pe e brezounek Koz-Yeaudet.

Ne hellan ket en em lakaat a-unan gantho. Araok eta merka aman ar pezh a lavar histor Breiz eus Lexobi, e renkan da genta lavaret ar pezh a ra dinn kredi, ha kredi stard, kouls a p'am bije guelet, ez eus bet eur gear vraz e kenver Lannion guechal, hanvet Koz-Yeaudet.

Da genta an oll skrivaneurien eus ar seitevet, trivac'hvet kantvet hag araok, a goms oll eus ar gear-ze. Piou da gredi? Pe ar

scrivaneurien a oa an tosta d'ar pezh a verkent pe ar re diveza? Evidon-me n'oun ket nec'het. Piou a vo an dinna da vea kredet divezatoc'h divarbenn ar vrezel erruet e Frans e 1870, pe ar re a skriv hirio var an dra-ze pe ar re a scrivo abenn mil bloas aman? A dra zur ar re a skriv hirio hag ar re a scrivo abenn nebeut aman.

D'an eil, ar greden a zo bet ato hag a gendalc'h hirio e kenyer Lannion ha tro var dro ez euz bet eur gear vraz er Yeaudet guechal. Daoust hag ar greden-ze peurbadus eus a eur bopl a bez ne gont evit netra! Ouspen-ze, ar greden-ze a zo fountet mad, rak guelet a rear c'hoas ha dreist oll kaout a rear dindan an douar kals a relegou eus ar gear vraz-se.

D'an trede, ar c'habiten romen Coesar, en histor en deus skrivet divarbenn ar vrezel great ganthan da Vro-C'hall ha da Vreiz a goms teir pe beder guech eus Lexobi. Eun

den desket meurbet, guir eo, an Autrou Danville, a lavar e oa Lexobi en Normandi. Mes sonjit mad ive en dra-man : n'eo ket difennet d'an dud desket lavaret avisiou eur sottis benak.

Leveromp eta, gant an Tad Dom Plaine, desketa den zo en hon amzer var histor Breiz, ez eo direzoun aoualc'h mont da nac'h eur gear pa veler c'hoas he relegou.

Leveromp brema, e berr-gomzou, ar pezh a lavar an histor eus ar gear-ze. Eun interest vraz hor beus da anaout anezhi, p'eo guir eo bet enghi besiet sant Villiau. Da genta, eun dra eo anzavel brema kazi gant an oll, a heller da lavaret, ez eo bet hor bro skleri-jennet dre ar guir feiz er c'henta kantvet (1).

(1) An Autrou Bremenson, beleg, ha meur a hini all c'hoas, ho deus prouvet sklear ez eo bet prezeget an aviel ha savet eskoptiou aman hag haont er Frans a bez, er c'henta kantved. Eur vro kement a ma zeo Breiz ne jomas ket sur aoualc'h heb missionerien

Ar beleg Drennalus, diskib da sant Joseph Arimathi, a oue, eme an Tad Albert, kenta abostol Breiz-Izel. Er bloas nao ha triugent goude maro hor Zalver, sant Lin, Pap e Rom goude sant Per, a zigassas e Bro-C'hall sant Clair, an avieler Adeodat ha kals c'hoas a dud santel da brezeg er vro-ze an aviel. Sant Clair a brezegas e costez an Naoned, hag a deuas da veza kenta eskop er gear-ze. Adeodat a deuas beteg Guened ha Kerne. Doue a zigassas sikour d'an daou abostol santel-man, rak ar beleg Drennalus a ziskennas eus a Vreiz-Veur pe Vro-Zaoz e Breiz-Izel. Douara a reas e Pors-Liogan, e kenver Conk-Leon, gant eun nebeudik ken-vreudeur. Ac'hano e tremenas, en eur brezeg

hed ar c'hantved-se. Piou int ? Histor Breiz ne hanv nemet daou pe dri, Drennalus hag Adeodat. Perak ne gredfemp ket e vent deuet e Breiz er c'henta kantved, p'eo guir ez eo prouvet ez eus deuet unan benak.

ar guir feiz, beteg Montroulez. Gounid a reas da Zoue ar gear-ze oll ha kals tud tro var dro; sevel a reas ennhi eun ilis dindan hano sant Jakez ar Major, abostol, hag var unan eus an hentchou a ziskenne e kear e savas eur pilier. Var benn ar pilier-ze e reas ober furm eur groas, ha dindan ar groas-se, en eun toullik great er c'hoat, e lakeas imach an Itron-Varia o tere'hel ar Mabik-Jesus etre he divrec'h. Ar pilier-ze a zo e kroas-hent Itron-Varia ar Feunteun, tost d'ar gouent nevez. E mil eis kant tregont, e talc'het c'hoas eur lampr var elum dirak ar groas-se, hanvet kroas al letern. Eur verz koz savet e Montroulez a verk deomp ive an oll draou-ze, a-unan gant histor Breiz.

Drennalus, goude bea distroet Montroulez ous Doue, a valeas beteg Lexobi pe Koz-Yeaudet, a zo var bord ar ster hanvet Leguer. Eno e chomas, ha dont a reas da veza kenta eskop Lexobi, en Treguer. O

veza klevet hano eus sant Clair hag euz ar vad a rea en Naoned, e kassas d'he gaout he arc'hbeleg Congalus evit en em glevet ganthan var an doare guella da ziazeza mad ar feiz er vro-ma. Sant Clair a deuas e-unan goudeze d'ober eun dro e Bro-Guened hag e Kerne evit kenderc'hel a za al labour great dre eno gant an avieler Adeodat. Daouzek ha triugent eskop so bet er Yeaudet.

Sant Tugdual a oue ar brudeta anezho. Sant Tugdual a oa mab da santes Pompea, pe Pompe, ha breur da santez Seva. Eur gerik benak epken divar he benn :

Sant Tugdual a deuas ive eus a Vro-Zaos er vro-ma assamblez gant daouzek ha triugent relijius all. Hanvomp, en ho zoues, sant Ruelin, sant Guevroc, sant Goneri, sant Lavan, sant Briac. Santes Seva eo patrounez Sant-Seo e kenver Montroulez, hag evit doare santes Pompe ha sant Ruelin a garias kals ive ar barrezik-se, p'eo guir ho deus roet ho

hano da ziu geraden : da Drepompe ha da Ruelin.

Sant Tugdual a deuas da vea eskop e Lexobi goude maro an eskop Tiridranus. D'an amzer ma scribe an Tad Albert, e velet c'hoas, emezhan, eur releg benak eus ar gear goz Lexobi. Eus ar gear-ze, eme breviel eskopti Treguer, ne jom mui netra, da vihana var gourre an douar, nemet eur chapelik koant en honor d'ar Verc'hez, e parrez Ploulec'h, tost da Lannion. Ervez ar barz a ganas Lexobi, e oue savet eno ar chapel genta e Breiz en honor d'ar Verc'hez, gant an eskop Drennalus, m'oar vad :

Me goms dec'h, emezhan, a eur plas santel,
A zo savet e Bac-Leguer
En honor d'ar Verc'hez Vari,
Ar genta ilis gret dezhi.

Gloar d'ar Verc'hez ar Yeaudet
Meulodi d'he mah benniget.

Er bla daouzek ha triugent,
Goude maro roue ar zent,

E oue savet er Yeaudet
En hano he vam benniget.

Sant Tugdual a oa eskop Lexobi er bloas 532. Gouarn a reas he eskopti epad c'huec'h vloas ha triugent, eme an Tad Albert.

Barz Lexobi a lavar ar memes tra :

C'huec'h vloas ha triugent eo bet
Sant Tual eskop er Yeaudet,
Hag eno e oue enterret
Gant peb honor ha peb respet.

Daouzek ha triugent eskop a zo bet e Lexobi araok ma oue distrujet gant an Normantet. Goudeze an eskopti a oue kasset da Lan-Dreguer hag eno e chomas eskop Tregueris beteg ar Revolution vraz. Abaoue eskopti Treguer a zo bet staget al loden vrasa anezhan ous eskopti Sant-Briec hag eul loden all ous eskopti Kemper. Unan ha kant parrez, ha nao dre varnugent, a oa en eskopti Treguer arok ar Revolution. C'huec'h varn-

ugent parrez so bet staget ous eskopti Kemper.

Kals eskiptien a zo bet
E Lexobi, er Goz-Yeaudet ;
Daouzek eskop ha triugent,
Ervez ma lavar *Buez ar Zent*.

Sant Tugdual a reas kals a viraklou epad he vuez ha goude he varo. E Lanmeur, e lakaas epad he vuez eur feunteun da ziouan. E Plouigneau, an eskop Martin, er bloas 715, oc'h ober an dro d'he eskopti, a lazas an tam-guall e ti ar c'hristen Brelinguet dre vertus relegou sant Tugdual. He relegou a jomas eul loden anezho e Lexobi hag eul loden all e kouent Trecor, el leac'h ma ema brema kear Landreguer, beteg ma teuas an didruez Hasteings, gant eun arme a dud dizoue ha laer, da zistruja Lexobi er bloas eis kant c'huec'h ha tregont. Goravanus a oa d'ar poent-se eskop e Lexobi (836).

Tec'het a reas kuit en eur gass ganthan

relegou ha tenzor ar gathedral. Mont a reas ive da gouent Trecor, savet gant sant Tugdual, da gerc'het he relegou hag e lakaas anezho en eul leac'h sur, e Chartres. Eno e virer c'hoas penn sant Tugdual (1).

Kement-se oll a lenner e buez sant Clair ha sant Tugdual, skrivet gant an Tad Albert, hag er verzkoz savet a bell zo divarbenn Lexobi pe Koz-Yeaudet. Ervez an Tad Gregor eus a Rostrenn, Koz-Yeaudet a dle beza skrivet evelhen : Koz-Gwevded pe treiz koz. Mes ervez ar paperou kossa, Gueodet pe Keodet a sinifi kear. Cetu perak ar C'hoz-Yeaudet pe Koz-Gueodet, eme an Autrou Kerdanet, a zo hanvet e latin var ar scridou

(1) Ar pennad-man a zeblanto da veur a hini beza eun dec'haden divar an arouden. An oll draou-ze ne dennont ket, emezho, da vuez sant Villiau. Nan sur ; gousgoude e kaven diez chom heb lavaret netra eus ar gear a zo besiet ennhi sant Villiau, goude bea komzet eus an oll parrosiou ho deus choazet anezhan evit patron.

kossa : *Vetus civitas*, da lavaret eo : kear goz (1). E Kemper ez eus bet ive eun ilis hanvet ilis ar Gueodet (*Beata Maria de civitate*).

Eur ru a zo ato e Kemper hag a zoug hano ar Gueodet.

Ar chapel nevez a zo hirio e douar Ploulec'h, var bord ar ster Leguer, eul leo vad eus Lannion, a zo ato dediet d'ar Verc'hez. Epad mis mae ez a di, d'ar Yeaudet, pili-rinet a fors eus tro var dro, eus Montroulez, eus Landreguer, eus Guengam, eus Penpoull ha Pontreo. Parissionis Ploumilliau, tost da Lannion ha d'ar Yeaudet, ho deus diou rcezon vad da vont di da bardouna. Da genta, evit henori ar Verc'hez glorijs Vari a ziuall Breiz ous an dud fall, d'an eil evit

(1) Lavaret hor beus, e leac'h all, hor zonch var an daou c'her-man :

Gueodet, treis Odet e Kemper,
Yeaudet. kear ar bopl hanvet Yadètes.

henori sant Villiau enterret er Yeaudet. He relegou a dle bea chomet en douar-ze. Eur blijadur e vo eta evit kement hini a gar sant Villiau hag ar Verc'hez mont da zaoulina e mis mae, var bord al Leguer, e chapel ar Yeaudet. Ho c'halon a drido gant ar joa pa stokint ho c'hlin ous an douar-ze benniget dreist oll gant ar Verc'hez evel ar Folgoat ha Rumengol, var an douar-ze e deus resevet kement a relegou santel.

TRIZEKVEK PENNAD

Guimilliau

Ne gavan ket dizoare lavaret brema eur gerik benak eus ar parrosiou ho deus choazet sant Villiau evit patron. Lod so hag a anavez nebeut aoualc'h histor ho farrez hag a gompren ive re nebeut an traou kaer a zo en ho ilis. Rei anaoudegez eus eur barrez ha sklerigen eus kaerder eun ilis eo dougen ar barrisonis da garet muioc'h anezho.

Guimilliau a zo eur barrezik vihan etre Sant-Thegonnec ha Lambaol-Guimilliau. A veac'h ma c'hell sevel c'huezek kant den.

Eur gorden a deir leo hirder a raffe an dro dezhi. Mes m'ar deo bihan hirio Guimilliau, n'eo ket bet ato. En eur gossaat eo bihanneat. Arok ar Revolution vraz ec'h

astenne kals hirroc'h he diouaskell etrezek Landi, Plouneour ha Commana. Guechall Lambaol-Guimilliau a oa eun dre eus a Vimilliau evel Sant-Salver a oa tre eus Commana, ha Loc-Eguiner eus Plouneour. Guimilliau a dape eus kostez Landi beteg ar Pont-Kroas, eus kostez Plouneour ha Commana beteg Kereon ha Penn-ar-Ger. Cetu aman ar c'heriou a zo bet distaget eus Guimilliau evit kreski parrosiou nevez : Kereon ha milin Gereon, Kerriou hag ar Meskouez, Goaz-Euzen hag an Tiez-Nevez, Penn-ar-Ger ha Kerbolodou. Guelet a rear atao, e chapel Penn-ar-Ger, hano an Autrou Richou, person e Guimilliau araok ar Revolution. Epad ar Revolution, an Autrou Richou a en em dennas e Bro-Zaos ; pa oue fin dezhi e tiztroas adarre d'he barrez. Douara a reas e Rosko, ha var am eus klevet lavaret, he bopl a bez a ias d'he gerc'had, e procession, beteg Kersaint-Gilly e Guiclan.

E penn ar c'hanvet seitecvet (1602), an Autrou Ian Guillerm a oa a person e Guimilliau. Bez e oa eun den guesiek braz meurbet ervez ar scrid a verk deomp buez Mikel Noblets. Er bloas c'huezek kant tri-vac'h e teuas da vea vikel vraz a eskopti Leon, en amzer an Autrou'n eskop de Rieux. Renta a reas d'an Autrou de Rieux ar ser-vich vrassa, ha kaout a rer he hano e penn an oll œuvrou kaer, devot, ha madeleuz savet en he amzer. An oll leoriou brezounek, an oll kantikou, an oll buesiou sent moullat d'ar mare-ze, pe e Kastell, pe e Montroulez, a zo sinet ganthan. Kaeraat a reas manifik he ilis, kouls hag hini Lambaol; sevel a reas e Guimilliau eur c'halvar hag eur pres-bital nevez. Ar beleg santel-se, henor Guimilliau hag eskopti Leon, a varvas er bloas c'huezek kant pemp ha daou ugent (1645).

Besiet eo e katedral Kastell; e chapel Itron-Varia Kaël, e kenver ar voëger. Lavaret

a rer e velas_gant kals a boan-spered kear Vrest o sevel hag o kreski (1631). Cetu aman ar pezh a lavaras neuze divarbenn Brest, ha koms a reas evel eur guir prophet.

Er bloas mil seis kant pevar ugent ha nao,
Brest ne dalvezo ket eur bod skao;
Hag er bloas mil seis kant pevar ugent ha dek
Ne jomo ozac'h ebet dizoursi gant he c'hreg.

Penos rei da anaout kals sklerroc'h an dispac'h spontus a raje ar revolution vraz ! An Autrou Ian Guillerm en deus skrivet ive buez Salaün ar Foll. D'ar mare ma oa person e Guimilliau, an Autrou Rolland de Poulpiquet, mestr eus maner ar Feunteun-Speur, e Taule, a ioa person e Sizun. Goudeze e teuas da vea person e Taule, ha vikel vraz e Leon varlec'h an Autrou Guillerm. Scrivet en deus eun tamik histor Breiz, buez sant Suliau, patron Sizun, ha buez sant Tennenan, patron Plabennec. Er bloas 1656 e oa

c'hoas beo. An daou vignon-man zo enterret an eil e kenver egile e Kastell-Paol.

An Autrou Rolland de Poulpiquet a oa tonton koz d'an Autrou Dominik de Poulpiquet bet divezatoc'h eskop a Kemper.

En amzer an Autrou Ian Guillerm e oue badeet e Guimilliau ar plac'h santel Mari-Amice Picard, eus ar Ger-Gam, e Guiclan. Evit doare, ar botrezik-man, pa c'hanas, a renke beza fall-fall p'eo guir e teuas da reseo ar radiant da Vimilliau ; rak ne gredan ket e ve bet morse ar Ger-Gam stag ous Guimilliau. Divezatoc'h an Autrou Ian Vuillerm, deuet da vea chalouni e Kastell-Paol a oue kovessour Mari-Amice Picard e Kastell hag he difennour a eneb an teodou fall a glask ato dua ar vertus. Lennet am eus, em iaouankis, buez burzudus Mari-Amice Picard, skrivet gant an dorn dre soursi an noblans eus he amzer. Meur a skritur dizhenvel a zo er scrud-se ; pephini a verke hennan ar pezh en

devoa gueleit pe glevet divarbenn Mari-Amice. Ar vuez-se a dle bea brema e Kemper, en eskopti ; eur pennad mad eo bet etre douarn an Autrou de Lezeleuk, chalouni e Kemper, ha maro eskop e kear Autun. E goaremu ar Ger-Gam e veler feunteun Mari-Amice Picard (1).

Varlec'h an Autrou Ian Vuillerm, he niz, Herve Guillerm, a deuas da bersoun da Vimilliau. En he amzer eo bet gret ar fontbadisiant, ar pezh-labour-ze ken kaer, ken prisius, hag ive ar c'hrouff-ograu hag ar gador-sarmoun (1675). Var a lavar an Autrou Kerdanet, den guesiek meurbet, marvet e kenver Lesneven, ar c'halvar e Guimilliau a zo bet gret gant an Autrou Guillerm kossa.

(1) En eul leor eus ar re gaera e brezounek, e leor hanvet *Bali an Env*, eo merket ar pep brassa eus buez Mari-Amice, a zo pedet evel eur zantez gant ar parrosiou divar dro. En dro d'he feunteun e vez dalc'het ato eur fleurennik benak anv-c'hoan.

Beac'h am eus o kredi an dra-ze ; rak ar c'halvar kommaset er bloas 1581, a oue echuet er bloas 1588.

Eus ar gont-se, an Autrou Ian Vuillerm a vije bet persoun e Guimilliau eun tregont vloas benak.

En em drompla, a gredan, a ra ive an Autrou Kerdanet, pa lavar e oue hanvet an Autrou Guillerm, vikel vraz e Kastell-Paol er bloas 1613 ; rak er bloas 1615 e oa c'hoas o chom e Guimilliau evel ma verk deomp ar mean-bennherez a zo azioc'h dor ar vered hirio : « Ar presbital-man, emezhan, a zo bet savet er bloas 1615, en amzer an Autrou Ian Vuillerm, d'ar mare-ze persoun e Guimilliau. » Penos kredi e vije ar vikel vraz o chom e Guimilliau, pemp leo eus Kastell ? Guelloc'h eo eta ganen lavaret e oue hanvet an Autrou Guillerm vikel vraz var dro ar bloaz (1618) mil c'huec'h kant trivac'h.

Ilis Guimilliau

Ilis Guimilliau, da vihana eur c'hostez anezhi, kostez ar C'hreis-Deis, a zo bet savet er bloas mil c'huec'h kant ha pemp, en amzer an Autrou Guillerm kossa, m'oar vad. Greomp an dro d'ar ilis-se en eur lavaret eur gerik benak eus ar pep kaera zo ennhi. Ne hellin ket poueza nemeur var netra evit mont buhannoc'h. Red e ve ober eul leor a espres evit merka plean aoualc'h an oll labouriou kaer zo en ilis-man. Ne verkin aman nemet ar pezh a sko ar muia an daoulagad, nemet ar pezh so meulet gant an oll.

E diabars an ilis, azioc'h an auter vraz, ez eus eur veren gaer a liou ; varnezhi eo displeget Passion hor Zalver. Lakeat eo bet eno pa oue savet an ilis. An dud a vicher a gav anezhi eus ar re gaera etouez ar guerkoz a liou a gaver var an ilizou. Ne leverin

netra eus an oll scultrerez a zo azioc'h hag en dro d'an auteriu. Ne heller ket, eme ar scultrerien, labourat kaeroc'h ha mistroc'h ar c'hoat eget na zo bet gret en ilis-man. Scultrerez ar font-badiant dreist oll a zo dispar. An autrounez Larc'hantec, guinidik eus a Plougonven, daou vestr, m'ar deus, da labourat, da scultra ar mean, ho deus kavet eno kals da studia ha da heuilla. Ar memez daouarn, anad eo, ho deus labourer ar gadorsarmoun, ar c'hrouff-ograou, hag ar mean-font.

A zeo d'an auter vraz, en dro da auter sant Villiau, e kaver buez ar zant-man displeget oll var tolennou bihan e koat scultret. Er c'henta tolen, a gleiz, d'an neac'h, e veler sant Villiau c'hoas iaouank oc'h ober he beden. An Tad-Eternel, azeet var eur goabren, ganthan eur vantel ruz hag eur gurunen ruz, a en em ziskuez dezhan. Ar vantel hag ar gurunen a lavar da sant Villiau e vo

roue. Ho liou ruz a zesk dezhan a vo ive merzer.

A gleiz ato, hag izelloc'h, var an eil tolen, e veler ar bugelik Mœlar, mab sant Villiau, oc'h en em deuleur etre he zivrec'h. Ar brinsez Aurilla, Rivod, hag ar servicheurien eus ar palez a zo en dro dezho. Rivod a zo ato scultret e pep leac'h gant eur baro hir ha du, ha var he benn eur boned ruz henvel ous re Plougastellis ar sivi. Ar boned rus-se, rus-tan, a zo bet lakeat var he benn gant ar scultrere evit diskuez ez eo muntrer.

Var an drede tolen, sant Villiau, kouer ha roue assamblez, a ro he ursiou d'he servicheurien a zo oc'h ober an eost. Eun eoster a zo en he genver; daou all, var an dolen a zo a fas da houman a zeo, a zelaou he gomzou. Var ar pevare tolen, Rivod a deu da zibenna he vreur Milliau. An treitour en deus an-ear da rei he zorn d'he vreur arok tenna he gleze. En tu-all, a zeo, e veler ælez gar-

dien Milliau ha Rivod, spourounet oll, o kemmeret an teac'h.

En tu deo, d'an neac'h, ar c'hraouadur Moelar, a en em dol gant spont etre divrec'h he vam, ar brinsez Aurilla. Rivod hag eun treitour all ganthan a zo deuet, epad an noz, da glask laza pe mac'hania Moelar. Ar bugel a spont dirak ar c'hleze hag a lam da gaout he vam.

En eil tolen, a zeo, Milliau, Rivod ha Moelar a ro an aluzen. Milliau ha Moelar a ro gant plijadur, en eur vousec'hoarzin ous ar paour. Ho dorn kleis ne oar ket, sur aoualc'h, petra ro ho dorn deo. Rivod a ra sellou du, pesiou sellou ous ar paour hag he zorn avarisius ne ziskrog ket buhan eus an tam bara a zo ennhân. An dud fall n'int brokus nemet pa vez hanô d'ober an drouk. Neuze avad e tolont arc'hant dioutho evel douar. An hini a rei eun tol-fall benak evi-

tho, pe a roio leac'h dezho d'hen ober, a zo sur da vea paet mad.

E kreis, etre an tolennou bihan-ze, cetu skeuden vraz sant Villiau. Eur c'hleze a zo en he zorn deo, goalen ar roue en he zorn kleis, var he benn eur gurunen, var he ziouskoas eur vantel ruz perlezennet a fourdilis, pe gentoc'h, a herminik. Dindan treid ar skeuden-ze, guelit sant Villiau dibennet, e daou leac'h all. He unan e talc'h he benn en he zorn, eun æl a zalc'h anezhan a za; Rivod, he gleze dindan he viskamant, a jom a bân da zellet ous goad he vreur o redek. E Ploumilliau, e kenver Lannion, sant Villiau dibennet a zalc'h ive he benn en he zorn, e daou leac'h. Kement-se a ro deomp da gredi e ve bet c'hoarveet ar mirakl-se goude he varo; rak neket epken ar scridou a rent testeni guirion eus an amzer dremenet, mes ive, kouls pe vell, ar c'hredennou peurbadus.

Sacristeuri Guimilliau ne deus ket he far er vro-ma, nemet hini Pleyben e ve. Ar meanfont n'en deus par ebet marteze er bed-oll. Da vihana, kement hini ho deus gueleit anezhan ha scrivet divar he benn, n'ho deus merket hini all ebet ken kaer hag hen. Beza ec'h hell kaout eis troatad varnugent a huelder. Ar c'holoen anezhan a zo dalc'het en ear gant eis post dero. Var bep hini eus ar postou-ze, zo skultret deillou guinien ha kals lapoussed a ve lavaret beo-buezek. An deillou guinien n'int ket henvel var daou bost deustu. An daou vreur Arc'hantec ho deus kemmeret skuer divar an deillou-ze evit kaerat ar c'hroasiou-mission savet gantho. Tro var dro, d'ar c'holoen eo scultret, poltrezou an daouzek abostol ha re ar pevar avieler. Ar c'houffr-ograou a zo ive kaer meurbet. N'eus mui varnezhan nemet teir dolen koat scultret. Klevet am eus lavaret ez euz bet kasset unan all ac'hano da Baris, d'ar palez hanvet

Louvre. Var an dolen zo e kenver ar meanfont, eo scultret triumph an Ilis en amzer an impalaer Constantin. Ar feiz, an esperans, ar garantez a vale araok karr a driumph an Ilis. An dud a en em dol dindan rojou ar c'harr-ze a verk deomp an errol hag an oll gustumou fall flastret, distrujet gant ar guir relijion. Dirak an auter vraz, an eil dolen a ziskuez deomp ar roue David, o sini gant an delen en eur gana psalmou en henor da Zoue, hag an trede ar vuzisianez santes Cœcilia, patrounez ar vuzisianet, o c'hoari gant an ograou. Ar gador-sarmoun, kaer meurbet, ne dal ket evelato hini Sant-Thegonek. En oll labouriou gret en ilis Guimilliau, ec'h anavezzer an doare da labourad digasset e Frans gant ar scultreurienn guesiek a deuas eus an Itali da c'heuil ar rouanez Marie de Medecis.

Ar porched e Kerzanton a zo ken kaer hag hini Landivisiau hag a dosta soken ous hini

Landerne. En dro da c'hinou ar porched eo skrivet, gant skeudennou bihan bennherez e leac'h lizerennou, histor an Testamant Koz hag hini an Testamant Nevez. Savet eo bet er bloas 1605, er memes amzer gant hini Sant-Thegonnek. Kaout a rer skrivet varnezhan ar c'homzou-man : « *Hic locus venerandus vere est domus orationis*, » da lavaret eo : al leac'h-man santel a zo e guirionez ti ar beden. Ar c'halvar, disterroc'h eget re Plougastel ha Pleyben, a zo evelato din da veza gullet ha meulet. Nao bilier teo, ha pemp vaout e bennherez a ra an dro dezhan. Oll buez hor Zalver a zo eno scultret e mean. Ar skeudennou bennherez a zo guisket evel ma vijet er c'hantvet c'huezecvet. Dre-ze eun den guesiek ha c'hoantek da anaout guiskamanchou an amzer-ze, er vro-ma, a gaffe eno leac'h d'ober eur pennad mad a studi. Leveromp aman, araok tremen pelloc'h, ez eo bet savet kazi er memez amzer an oll

labouriou kaer a veler e Guimilliau, ha tro var dro. Rak-se mean-font Guimilliau ha karnell Sant-Thegonek a zo eus ar memes bloas. Kement-man a ziskuez deomp eo bet gret an oll draou kaer-ze gant ar memes artizanet, gant ar memes breudeur, a hellan da lavaret ; rak an artizaned ho deus goloet ar vro-ma a gement a ilizou dispar, a rea evel eur vreuriezh savet da labourad evit gloar Doue, ha nan da c'hounid arc'hant.

E kenver kalvar Guimilliau, e korn ar vered, ez eus eur chapelik vihan dediet da santes Anna. An Autrou Kerdanet, n'ouzon ket perak, a hanv anezhi chapel Sant-Roch. Savet eo bet er bloas 1648. Ervez lavar ar re goz, an ograou hag ar mean-font a goustas dek mil scoed. Guimilliau, araok ar Revolution, a oa stag ous Lesneven evit reseo ar justis, a oa, m'ar kirit, e dalc'h Lesneven. Muioc'h a dud a save neuze eget brema Lambaol ha Guimilliau assamblez, rak pa scribe

an Autrou Ogee e oa ennhi tri mil eis kant den en oad d'ober ho fask. Brema a veac'h ma tapont ar gont-se ho diou, goude niveri ar vugale vihanha. Daou vaner epken, hag a dalie ar boan, a oa e Guimilliau : hini Kervern hag hini Kerbalanec. Maner Kervern a zo bet pell hag hir d'ar famill de Kergorlay. Maner Kerbalanec er bloas 1500 a oa o chom ennhan an Autrou Goulven Mancazre. Maner Kervern en deus bet ato nebeutoc'h a vrud. Autrounez Kerbalanec ho deus gret koms eus ho vaillantis bepred. Hirio, eus an daou vaner-man, ne jom mui en he za, nemet hini Kervern.

Pa gomzan eus an dud bet brudet guechal e Guimilliau, arabat eo ankouna-c'haat an Autrou Gall, bet person er barrez-se. Var a glevan, an autrou-ze en deus gret meur a werz kaer en he vuez. Siouas ! n'ouzor mui hirio da beleac'h mont d'ho c'hask. Ar Revolution e deus distrujet ke-

ment a leoriou prisius a raffe brema hor plijadur hag hon hencr.

PEVARZEK VET PENNAD

Lambaol - Guimilliau

Evel ma z'eo bet Lambaol eun dre guechal a Vimilliau, ne hellan ket chom heb lavaret eur ger benak eus ar barrez-se. Histor Guimilliau hag hini Lambaol, epad pell amzer, ne rejont nemet unan. Hirio, an dre guechal, a zo savet brassoc'h eget ar vam-barrez. Ouspen-ze, Lambaol a virit e ve komzet anezhi. Kement a draou burzudus so bet c'hoarveet eno, kement a labouriou kaer e deus ive da ziskuez en he Iis ma ne ven ket diylam o tremen sioul abiou dezhi.

Sant Paul, kenta eskop a Leon, a zavas e Lambaol eur gouent menec'h er bloas 520

pe var dro. Er memez amzer e savas eur gouent all e Kerlouan, hag unan all c'hoas e parrez Plougar. Kouent Kerlouan a oue hanvet Ker-Paul ha var al leac'h m'edo e veler c'hoas chapel Paul. Hini Plougar a zougas an hano a Vouster-Paul. Eur maner koz er barrez-se a gendalc'has goudeze ar memez hano. Kouent Lambaol-Guimilliau ne zougas hano all ebet nemet hini Lan-Paul. Eur groaz tost d'ar bourk a zo hanvet Kroas-Paul.

Kouent Daoulas a oue savet ive prest goude ha chomet so c'hoas hirio eul loden anezhan.

Daou vanac'h a oue lazeta eno gant A-trou ar Faou, niz d'ar prins Arastagn, hag evit he binijen, sant Paul a lakaas anezhan da sevel eur gouent nevez, hini daou-laz. D'ar mare ma teuas sant Paul e Breiz, e oa ennhi, evit doare, kals dragouned. E Daoulas e oa unan kaer hag a rea an drouk ar vrassa. Sant Paul a ias da zilivra ar Faou eus al

loen spountus-se. En dizro eus ar Faou, gant an dragon stoliet ganthan eno, sant Paul a dremenas dre Vimilliau ha Lambaol. Pa oue erruet e kenver eur c'hoadik bihan a zo tost da Lezerasien, daou zen en em gavas da gaout ar zant abers tud ar Faou. Lavaret a rejont dezhan e oa chomet eun dragon bihan er Faou varlerc'h an hini koz, hag her pedchont da zilivra ive ar vro eus a ennhez. Sant Paul a zistagas neuze an dragon braz a heuille anezhan hag a c'hourc'hemennas dezhan abers Doue mont da gerc'hed al loen bihan gouez chomet er Faou. An dragon a zenthas var an heur hag a zigassas d'al leac'h-se assemblez ganthan an dragon bihan. Abaoue ar c'hoad-se a zo bet hanvet hag a zoug ato an hano a Goat-ar-Serpant. Guelet a rer dre eno ive eur feunteun hanvet Feunteun-Paol. Ac'hano sant Paul a gassas ganthan an daou zragon da Enez-Vaz e leac'h ma oa he gouent vrassa. Staga a reas

anezho ho daou ous eur vaz plantet en douar, eme an histor, hag ous ar vaz-se e varvchont gant an naon heb ober drouk da zen. Goude ho maro e ouent taolet er mor. Euz ar vaz a blantas sant Paul en douar evit derc'hel an daou zragon eo e teu d'an enezen-ze an hano a Enez-Vaz.

Ar c'houentchou savet gant sant Paul e Kerlouan, e Plougar, e Daoulas hag e Lambaol, a oue distrujet gant an Normanted er bloas eis kant trivac'h ha triugent (878). Lambaolis a lavar e veler c'hoas e Traon-Louarn hano Autrou ar Faou convertisset ha badeet gant sant Paul. Rei a reas dezhan er vadisiant he hano e-unan, an hano a Baul. An daou vanac'h lazet gant Autrou ar Faou a oue an abbat Tadek hag an abbat Judulus.

E memor eus ar burzud c'hoarveet e Lambaol, Lambaolis e kenver skeuden sant Paul, tost d'an auter vraz, e kostez an abostol, ho deus lakeat ive an daou zragon.

Evit mont dre renk gant an amzer, leveromp brema eur ger eus santes Anastas. Santes Anastas a oa merc'h d'ar c'hont a Goat-Meur ha da santes Bider. He zad, den kriz ha difeis, a falvezas dezhan he dimezi d'ar c'hont Arthur a Benc'hoat. Ar santez iaouank a respontas dezhan e devoa roet he c'halon da Zoue ha ne felle dezhi kaout ken pried nemet hor Zalver J.-C. Kaer en devoa he zad poania da lakaat anezhi da chench sonch, netra ne rea. Pedi, aspedi, gourdrouz ha kastiza, ne oa ket guelloc'h an eil eget egile evit dont abenn eus ar zantes. Anastas a zalc'he d'he guerc'hded ha netra er bedman ne helle distaga anezhi eus karantez Jesus. Mont a reas kement a zrouk en tad malheurus-se, pa velas e laboure en aner da blega he verc'h ervez he sonch, ma krogas eun devez en eur c'hleze evit he dibenna. Kaout a reas Anastas oc'h ober he feden, o vouestla eur vech c'hoas hag evit ar vech

diveza he c'halon bur da Zoue. Dirak ar maro, e roas he buez da Zoue, hag ar c'hleze, en eur goeza var he fenn, a reas anezhi eur verzerez. Savet so bet eur chapel en he henor e parrez Lambaol, e kenver Traon-Louarn. Hirio ne jom mui eus ar chapel, nemet eur pennad moger e kenver feunteun santes Anastas. Ar mammou a ia di gant ho bugaligou vihan evit kaout dezho kentoc'h ar c'hras eus ar c'herzed. Red eo esperout e vo savet ar chapel a nevez heb dale. Lambaolis a zo dleourien da santes Anastas eus a gement a c'hrassou ! Kement ho deus kaereat ho ilis, ho guered, ho chapelou all, ma ne hellont ket lezel hini santes Anastas ken dirapar (1).

Skuer ar guerc'hded evit iaouankis Lambaol a zo din ive, sur aoualc'h, da gaout eun

(1) Kantik santes Anastas a zo bet moullet a nevez er bloas 1879, e ti an Autron Kerangal.

doen evit diskloia he skeuden. E chapel ar sepultur, kempennet a nevez eur pennad so, eo merket, var guer a liou, merzerenti santes Anastas. Ar zantes so d'an daoulin, kroasiet he daouarn ; he zad, fulor eun tigr var he vizach, a zao he gleze da zibenna anezhi. Eun oan a zouder a ginnig he c'houzoug da gontel eun tad-kiger. « *Tanquam agnus coram tondente se.* » Dindan he zreid eo skrivet ar c'homzou-man :

He zad e c'havas var he daoulin
Oc'h adori he Mestr divin,
Hag evel eur bleis kounnaret
Raktal hen deus-hi dibennet.

En eul leac'h all e veler santes Anastas oc'h ober an aluzen da beorien guisket e giz ar vro. Rei a ra, ha rei a ra founnus p'eo guir e ro he oll arc'hant, ialc'h hag all. Allo ! Lambaolis, eun aluzennik ive da santes Anastas e deus gret aluzen d'ho tud koz, eun aluzennik, pep hini ervez he eaz, d'ar

santez a gendalc'h da rei d'ho pugale vihan aluzen ar c'herzet hag aluzen ar iec'hed, ha d'ho pugale vraz aluzen ar furnez a zo kae-roc'h c'hoas.

Anaoudek parrisionis,
It don d'ho ialc'h, it d'ho mounis,
Ma savo santes Anastas
Kaeroc'h eget n'eo bet biskoas.

Ar sepultur ken kaer pe gaeroc'h eget hini Sant-Thegonnek hag hini Kemper, a zo bet gret en amzer an Autrou Herve Guillem, person Guimilliau. Labouret eo bet gant ar scultrer Anthoine er bloas c'huezek kant c'huezek ha triugent (1676). E kenver hano ar skultrer, e ma hano an Autrou Herve Guillem, person, hag hini an Autrou Gabriel Abgrall, kure.

Bols-dor ar vered a zoug ar merk 1668, hag hanoioù Alan Rannou hag Yvon Kertanguy. An tour zo bet fountet er bloas pemzek kant trizek ha triugent (1573). « *Anno*

Domini 1573, die 10 aprilis fundata est hæc turris. » An tour-man a zo bet fountet d'an dek a viz ebrel mil pemp kant trizek ha triugent. Tour Lambaol zo bet unan eus kaera hag huella tourioù a ioa e Breiz. Brema, abaoue m'eo bet diveget diou pe deir guech gant ar gurun, an oll a rebech dezhan ar boned noz ploum lakeat dezhan var he benn.

Korfet brao ha beget fall
Eo tour Lambaol, heb chipotal.

An Autrou Cambri, pa dremenas ar vro-ma, en amzer ar Revolution, evit renta kont d'ar gouarnamant eus doare ha kustumou Breiz, a gomse evelhen eus tour Lambaol. « Ma n'am bije guelet, emezhan, tour Kreisker e Kastell, em bije leac'h da veuli kals muioù hini Lambaol hag hini Sant-Thegonnek, mes tour Kreisker, ker skanv, ker mistr, ker brao ha ken huel a ra deomp evel ankounac'haad an oll dourioù all eus ar bed. » Ilis Lambaol so bet savet er memes amzer

gant hini Guimilliau. Var dor ar c'hostez kleis e man ar merk (1609). Kaera aoter zo en ilis eo an hini a zo a gleiz d'an auter vraz. Var ar stern-aoter-ze eo scultret ar Bassion e c'huac'h tolen. Ar patromou bihan scultret a veler eno a zo evel pa vent beo. Etre aoter ar Bassion hag an aoter vraz e kaver skeuden sant Villiau gant eur vantel guer goloet a herminik. Larkoc'h eun tamik, cetu merzerenti sant Villiau. He benn, evel e Guimilliau hag e Ploumilliau, a zalc'h en he zorn; ar goad a zired divar he c'houzouk. Rivod, var varc'h, ha guisket e ruz, a zo tost. Eun spes rebec'h so dindan he c'hronch. E kenver Rivod, daou floc'h bihan gantho ive bep a vrenniden. Rivod en deus eun ear more'hedus goude he dorfet. Estonus eo e ve bet roet e Lambaol al liou guer da skeuden sant Villiau hag al liou ruz da hini Rivod.

Ar font-badisiant a zo eus ar bloas 1651, ar c'houff-ograu eus ar bloas 1660 (Pouli-

quen, fablik). Ar mean-font a zo bet gret en amzer m'edo fabliket Milliau Roparts hag Herve Grall. Eun dra gurius c'hoas da velet en ilis Lambaol eo ar pinsin e bennherez a zo er c'hostez deo d'an ilis. D'an neac'h eo merket badisiant hor Zalver J.-C. En dour ez eus daou ziaoul, e furm serpentet, hag a en em dregas e guirionez evel ma raffe an diaoul en dour benniget. Eur mestr den e oa ar piker-mean en deus lakeat kement a fion, kement a zispac'h e korf an daou ziaoul-man.

An Autrou Ian Vuillerm, eme an Tad Albert, a lakaas he boan, p'edo persoun e Guimilliau, da gaeraat ha da greski ilis Lambaol. Var dro ar bloas 1615 e savas ar Rozera en ilis-se. Eskop Kastell en devoa d'ar poent-se da velet var Lambaol. Eno en devoa eur maner hanvet maner Koat-an-Eskop. Evel an Autrounez Guillerm, an Autrou Treguer, bet person e Lambaol eun ugent vloas benak, en deus ive lakeat he boan hag he vounis da

gaeraat he ilis hag he chapelou. Lambaolis a hell lavaret bennos Doue d'ar pastor mad-se. Eur beleg mad ne jom morse pell en eur barrez heb ober ennhi kals a vad evit an eneou. Var ar bez lakeat varnezhan gant ar barrisionis ec'h helfet scriva gant guirionez ar c'homzou-man.

Braz a feiz, ha braz a galon,
Braz eo bet e pep feson.

PEMZEKVET PENNAD

Plounevez-Porzay

Parrez Plounevez a denn he hano eus eur c'hoat hanvet Nevet a zo var he douar, eme an Autrou Pouchous, bet person e Plounevez-Porzay. Abalamour da ze, eme c'hoas an Autrou Pouchous, e tlefet scriva Plounevet ha nan Plounevez. Eur pinsin koz eus an ilis, eur pinsin e bronz, a zo merket varnezhan ar c'homzou-man : « An Autrou Laou Vergoz, person Plounevet er bloas c'huezek kant tri ha tregont (1633). Eur mean ive eus an ilis koz a zouge merket varnezhan an hano a Blounevet.

Parrez Plounevez e devoa da genta evit patrounet sant Laurans ha sant Stephan, betek maro sant Villiau ; hag ato soken ez int

patrounet eus ar barrez-se, mes varlec'h sant Villiau. Kaout a rer e Plounevez eul loden eus relegou sant Laurans ha sant Stephan, hag evit-se ar pardon a vez gret d'ar zul kenta goude gouel sant Laurans. Ar gaoz a zo e Plounevez eo bet ganet eno sant Villiau, e maner Trevilly e Koat-Nevet. Netra ne vir ouzomp da gredi kement-man ; gousgoude netra sur ken nebeut var ar poent-se. Ar pezh so sur eo sant Villiau en deus bet eur maner e kenver Plounevez, e parrez Plomodiern. Eun anter-leo eus bord Plounevez ez eus eur maner koz, hirio keriaden epken, hanvet Lan-Villiau, da lavaret eo, leac'h Mil-liau. A bell zo Plounevezis a lavar eo ganet sant Villiau en ho zouez. Eur greden ken koz a zo da vilhana din a respet (1). E guirionez, Kemper ha Plounevez ho deus ar

(1) Lod a lavar soken e ma c'hoas e Plounevez ar guele ma zeo bet ganet ennhan sant Villiau, epad m'edo he dad o chasseal e Koat-Nevet.

memes guir da gredi ez eo ganet sant Villiau var ho douar. Mes Plounevezis a en em drompl a gals pa leveront ez eo sant Salomon tad da sant Villiau. Tri roue Salomon zo bet e Breiz, hag hini anezho, var hed tost, ne veve en amzer sant Villiau. He dad, eme an oll scridou koz, a oue ar roue Budik, kont a Gerne.

Maner Lez-Argant a oa d'ar roue Argant, kenderv da zant Villiau ha roue a Vreiz assamblez ganthan, eme ar breviel. Maner Lez-Argant a oue savet er bloas seis kant ha daou ugent (740). Eun or goz, a za c'hoas n'eus ket pell, a zouge ar bloas-se. Evelse an daou genderv, assamblez roueet e Breiz, ho devoa bep a vaner an eil e kenver egile.

Ar maner kossa e Plounevez eo hini an Nevet. An tud chentil eus ar maner-man a ziskenne eus ar roue Ian, deuet eus a Vro-Zaos er vro-ma vardro ar bloas c'huec'h-kant (600). Sant Villiau a oa ive eus ouen

ar roue-ze. Er bloas mil anter kant (1050), ar mestr eus maner an Nevet a ziskaras anezhan evit dont da jom da Lez-Argant. Rei a reas an hano a Nevet da Lez-Argant e memor eus maner koz Nevet evit derc'hel eno hano ar famill. Tud chentil an Nevet a zo bet kals a vrud anezho. Er bloas seitek kant daouzek ha triugent (1792), tri garrad paperou koz a oue devet e maner an Nevet. Pebes koll evidomp ! rak eno, sur aoualc'h, e oa scridou koz ha guirion divarbenn sant Milliau ha sant Moelar.

Ar maneuriou all eus Plounevez a zo : ar C'hoz-Maner pe Vieux-Chatel, Lezarscoet (Lez-ar-C'hoat), Moellin, Trezeol, Kerscao gant he vali braz, a eun anter-leo hed, beteg ar mor, ha Keroutous.

E maner Lezarscoet, bet ive guechal, m'oar vad, d'ar roueet a Vreiz, ez eus bet kavet lizerennou brezounek diez braz da gompren, ker koz int.

Araok ar Revolution, e oa nao ilis pe chapel e parrez Plounevez-Porzay, heb konta c'hoas c'huec'h chapel vihan a ioa er maneuriou. N'eus mui nemet diou ilis ha diou chapel. Konsaill ar barrez a hanve eur c'hulador pe eur fablik evit pep ilis ha pep chapel. E paperou koz Plounevez, lakeat en urs gant an Autrou Pouchous, e kaver eur sklerijen eus ar bloas pemzek kant trivac'h (1518). D'ar c'houls-se e oa e konsaill ar barrez an dud hanvet aman varlec'h : Kola Doare, eus Kerdale ; Thomas L'Helgoualc'h, eus maner Keradeün ; Thomas ar Berr, eus Tre-Ger, Herve Eildez, eus ar Vergoz ; Lois Saliou, eus Kerargant ; Milliau Boussard, eus ar Prigaud ; Clauda Tanguy, eus Lezanven ; Jerom Vreton, eus Ruiyen ; Herve Doare, eus Tre-villy ; Milliau Gannad, eus Kerargall ; Yvon Millour, eus Bridan ; Ian Cornic, eus Lan-Zent, hagan Autrou person Herve de Quelen.

Ar fabliket a hanve tud da gestal en ilizou

pe er chapelou roet dezho da c'houarn. Ho bloas a gommanse hag a echue deis gouel sant Ian-Vadezour, ha bep bloas e rentent kont d'an Autrou'n Eskop pe da unan eus he chalouniet. Ar gont-se a vije lennet er gador d'ar zul goude.

Ar fabliket hanvet d'ar c'huec'h varnugent a viz even evit ar bloas 1518 a oue : Alan Avon, eus Penn-ar-C'hreac'h, evit an ilis parrez, Guennole Hemon, eus Quellien, evit chapel Kerlaz, dediet da sant Germen; Jerom ar C'hoz, eus Keruleon-Vihan, evit chapel sant Even, Caourintin Bossier, eus Lez-Vren, evit chapel sant Herve hanvet ive sant Mac'h-ouarn; Ian Doare, eus Penfrat, evit santes Anna-ar-Palud; Stephan Floc'h, eus ar Goz-Quenquis, evit chapel sant Mikeal; Per an Dagorn, eus Goarbik, evit chapel Sant-Guennole Lan-Zent; Renan ar Gac, eus Lez-Vren evit chapel sant David, Laurans ar Mad, eus

Bridan, fablik breuriez sant Laurans savet en ilis parrez.

Ar chapel kenta e Santes-Anna-ar-Palud a oue savet en amzer sant Caourintin, var bord ar mor. Ar chapel-se, a nebeudou, a zo bet sammet gant ar mor. An eil chapel a oue savet pelloc'h eus an dour, er c'hanvet unekvet, evel ma z'eo merket var unan eus he dorojou. Ebbet Landevennek a oa dezho ar chapel hag ar palud en dro dezhi beteg ar Revolution. Neuze e oue prenet gant Cosmao (1793), ar chapel hag an douar roet gant ar roue Grallon da sant Caourintin. Lod a lavar, hag en ho mesk, an Autrou Halleguen, bet medeusin er C'hastellin, ez eus bet e Santes-Anna eun templ paian arok ar chapel. Red eo kredi da vihana eo bet eno ar Romanet o chom, rak kaout a rer c'hoas, tro var dro, restadou eur ho ziez hag eus ho hentchou.

Plounevez-Forzay, arok ar Revolution, a

oa stag ous Kastellin evit reseo ar justis.
Konta a reat ennhî d'ar c'houls-se daou vil
daou c'hant den en oad d'ober ho fask. Ar
barrez a oa lodennet e peder breuriez hanvet
ive karturennou, ha pep karturen a ziazeze
an taillou evithi e unan. Bez e oa karturen
ar Gorre, hini Troc'hano, hini Troc'hoat,
hag hini Kerleol.

Plounevez e deus bet ive an henor da velet
sant Thegonnek oc'h c'henel var he douar,
e Trefeuntek. Mes e pēp amzer ez euz bet
tud fallakr; santeles Egonnek a egaze, m'oar
vad, he amezeien, ha kement a voāl vuez a
rejont dezhan, ma renkas kuitaat Trefeuntek
evit mont da Blougonek. Beva ha mervel a
reas eno evel eur zant el leac'h ma zo savet
brema eur chapel en he henor. Guerz koz
sant Thegonnek a rebech da Drefeuntegiz
ho fallagriez en doare-man :

Sant Thegonnek, e Plougonek,
Hen ginnidik eus Trefeuntek,

Da Drefeuntek pa gimmiadas
N'eur goms huel a lavaras :

Trefeuntegiz, tud digenter,
C'hui n'em gavo ato berr ;
Gant daou pe dri eost ar bla
C'hui vo berr ar memes tra.

Kement ki klan a dremeno
E Trefeuntek a ziskenno.

Hag e guirionez Trefeuntegis ho deus bet
leac'h meur a vech da gaout keuz da sant
Thegonnek ha d'ar guall vuez gret dezhan
gantho. Rak n'eo ket var vella ez eas ho
afferiou goudeze.

E touez an dud ho deus gret nenor c'hoas
da Blounevez, hanvomp an Autrou de Les-
pervier, ganet e Trezeol ha bet eskop a Gem-
per (1444-1451), hag an Autrou Guyon a
Blounevet, ganet e Koz-Maner ha bet ive
eskop e Kemper (1262-1266), epad pevar
bloas.

Ne ankounac'haomp ket Charlez ar Gac,

en deus gret eul leor kaer meurbet var gaerder ar burete, p'eo guir al leor-ze a zo lakeat e gallek hag e iez an Allemagn ive.

Mes dreist oll, Plounevezis, bezit sonch ato piou a-ra deoc'h ar muia henor ha piou a hell ober deoc'h ar muia vad. Ne ankounac'hait biken ho sant patron, ar roue Milliau. Dalc'hit dezhan he renk, ar renk huela en hoc'h ilis. Savet ho p'eus dezhan eun ilis nevez; savit ive dezhan eun trôn nevez ha kaeroc'h mui oc'h mui bemdez e diabars ho kalonou. En em erbedit gant fisians da sant Villiau dirak ar skeuden goz eus ar c'hantvet unekvet ho p'eus ar bonheur da viret en oc'h ilis. Mar deo koz he skeuden en oc'h ilis, he garantez a zo bepred nevez evidoc'h, he galon bepred tom en ho kenver, bepred digor d'ho c'holl izomou.

C'HUEZEK VET PENNAD

Ploumilliau ha Plumeliau

Parrez Ploumilliau, arok ar Revolution, a oa e dalc'h Montroulez, eme an Autrou Ogee. Ploumilliau ha Keraudi, tre eus a Bloumilliau, a zave d'ar mare-ze daou vil daou c'hant den en oad d'ober ho fask. Kerhuel-Kerbi-riou ha Lanascoul a oa he maneuriou brassa. Kerdu ha Kersenont a dle brema bea koet en ho foull nemet savet e vent bet a nevez. Yvon a Gersenont a resevas urs digant ar roue Herri eil eus an hano da sevel tromplou da sikour ar general de Brissac.

N'eo ket estonus e deffe kemmeret Ploumilliau sant Villiau evit patron. Evel hor beus e lavaret, sant Villiau a oue besiet e kenver Ploumilliau, er Goz-Yeudet. Ar brud

eus he zantelez hag eus he viraklou a roas ar zonch da Bloumillois d'en em lakaat din-dan he skoazel. E pevar leac'h, en ilis Ploumilliau, ez eus hano eus ar zant patron ; er guer a liou, var an aoter vraz, er porched ha var kroas ar vered. Var an aoter vraz hag er porched, sant Villiau, evel e Guimilliau hag e Loc-Moelar, a zalc'h he benn en he zorn. Eur vech c'hoas, kement-man merket e meur a ilis dediet da sant Villiau, a ro deomp da gredi eo bet c'hoarveet ar memes mirakl evit an tad hag evit ar mab. Penn sant Moelar ive a gomzas ous he vuntrer hag a lakaas eun eienen da zewel evit terri he zec'hed. Lavaret a heller eta anezho ho daou gant guirionez ar goms-man eus ar skritur : « *Defunctus adhuc loquitur.* » Maro, e komzont c'hoas. Koms a reont ous ho muntreurien da lavaret dezho ober pinijen ; koms a reont, en eun doare all, dre ho buez, ouzomp oll, da lavaret deomp heuilla ho vertussiou

evit gallout ren assamblez gantho e baradoz Doue.

Plumeliau

Parrez Plumeliau, brema zo kant vloas, a oa e dalc'h Ploermel. Gant sant Nicolas, tre a Blumeliau, e save tri mil pemp kant den en oad d'ober ho fask (1). Diou chapel a vrud a zo ennhu : santes Anna ha sant Nicodem, dreist oll hini sant Nicodem. Kement a garantez a zo er barrez-man evit sant Nicodem, ma tizonjer eun tamik re marteze eus ar zant patron, eus sant Villiau. An oll zent a zo mignoned da Zoue. Mad eo karet hag henori anezho oll, ha dreist ar re all, ar zent

(1) En doare-ze eo e kontet guechal, var a velan. Ne c'houlennet ket, evel brema, pet den zo er barrez-se, mes pet den a zo ennhu en oad d'ober ho fask ; ha bezit sur kement hini a oa en oad d'ober he bask ne vanke ket d'ober anezhan, en amzer-ze a feiz. En eur ger, neket an dud eo a gontet, mes ar gristenien deuet an oad a razoun.

a zo ælez-gardien ar barrez. Mes kalon an den a zo ive braz aoualc'h evit rei da bep hini anezho ar garantez dleet anezhan. Red eo ober eul loden evit pep hini, rak izom hor beus anezho oll. Petra zo essoc'h deoc'h, parrisionis a Plumeliau, eget karet sant Villiau ho kenvroad, ho roue, ho patron, eur zant breizad eus ar memes goad ganeoc'h ? Diouallit da renta jalouz sant Villiau (m'ar galfe ar zent bea jalouz !) pe hen a zerro he zorn ha ne skuillo mui varnoc'h he vennossiou. Dougen a rit oll he hano, hag ho parrez ive ; dougit ive anezhan en ho kalonou, er renk huela. Ar guir-ze en deus ; ho sant patron eo.

Chapel sant Nicodem savet, er bloas pemzek kant nao ha tregont (1539), a zo eus ar re vrassa etouez ar chapelou. Ar porched so kaer dreist ; an tour dantelezed en deus c'huerc'h mestr ha daou ugent a huelder. E kenver ar chapel zo eur feunteun gret er

bloas c'huezek kant hag eis (1608) ha labouret en doare ar c'haera. D'ar pardon, hag ive var ar bloas, e vez kasset kals anevalet d'ober an dro d'ar chapel evit goulenn dezho iec'hed, ha d'an dud eost mad. Al loened-se kurunet a c'harlantezennou hag a rubanou a ia e procession da heuil an taboulinou. Lod anezho a vez guerezet en deis-se d'an huela diner ha prenet ker peurvuia abalamour ma tleont digass gantho ar bonheur en tiegez. Me zonc'h e talc'her ato, muioc'h pe nebeutoc'h, d'ar c'hustum goant-se da gass al loened e procession. Daoust hag al loened ive ne dleont ket en ho iez meuli Doue ?

Lavaret a ra dezho ar skritur : « *Benedicite, omnes bestię et pecora Domini, Domino.* » Oll loened mud, eus an dour hag eus an douar, rentit meuleudi d'ho krouer.

Kendalc'hit eta, parrisionis Plumeliau, da lakaat ho loened da veuli Doue e plas kement a gristenien a zilez gantho an dever-

man. Na rit van evit klevet, var gement-man, goaperez an dud difeiz ne gomprenont netra en ho relijion. Ne dalvezont ket, an dud-se (*animalis homo*), al loened a ia evitho e procession.

Derc'hent ar pardon e sant Nicodem, d'ar c'henta sadorn a viz eost, ma m'eus sonch mad, e vez c'hoezet eno an tan a joa gant eun eal evel e sant Ian ar Biz. Ar pilirinet a ia da voalc'hi ho fenn hag ho daouarn e feunteun sant Nicodem evit ma pellaio dioutho ar c'hlenvejou. Parrisionis Plumeliau, var am eus klevet ha lennet, a lez ho baro da greski meur a zizun araok ar pardon, ha d'an deis-se, d'ar mintin, e teuont d'ober anezhi var ar bank mean a zo e kenver ar feunteun. Goudeze e voalc'hont ho bizach en dour; seul-vui eun den en deus devosion evit sant Nicodem, seul-vui e chom pell heb ober he varo araok ar pardon.

E kenver ar bourk e kaver eur feunteun

hanvet Foteliau, da lavaret eo, feunteun sant Villiau. N'ouzon ket a bea zo en ilis parrez eur skeuden bennak eus sant Villiau. Estonus braz e ve ma n'eus ennhi netra da zigas da zonch eus eur zant patron ken anaveet e Breiz. Bourkou, keriou, maneuriou hag enezennou a zoug he hano, aman hag haont, e Breiz.

E parrez Berne, kanton ar Faouet, ez eus eur gear hanvet Kervillio pe Kervilliau; ingal eo. E parrez sant Gylles-Pligeaux, kanton sant Nicolas-Pelem, e kaver ive maner Kervilliau. Eun enezen e kenver Trebeurden a zoug hano sant Villiau. Ar zant-man c'hoas marteze en deus roet he hano da barrez Billio er Morbihan, kanton sant Ian-Brelevenez. A ræzon hor beus eta da lavaret eo brudet kaer hano sant Villiau e Breiz? Seul-vui ma zeo brudet hag anaveet, seul-vui eo din da vea karet hag henoret, rak ar vrasder eus

he vrud a ziskuez deomp ar vrasder eus he santelez.

SEITEKVVET PENNAD

Sant Thivisiau

Ne gaff ket dinn e ven klemmet gant den evit rei aman varlec'h e berr-gomzou' buez sent Breiz a veve en amzer sant Villiau. Ne gomzin nemet eus ar zent a zo muia anaveet heb beza c'hoas anaveet aoualc'h. Ar zent-se a rei eur gurunen da sant Villiau. Diskuez a reint pegen santel e oa ho roue p'eo guir e save kement a zent en he amzer.

D'ar c'houls ma oa gouarnet an Ilis catholik gant ar Pab santel Ian seisvet, hag eskopti Dol gant an eskop santel Armaël, epad an trouz a zavas e Breiz goude maro ar roue Alan, eilvet eus an hano, e c'hanas sant Thi-

visiau en eur gerik-vihan e kenver kouent sant Samson, el leac'h ma ema hirio bourk Lanvollon. He gerent a oa pinvidik, mes Thivisiau, en em roet abred da Zoue, a zilezas ar binvidigez evit servicha guelloc'h an Austru Doue. Kuitaat a reas ti he gerent, guisket a zillad paour, hag ez eas d'ar gear hanvet Dol. Ne ouie ket c'hoas na lenn na scriva; n'en devoa desket e ti he dud nemet karet Doue, hag heb gouzout lenn e leor an Avel, e lakaas e pratik ar c'huzuliu kaera roet ennhan gant hor Zalver da zilezel kerent ha mignoned, bro ha pinvidigez evit klask da genta rouantelez an env. Eur c'hristen mad eus a gear Dol, o velet he feiz hag he vodersti en ilizou, a gemmeras anezhan en he di hag a lakaas ar zant iaouank da bastor denved. Epad ma tioualle he zenved, Thivisiao a boanie da zeski lenn; kana a reas psalmou hag hymnou evit henori Doue ha tremen dibec'h he amzer. He vestr ne oue

ket pell evit divinout he spered lem hag a gassas anezhan d'ar skol. Buhan Thivisiau a zeskas kement a oue lakeat dirak he zaoulagad hag abenn nebeut amzer ar mestr-skol n'en devoa mui netra da zeski dezhan.

Eun devez sant Armaël, eskop Dol, a dre-mene var varc'h e kenver ar park ma tioualle ennhan Thivisioik he zenved. Klevet a reas eur vouez kaer meurbet o tibrada dreist ar girsier. An eskop santel a jomas a za, chom a reas a bân da zilaou ar vouez dudijs-se a rea d'ar measiou tridal ha d'an eostik chom sioul, hag e c'hoantaas guelel ar c'haner iaouank. Digasset e oue dirazhan ar potrik denved, guisket paour.

Sant Armaël, souezet o velet he zousser, he volesti, an oll doare mad eus ar bugel, a c'houlennas anezhan digant he vestr, hag a lakaas anezkan var al latin etoues ar c'hlouer iaouank eus klouardi Dol. Kreski he vertus-siou ha kreski he zeskadurez a oa eur blija-

dur evit Thivisiau. An oll a jome estonet dirak he volesti, he humilite, hag ar sked eus ar burete merket var he vizach.

Prest goude ma oue beleget, e oue roet dezhan ar garg kenta er c'hlouardi. An eskop, deuet da vea koz, a gemmeras sant Thivisiau evit eilvet gant assant ar chalouniet hag hini ar bopl. Arok mervel, sant Armaël a sacras anezhan eskop, ha goude he varo, an eskiptien-all a Vreiz, ar veleien hag ar bopl a hanvas, a eur vouez, sant Thivisiau eskop Dol, evit derc'hel en ho c'henver plas sant Armaël.

Dizrei a reas ous Doue eun den didruez ha galloudek hanvet Rivallon, en devoa lakeat an tan en unan eus he gouentchou. An denze a zigollas goudeze ar gouent devet ganthan hag a reas eur binijen rust ar rest eus he vuez. Eun devez, epad ar Rogationou, derc'hent gouel an Ascension, sant Thivisiau, en eur brezeg d'he bopl var ar blasen,

a velas an env digor dirazhan hag an eelez o tougen e triomph an Arc'h Allians. Renta a reas ar vuez da dri gorf maro, hag en eur lavaret epken hano Doue var an dud klanv e paree anezho.

Goude bea gouarnet he ilis epad eun nebeut bloavesiou gant santelez ha madelez, en eur skigna ar miraklou gant an ad eus ar virionez, sant Thivisiau a oue galvet gant Doue en he varados var dro ar bloas seis kant nao ha daou ugent (749). He gorf enterret e cathedral Dol a reas eno kals miraklou. Pa deuas ar Normantet er vro (878), he relegou a oue kasset da Baris en ilis sant Germen ar Prajou. Eno ive relegou ar zant a reas miraklou kaer meurbet. Pa vije eur zec'hior vraz, ar Barizianed a zouge e procession relegou sant Thivisiau evit goulén soublien. Ar vertus soken eus relegou ar zant-man, evel ma lenner e breviel Paris, e deus meur a vech lazet an tan-guall. E Breiz ive, dreist

oll e Plougonek, e kenver Kemper, e peder sant Thivisiau da ziuall ac'hanomp eus ar gurun. Scrivet eo ar c'homzou-man var tour Plougonek : « *Turiathe, tuam turrim templumque tuere, ne noceant illis tela trisulea Jovis.* » Sant Thivisiau, diouallit eus ar gurun ho tour hag oc'h ilis evit na deui ket an tan spontus-se da noazout dezho.

Pa oue gret, evit ar vech kenta, gouel sant Thivisiau e Paris, eur mestr-mansouner difeis ne fellas ket dezhan chom a za gant he labour en deis-se. Edo o sevel ilis sant Stephan. Deis ar gouel, he vansouneurien a deuas eta, var he urs, da labourat. Ar cha-fottou a goezas gantho ; kals tud a oue mact'haniel hag ar mestr a dorras he c'houzoug. Evelse e renkchont anzaou, en despet dezho, e oa guelloc'h senthi ous Doue hag an Ilis eget ober ar penn an unan.

Sant Thivisiau a zo henoret evel patrour en ilis Sant-Germen ar Prajou e Paris, en ilis

Dol, e Sant-Thurial en eskopti Sant-Malo, en ilis Sant-Thurio e Quintin, e Plougonek, e Sant-Thuriau hag e Landivisiau.

E Landivisiau ez eus brema eun ilis nevez en he henor. Eus an ilis koz, an tour epken hag ar porched a zo bet miret. Tour Landi a zo eus ar re goanta hag a zigass da zonch eus ar C'hreisker dre he zao drant ha mistr. Ar porched a ra e unan he vleudi gant he scultrevez Kerzanton labouret fin. Savet eo bet er bloas (1552). An tour a oue savet divezatoc'h (1590).

Parrez Landivisiau, hirio braz ha pinvidik, ne oa guechal nemet eun dre eus a Vicourvest. Ennhi edo o chom Autrounez Coat-Meur, Autrounez Coat-Quelfen. Eno edo ive leac'h ar varnedigez evit an oll douarn-varn eus an daoudour a en em astenne var Guiclan, Guimilliau, Lambaol, Landivisiau, Pleyber, Plouneour, Plouvorn, Sant-Thegonnek ha Trelaouenan.

Landivisiau, amzer zo bet, a en em c'houarne e unan, e guir frankis. An dud a lakea da gommandi ennhi, n'ho devoa kont ebet da renta nemet da Zoue. Hano zo c'hoas ennhi, eme an Autrou Kerdanet, eus an Autrounez Kola ha Per Lerot, a gassas kuit eus a gear an dud a roe skuer fall, hag a reas ho galloud evit derc'hel pep urs vad e Landivisiau.

D'ar mare ma scribe an Tad Albert, eus a Vontroulez, an offis, emezhan, a vije kaer meurbet e Landi. Eur muzik a ioa eno ken kaer a muzikou an ilizou brassa e Paris d'ar c'houlse. Red eo lavaret ne deus kollet netra Landivisiau var gement-man. Ar c'han a zo ato dudius e Landi, hag a bell e teuer da selaou an offis en ilis Sant-Thivisiau. Lavaret a raffet en deffe ar zant-ma, kaner dispar e unan, desket kana d'he oll barri-sionis :

Landivisiois, mirit ho mouez
Da veuli Doue hag ar Verc'hez ;

En ho touez bepred ra chomo
Kan dudius sant Thivisiau !

Relegou sant Thivisiau, ar re anezho a ioa
e Paris hag e Chartr, a zo bet distrujet gant
ar Revolution. Em anaoudegez, ne jom mui
e nep leac'h eus he relegou nemet eun tam
ezel miret en ilis Quintin en eur penn-
arc'hant.

Ne guittaomp ket Landivisiau heb henvel
ar chapel nevez savet ennhi en henor Itron-
Varia Lourd. Eur boked eo gret d'ar Verc'hez
Glorius Vari gant an Autrou Sibirill, arok
tremen eus ar vuez-man da reseo kurunen
ar beleg mad eus a zaouarn Itron-Varia
Lourd er Baradoz. Eun ilis nevez, hag eur
chapel nevez a zalc'ho atao ar zonzh anezhan
beo en ho touez, parrisionis Landi, ha goude
ma teuffac'h biken da ankounac'haat he va-

douberou a hent all. Roet en deus deoc'h he
amzer, he iec'hed, hag he galon ; c'hui anaou-
dek ho p'eus roet dezhan eur beñ etouez ho
kerent. Sonch ho pezo ato dirak ar bez-se,
dirak ilis Sant-Thivisiau, dirak chapel Lourd,
dirak he gador-govez, ez eo bet an Autrou
Sibirill ato en ho touez :

Den a zever, den a greden,
Den a galon hag a beden.

TRIVACH'VET PENNAD

Sant Herbot

Daou bried nopl ha devot eus a Vreiz-Veur pe Vro-Zaos a ioa heb bugale. Doue a zelaouas abenn nebeut amzer ho fedennou hag evit heritour e resevchont eur bugel a oue hanvet Herbot da zeis he vadisiant. Abred Herbot a anavezas pegen goullou eo gloar ar bed-man, hag e reas a neuze he blijadur eus ar beden. An douar noas a vije he vele, ar gri-siou louzou epken he vevans. Er beden hag er binijen eo e tremene an deis hag an noz. Pa renke en em gaout gant tud iaouank eus he oad, e komze dezho a Zoue evit dilam ar scanvadurez eus ho fenn. Ar peoc'h a blije dezhan hag evit he c'haout ec'h en em denne aliessa ma c'helle el leac'hiou distro ha sioul.

Eno pedi ha koms ous Doue a rea he von-heur. Eur c'hoat a roas lojeis d'he iaouankis. Kaout a reas er c'hoat-se, kuzet en eur c'harvarn, eun hermit koz hag a lavaras dezhan en em zistaga eus pep tra er bed-man evit heuilla Jesus-Christ. Raktal Herbot a zistro d'ar ger, hag a lavar d'he gerent kenavo er bed-man da viken gant ar respet dleet da eun tad ha da eur vam.

Eaz eo komprenn ar glac'har eus he gerent pa golchont ho mab unik. Ho feiz gousgoude, a zouzaas ho foan, hag an daelou en ho daoulagad e leverchont d'ho mab : « Kenavo, kraouadur ker, roet deomp gant Doue, ha ra deuffac'h da c'hounid ar rouantelez savet evit an dud just abaoe krouidigez ar bed ! »

An den iaouank Herbot, distag neuze eus pep tra er bed-man, a gemmeras hent Breiz-Izel evit ober eno pinijen e kreis ar c'hoajou. Da genta e chomas eur pennad var bord ar-mor hag e pareas dre he bedennou meur a

zen mac'haniet. Ar brud eus he viraklou a redas buhan dre Vreiz hag an oll dud klanv a deue a vandennou d'he gaout. Ar zant a gemmeras aon hag a en em dennas donnoc'h en dezert evit tec'het eus ar merkou braz a respet a roet dezhan.

Klask a reas a nevez en em guzat er c'hoajou. Mes eun devez, epad m'edo o pedi Doue hag o sevel er memes amzer eun tam toen, an dud divardro, poulset gant an drouk-spered, a deuas gant eur vanden chass da gass anezhan kuit. Herbot a dec'has en eur c'hoat all hag eno e oue lezet e peoc'h. Al loened gouez, pell eus ober drouk ebet dezhan, a zenthe outhan. Ha perak n'er grajant ket? An den santel a virit kaout ar memes galloud hag hon tadou kenta, Adam hag Eva. Al loened gouez a zenthe outho arok ho fec'hed. En amzer genta ive eus an Ilis, epad ma rede goad ar verzeurien, e velet anezho oc'h en em asten ec'h hars treid ar

zent hag o lippad ho gouliou eleac'h ober drouk ebet.

An den en devoa gualgasset ar muia an hermit santel Herbot a goezas prest goude er baourentez, hen hag he famill. Doue ne aotre ket touch ous he zent. Etretant santel Herbot a deue a zeis da zeis muioc'h skedus. An dud klanv a gorf pe a spered, an dud mac'haniet, a deue niverus d'he gaout en he doullik-douar goloet a vrankou guez a oa var parrez Berrien, eme ar scridou. Dre he bedennou e kavent ar iec'hed, hag ous he heuill eur gentel vad benak d'ober pinijen.

Goude eur vuez tremenet oll er burete hag e servich Doue, Herbot a anavezas eun deis e oa tost evithan an termen diveza. Santout a rea dija var he benn ar gurunen a c'hloar, an digoll eus kement a iuniou hag a boaniou. Dre-ze e teuas da greski c'hoas he binijen-nou arok mont dirak Doue. Pa gavas dezhan e oa erru an heur diveza, e viskas he viska-

mant a hermit, hag he zivrec'h e kroas, ec'h en em astennas var an douar ien. Neuze an diaoul a reas varnezhan ar goaska divezã ; mes ar zant dre ar beden a bellaas diouthan pep sort tentasion. Goude ar victor-ze gouneet var Satan, eur relijius a deuas d'he velet ha ganthan ar gommunion zantel. Sant Herbot a resevas an hostif-sacr, an daelou en he zaoulagad hag en eur bedi Doue da gaout truez ous eur pec'heur paour. Goulén a reas ive an Nouen, hag en eur lavaret ar c'homzou-man : « Va Doue, etre ho taouarn e lakaan va ene », e rentas he ene da Zoue.

Raktal goude he varo, eme ar scrid a verk he vuez, an noapl a deuas da vea sklear meurbet, evel pa vije savet eun heol nevez. Beleien ha klouer ar c'hanton a deuas da gerc'het korf ar zant ha besiet e oue en ilis a zougen abaoe he hano, en ilis Sant-Herbot. Er c'hœur e ma he vez gret a vennherez groz ha varnezhan skeuden ar zant. Astennet

eo eno gant he viskamant hermit. He vleo hag he varo a zo hir, he vreviel a zo ous he gostez deo. Var he vrec'h kleis e ma he vaz ; he dreid, en neas, a zo astennet var eul Leon. N'eus lizeren ebet var ar bez-se, mes an ear en deus, eme an Autrou Freminville ; da vea ker koz hag an ilis.

En daou gantvet trizekvet ha pevarzekvet, ar brezelioù a zigassas alies er vro-ma ar Zaozon. Soudardet eus a Vro-Zaos, d'ar c'houls-se katholik, a gassas gantho penn sant Herbot a ioa goloet a aour hag a arc'hant. Kemmeret a rejont ive ar scrid eus he vuez. Ar rest eus ar relegou a jomas e Sant-Herbot, hag an dud ho divije procezoù a doue dreizho, epad pell amzer, evit diskuez e oa gantho ar virionez.

Eun den pinvidik, eme ar gaoz, o veza touet e faos a eneb da eur paour, a resevas raktal kastizamant.

Buez sant Herbot a oa miret guechal

e parrez Berrien. Ar scrid kenta a zo bet kollet ; eun den hag en devoa guelet ha lennet piz ar scrid-se, a lakaas anezhan e berr gomzou, er bevarzekvet pepemzekvetkantvet.

Chapel Sant-Herbot, diou leoik vihan eus Huelgoat, a zo bet savet er c'hantvet c'huezekvet. En he c'henver ez eus eun diskenn-dour eus ar re huela er vro-ma. An tour zo kaer meurbet ; ar chanteleo a zo ive din da veza guelet heb na ve evelato ken kaer hag hini Lambader. Pardon Sant-Herbot a bad e doug miz mae hag eno e koez neuze a fors a vilostou saout en honor da sant Herbot, patrour al loened korn. N'oun dare a sant Halar hag hen en deffe kement all a reün kezek ; ne gredan ket. Guechal, epad tri devez ar pardon hag ar foar, oc'hen Kerne ne labourent ket. Gret e vije ive procession gantho en dro d'ar chapel evel ma rear ato gant ar c'hezek e chapel Sant-Halar, e Plouzeniel. Brema, a gaff dinn, ar darnvuia ne gassont

nemet bilostou da Sant-Herbot. Meur a hini marteze, etouez an dud difeis, etouez an dud-se ho deus c'hoant da bilat an oll gustumou koz en ho bro, a c'hoars goap da gement a gass offrans da sant Herbot. Lezomp anezho da c'hoarzin, n'eus fors pe seurt liou en deus ho c'hoars, ha pedomp ato sant Herbot da rei deomp aman leis ar ribot.

NAONTEK VET PENNAD

Sant Yvi, avieler hag hermit

Niverus braz eo ar zent a zavas e Breiz er memes kantvet gant sant Villiau. Henvel a heller sant Yvi, sant Winok, sant Hermeland, sant Emilien, sant Herbot, sant Morand, sant Gobrian, sant Vital, sant Thivisiau, sant Pasquier. Ne hellan ket komz anezho oll. Ouspen-ze an darnvuia eus ar zent-man n'int ket anaveet kals gant ar bopl a Vreiz-Izel a gomz c'hoas ar brezounek. Buez sant Yvi a vo eta an diveza a verkin el leorik-man. Diou barrez da nebeuta, em anaoudegez, a anavez sant Yvi evit patron er Finister. Meur a chapel a zo ive savet en he honor; e Plouneour-Menez on sur ez eus unan. Rak-se 'ta ne gavan ket a re lakaat aman ive al loden gaera eus he vuez.

Sant Yvi, evel sant Herbot ha sant Eginer, a oa ginnidik eus a Vro-Zaos. Bro-Zaos e deus digasset kals a dud santel er vro-ma. Gant ar re genta anezho, her gullet hor beuz, eo e teuas en hon touez ar sklerijen eus ar feiz. Evel a lavar kantik koz sant Sezni, ne ouffet ket ho niveri oll.

N'ouffen ket niveri :

Jaoua, Paul ha Tenenan,
Sane, Gouesnoul, ha Majan,
Guevrok kouls ha Sezni,
N'ouffen ket niveri.

Breiz-Izel ive d'he zro a gassas assamblez gant sant Germen a Auxerr (429) eur vanden relijiuzet santel da Vro-Zaos. An darnvuia anezho a zo henoret eno evel sent. Mes dizroomp da sant Yvi.

Branon he dad hag Egida he vam a oa ho daou eus ar goad huela e Bro-Zaos.

Kristenien eus ar re vella e oant ive var ar marc'had. Ar c'hraouadur Yvi a oa koezet

mad etre ho daouarn. Erruet d'an oad ma choazer eur stad a vuez, sant Yvi, eleac'h en em ober den a vrezel, evel ma oa c'hoant e vije, a en em c'hreas kloarek heb gouzout d'he gerent. Goude ho maro, e oue gret aveler gant an eskop Cuth-Berth, hag evit en em rei muioc'h mui da Zoue ec'h antreas e kouent Lindisfarne. Kaer e oa gueleit an den iaouank-se, a helje bea bet eun den gal-loudus ha pinvidik er bed ma karje, oc'h ober bemdez aluzen d'ar paour, o rei dezho dillajou, ato gant eur ger mad benak. Doue a falvezas dezhan brudal eun den ken pur ha ken santel. Da genver eur gouel-braz, epad m'edo sant Yvi e kenver an Autrou'n Eskop en offeren, eun den ken dizec'het gant an dersienn ma renke kaout eur vaz evit bale, a c'hoantae ive, evel ar re all, pignat oc'h an auter evit rei he offrans. Sant Yvi a gemmeras truez outhan hag a roas dezhan an dorn evit pignat ar bazen diveza eus an auter.

Tra estonus ! a veac'h m'eo kroget sant Yvi en he zorn, an den clanv a en em gav pare hag a zant an nerz o redek adarre en he voazied. Sant Yvi raktal a goezas d'an daoulin en eur lavaret : « Va breur, n'eo ket abal-mour din-me eo oc'h bet pareet gant Doue. C'hoant ho p'oa da boket da zorn an Autrou'n Escop hag hen eo, dre c'hras Doue, en deus pareet ac'hanoc'h. »

Eur pennad goude, sant Yvi a oa oc'h ober eun tam diskviz goude he bred. Eur paour, ken kasset gant ar c'hlenved ma velet he groc'hen stag ous he eskern, a deuas d'he gaout.

An den santel gant truez ous ar paour keaz a c'houlennas diganthan petra 'vije ar guella ganthan da reseo. Ne m'eus plijadur ebet o tibri, eme ar paour ; rak-se ne hellan ket kemmeret boed ebet diganeoc'h. Roit dinn, m'ar plich, eur verennad dour evit terri an danijen a zo em diabars. Sant Yvi a

ia var he c'her da gerc'het dezhan eur ban-nac'h dour, ha raktal ma oue evet gant ar paour, ec'h hellas euna he gein kroummet oll gant ar c'hlenved, ha pare klok e rentas mil bennos d'ar zant ha mil meuleudi da Zoue.

Ar burzud nevez-se a lakaas troublien e spered sant Yvi, hag evit pellaat eus ar meuleudiou hag an henoriou e sonjas deustu kuitaad ar vro (687). Goude bea gret sin ar groas, ec'h en em lakaas en hent. Erruet er pors-mor kenta, ar vortoloded a c'houlennas diganthan da beleac'h en devoa sonch da vont. « Eleac'h ma plijo da Zoue, emezhan ; m'ar deus aman eul lestr prest da vont var vor, en hano Doue kemmerit ac'hanon. » An amzer zo bet fall tre beteg vrema, eme ar vortoloded ; anez, ni oa pell zo e Breiz-Izel. M'ho p'eus c'hoant da vont da Vreiz, chomit ganeomp da c'hedal amzer vrao. D'ar c'homzou-ze, ar zant, leun a joa, a vennigas Doue.

« Alo, va breudeur, emezhan, en em breparomp da zevel an heor, Doue a vennigo hor beach. » An avel a chenchas prest evel en eun taol-kont hag e c'helchont kuitaat heb aon ar pors-mor. Mes eur vech al lestr er mor braz, eur barrad gual-amzer a zavas adarre. Ar vortoloded, en dizesper, a zave ho daouarn etrezek an env evel pa vije deuet evitho an heur diveza. Dihuna a rejont sant Yvi a gemmere he repos, ha raktal ma c'hen em lakaas da bedi, kounnar ar mor a goezas. Ne ouzor ket d'ar zur e pe leac'h e touaras al lestr nag e peleac'h ken nebeut e teuas sant Yvi da jom.

Kredi a ran e tiskennas eus al lestr en eur pors-mor benak var aotchou Leon hag ez eas da jom goudeze var douar parrez sant Yvi, tost da Landerne.

Ar pezh so sur eo, Doue a deuas da rei da anaout santelez he servicher e Breiz-Izel evel e Bro-Zaos. Parea a reas en hor bro

eun den maro outhan he zaouarn. Var douar sant Yvi, a gredan, e tremenas ar rest eus he vuez er binijen, o iun bemdez, hag aliez epad an noz o veuli Doue. Erfin, goude bea roet skuer vad d'hor bro ha great ennhî meur a virakl ez eas da reseo er baradoz ar priz eus he binijennou var dro ar bloas seis kant (700).

Breiz-Izel ne deus ket bet ar bonheur da viret relegou sant Yvi. He gorf santel a oue kasset da Vro-Zaos en dekvê pe en unekvet kantvet hag a oue enterret en ilis kouent. Wilton, eleac'h ma zeo bet ato henoret evel eur zant braz beteg ma teuas Bro-Zaos d'en em ober protestantez. Pebes kentel a ro deomp an tri zant-man : sant Thivisiau, sant Herbot ha sant Yvi. Kals a dud a zo o klask meuleudi ho nessa. An tri zant-man a bella muia ma c'hellont eus pep meuleudi, pep henor. Kuittaad a-reont ho bro gant aon da veza re anaveet, re vrudet. Pebes kentel d'ar re a

zo ennhô kement a lore'h evit an tamik skiant ho deus c'hoas resevet digant Doue. Pedomp Doue d'hon derc'hel ato humbl dindan he zorn, da rei deomp ato ar gourach da heulia he vouez, n'eus fors da beleac'h e c'halvo ac'hanomp. Pellaomp evel dho eus ar meuleudi hag an henoriou. An henoriou ne vezont ket klasket a zo ato kals essoc'h da zougen.

UGENTVET PENNAD

Lez-Breiz

N'eo ket aoualc'h anaout sant Villiau en he bart e unan, heb derc'hel kont ebet eus ar re oa het arozhan nag eus an dud ho deus gret koms anezho var he lerc'h. Evit kompren mad amzer sant Villiau e renker rei eun tol lagad var an amzer oue bet araok dezhan hag ive var an amzer a oue var he lerc'h. Histor eur vro a zo evel eur chaden ; ma na zellit nemet ous eul lagaden epken eus ar chaden-ze ne veloc'h ket e pe leac'h e ma he nerz nag e pe leac'h e ma he sempladurez.

Breiz-Izel goude maro ar roue Milliau a oue eur pennad en droublien , en dizurs. An oll ne anzavent ket Rivod evit ho roue, hag eur vro heb penn, heb eur mestr anzavet gant an oll, ne hell ket beza krenv. An

unvaniez eo a ra an nerz. An dra-ze zo bet lavaret pell zo ha ne d'eo nemet re vir.

Gant Rivod, Breiz ne oue ket eurus ha goude he varo e oue c'hoas kastizet goas-soc'h. Neuze kement hini ho devoa eun tam galloud er vro, a glaskas beza mistri. Ar Fransisien hag ar Zaozon, hor brassa enebourien , a lakaas da dalvezout evitho an amzer-ze a drubuill a ioa e Breiz evit kemeret Roazon, an Naoned ha Guened (814). Roazon hag an Naoned a zo bet aliez gouneed gant ar Fransisien. Breiz-Izel ha dreist oll bro Kerne ne jomas morse pell gantho.

Breizis a deuas abenn nebeut da anaout pegen diskiant e oant oc'h en em zrailla etrezho evel enebourien. Lakaat a rejont neuze da gommandi ar c'hont Jarnithim, a oue lazet er c'henta siourmad. Evit beza mestr e Breiz, ar roue Charlemagn a renkas ober brezel dezhi teir guech, ha goude an teir vrezel-ze e lavare ar c'homzou-man :

« Ma renkan gounid eur vech c'hoas var Breizis, ne jomo soudard ebet ganen. » Ar victor diveza gounet gant Charlemagn var Breiz a badas soken ken nebeut ma ne lakaas ket Breiz var he destamant en eur ober al lodennou eus he rouantelez etre he vugale (814).

Goude maro Jarnithim, Breizis a joazas evit ho roue Morvan, kont a Leon hag a Gherne, lezhanvet Lez-Breiz, da lavaret eo harp, skoazel Breiz (818). Lez-Breiz en devoue an honor d'ober brezel d'ar roue Lois, mab da Charlemagn. Roue ar Frans a zigassas da gaout Lez-Breiz eur manac'h hanvet Vitkar evit hen alia d'ober ar peoc'h ha da anzae e oa Breiz eul loden eus rouantelez Frans. Vitkar a lavaras evelhen da Lez-Breiz : « Anavezit va roue evit oc'h hini, rak he c'halloud a zo kement en tu all d'ho c'hini eget an env en tu all d'an douar. » « Gra kement-se, evit da vro, da vugale hag

kement hini a garez, eme c'hoas ar manac'h. » Lez-Breiz a respontas : « Lavar eus va feurs da roue ar Frans ne labouran ket he zouar ha ne fell ket dinn eus he lezennou. Dezhan eo da ren var ar Fransisien, dime da ren var ar Vretouned ; roue ar Frans en deus he wiriou, ha me, va re. M'ho deus c'hoant ar Fransisien da gaout brezel, ho devezo brezel, rak va dorn-deo dime n'eo ket c'hoas seiset. » Var ar respont-se, Vitkar a zistroas da balez roue ar Frans evit renta kont dezhan eus ar pez en devoa gullet ha klevet. Ar roue Lois a zestumas raktal eun arme niverus hag a deuas ganthi beteg koat Breziat. Lez-Breiz a guittaas ive he bried, he vugale, he gastell, hag araok mont en hent e roas da eva d'he zoudardet bep a chopinad mad a vin. E unan e kemmeras he lod, hag ear ennhan neuze ez eas d'ar stourmad evel eul luc'heden. Ken hardis hag an aigl pe er, e stag d'he enebourien hag e plant dizamant en ho c'hreis an

dir tremped mad eus he gleze. Ar Fransisien a goez en dro dezhan evel keillien. Ma teu avisiou eun tam var he giz eo evit ober eul lamm brassoc'h etoues ar Gallaoued. An ours pe al leon, pa vez dilammet he re vihan diganthi, ne ziskuez ket muioc'h a gounnar eget na rea Lez-Breiz.

Epad ma koeze he enebourien en dro dezhan, evel ar guiniz en eost dindan fals al labourer, eur pezh Gall hanvet Cost a hellas tostaad outhan hag a blantas he gleze en he staon. Morvan Lez-Breiz treuzet he c'hinou a goez d'he dro d'an douar. Ar Gall neuze a ra eul lamm araok gant he varc'h hag a drouc'h dezhan he benn. Lez-Breiz a denn eun huanad hir ha diveza, mes araok mervel en devoue ar blijadur da velet ar Gall Cost o koeza ive e unan dindan kleze eur breizad.

Eurus ar re a varvas en deis-se e kenver ho roue. Hi da vihana ne renkchont ket soubla ho fenn dindan lezen ar Gallaoued.

Morvan Lez-Breiz n'eo ket c'hoas ha ne vo biken ankounac'heat etouez ar Vretouned. Eur verzh koz a lavar e oue klasket gant he floc'h epad seis vloas. Eun devez o tremen dre koat Hellean e kavas var he hent eun hermit koz a deue d'ar feunteun da gerc'het dour. Ar floc'h a c'houlennas diganthan : « Piou, emezhan, zo aman besiet dindan ar voden-man ? » An hermit a respontas : « Lez-Breiz eo a ra he gousk dindan an douar-ze. Epad ma vevo Breiz, hen a vevo en hor c'halonou. Dihun a rei ne vo ket pell, eme an hermit, hag e c'halvo adarre Breizis da flastra ar C'hallaoued. » Hag e guirionez, evel a lavare an hermit koz, eul Lez-Breiz all a oue kavet. Guiomarc'h, kar da Vorvan, a oue choazet evit roue (825) hag a zalc'has penn eun nebeut d'ar Fransisien. Mes siouas ! kaout a reas ive prest ar maro er brezellioù.

Goude ar stourmad etre Morvan hag ar C'hallaoued, he benn labeet a c'hoad a oue

digasset, eme an histor, d'ar manac'h Vitkar. Ar manac'h a voalc'has hag a gemennas ar penn-ze ha dre-ze e teuas da anaout e oa hennez e guirionez, penn Morvan Lez-Breiz.

E kenver ar ster Elorn, var gourre eur roc'h huel e deus roet he hano d'ar barrez, da barrez ar Roc'h, e veler c'hoas eun tam benak eus kastell Lez-Breiz. Hirio ne jom mui eus ar c'hastell-ze savet er c'hantvet navet ha freuzet er c'hantvet pemzekvet, nemet tamou mogeriou du goloet a illio. Eur vezen benak (rouez int) a zo e plas ar c'hoat a oa guechal en dro dezhan. En dro da Gastell ar Roc'h, en amzer Lez-Breiz, e oa koajou braz ha tenva. Difennet e oa ive gant dour ar ster Elorn a dremene en he genver, gant kaeou spenn, douvesjou ha laguiner. E kreis ar c'hoajou e oa ar c'hastell, ti kaer meurbet, leun a armou hag a

zoudardet. Eno eo ec'h en em blije ar muia Lez-Breiz.

**Sant Neventer, sant Derc'hen,
sant Riok**

Pa gomzan eus ar Roc'h hag eus ar ster Elorn, leveromp ez eo bet ar ster-ze test eus meur a dra gaer ha burzudus. E kenver Kastell ar Roc'h, e kleve ar c'herniel boud o sôn, ar c'hlezeier oc'h en em strinka an eil ous egile, ha kaer e devoa ar ster ober trouz pa deue dour braz, trouz ar c'hastell, pa vije gouel ennhan, a zave huelloc'h eget he hini.

Izelloc'h eget ar Roc'h, e kenver Landerne, var bord ar ster-ze ive, ez eus eul leac'h all brudet, hanvet Traon-Elorn. An hano a Elorn a deu d'ar ster eus ar roue koz Elorn a rene var Landernevis daou c'hant vloas pe var dro goude donedigez hor

Zalver. D'ar mare-ze an Elorn a oa c'hoas he hano mad dour-dôn. Guelet a reimp bremaik perak e chenchas hano.

Cetu ni o vont pell eus amzer sant Villiau, mes parrisionis Guiniventer ha sant Derc'hen a gavo mad e lavarfen eur ger, en eur dremen, eus ho zent patrouned. Ho buez n'eo ket eun artikl a feiz ; n'eo ket difennet ken nebeut kredi ennihi.

Sant Neventer ha sant Derc'hen, daou varc'hek a feiz hag a galon eus Bro-Zaos, a oa eat da Jerusalem da zaoulina var an douar santel-se. Lod all a lavar ez ejont da Rom, ha nan da Jerusalem, evit henori relegou sant Per ha sant Paul, ha reseo bennos an Tad santel ar Pab. N'eus fors : an eil hag egile a hell beza guir. En dizro eus a Jerusalem pe eus a Rom e teujont d'ar gear dre Vreiz-Izel, hag erruet e Traon-Elorn, e velchont ar roue Elorn oc'h en em daol en dour d'en em veuzi divar mogeriou he gastell a

oa stog ous ar ster. Sant Neventer ha sant Derc'hen a erruas abred aoualc'h evit tenna ar roue er meas an dour hag hi d'her c'hass d'he di. Neventer a c'houlennas digant ar roue perak e oa en em daolet er ster. Elorn a respontas : « Autrounez, emezhan, aman e kenver, ez eus eur pezh dragoun hag a zreb tud ha loened. Pa deu an naon dezhan e ra eun distruch spontus er vro. Evit hen derc'hel en he doull, en eur derri dezhan he naon, ar roue Briz-Tok eus a Vrest en deus great eur gourc'hemenn skrijus. Bep sadorn rekis e vez tennet brema d'ar zort, hag an hini a erru he dro a vez kasset dezhan da zrebi pe a renk kass eun all en he blas. Ar sort a zo ken alies koezet var va zi ma na jom mui ganen nemet va fried hag ar bugelik daou vloas-man hanvet Riok. Er zizun diveza, ar sort a zo koezet adarre var va mab unik, ha kentoc'h eget kass anezhan d'an dragon on bet en em daolet er ster an dour-

don. » Cetu komzou ar roue Elorn, hag eur
verz koz-koz a lavar ive ar memes tra :

Ar zort a zo ken lies koezet
Ebars em zi, n'en deus restet
Eus a gement den am eus bet
Nemet va mab ha va fr'el.

O velet e renken rei
Va mab dezhan da zreñ,
Ken braz eo bet va dizesper
M'oun er em strinket er rivier.

Sant Neventer ha sant Derc'hen a zelaouas
ar roue Elorn gant truez outhan. Ma teuit,
emezho, d'en em ober kristen, ni a hello dili-
vra ac'hanoc'h eus an dragon spontus-se.
Elorn a reas da genta skouarn vouzar hag
a lavaras epken rei dezho unan eus he gom-
mananchou. Nan, eme sant Derc'hen, n'hor
beus netra da ober gant ho touarou. Lavarit
da vihana sevel eun ilis var ho touarou en
henor d'ar guir Doue ha ni a zistrujo an
dragoun.

Sant Derc'hen, gant eun dousder vraz
D'ar prins Elorn a lavaras :
N'hon eus ket affer ho madou
Guell e ganeomp kaout ilizou.

Ar roue Elorn a assantas d'ar ger-ze hag
a gonsantas ouспен lezel sevel he vab bihan
Riok er relijion gristen. Neuze an daou var-
c'hek a ieas da gaout an dragon en he
gavarn.

Bez en devoa, hed da hed,
Ervez an histor, pemp gourred ;
He gorf a oa da vihana
Kement hag ar marc'h ar brassa.

Ous ar bazilik e oa henvel,
Hag eur zell dezhan ken kruel
Ma laze an dud heb dale
Epken en eur zellet outhe.

He gorf a ioa geloet
Eus a askant kaled meurbet
En eur ger, ken terrupl oa
Ma krene an oll dirazhan.

Sant Neventer a lammas d'an douar da
genta hag he varc'h a dec'has kuit d'an daou

lam-ruz gant ar spont dirak ar sar pant. Hen, ne gemmeras ket aon, ha goude bea gret sin ar groas var an dragon e stollias anezhan hag e lakaas anezhan etre daouarn ar c'hraouadur Riok. Heman a gassas an dragon da di he dad hag ac'hano e oue kasset da Vrest da gaout ar roue Bris-Tok (tok-briz, tok a liou, abalamour ma ao briz-livet he dok e sin eus he c'halloud). Eus Brest e oue bleinet an dragon da Bontusval, e parrez Plouneour-Trez, el leac'h ma oue beuzet er mor. Ar roue Elorn a zonjas neuze sevel eun ilis; mes ne felle ket dezhan sevel anezhi e Barget var douar Guiniventer. Da genta e klaskas sevel an ilis var menez ar Rhun, e Sant-Servez, evel a lavar ar verz koz :

Lavaret a rer peurvuia
E oue kommanset batissa
Dre urs Elorn, a expres,
E menez ar Rhun, e Sant-Servez.

Dre virakl, ar pezh a oue eno savet eus an

ilis, a oue kasset en eun nosvez da Varget el leac'h ma ema brema Guiniventer.

Pa oue kommanset batissa
El leac'h ma felle dezhan,
Dre virakl e oue kasset
An oll marteriou da Varget.

Ar roue Elorn, eleac'h dizrei ous Doue er guel eus ar mirakl-se, a ieas kounnar ennhan hag a lezas ilis Guiniventer er stad-se. Ne oue echuet nemet en amzer ar roue Hoel, lezhanvet ar Braz. Elorn a gassas kuit diouthan he bried hag he vab Riok. He bried a ieas da dremen ar rest eus he buez e maner Koat-ar-Forest. Eno e lakaas sevel eur chapel. Sant Riok a reas pinijen epad eur bloas ha daou ugent en eur c'havarn var bord ar mor e parrez Kamelet, tost da Crozon. Sant Guennole her c'havas eno eun deis hag a gassas anezhan ganthan da gouent Landevennec. Eno e varvas. An Autrou Yvon ar Braz, bet chalouni a Gastell-Paol ha person

e Guiniventer, bet ive kenta aumonier ha kuzulier an duk Fransez eilvet er bloas 1472, a goms eus an oll draou-ze el leor scrivet ganthan divar benn ar pezh so bet c'hoarveet guechal en eskopti Leon.

UNAN VARNUGENTVET PENNAD

Nomenoe

Goude maro Milliau, Lez-Breiz ha Guio-marc'h, kourach Breizis a gollas eus he nerz. Epad eis vloas goudeze e chomchont e peoc'h (red mad e oa), ha dindan galloud ar C'hal-laoued. Bep bloas e vije kasset da Roazon an taillou a zave roue ar Frans divar goust Breizis. Nomenoe, breizad dre ouen ha dre ar galon, a c'houarne d'ar c'houls-se Breiz evit kont roue ar Frans.

Lod a lavar e oa o chom e Coatloc'h e

parrez Skaër (Ogée). Lod all a laka e oa he balez en eskopti Sant-Malo (Dom Morice). Lod all c'hoas a lavar en eur c'hoat en eskopti Guened (De Robien et Piganiol). Ar scridou koz da vihana a hanv he balez Coat-louc'h. Marteze e ma ar virionez gantho oll. Nomenoe, karget da zestum ar guirioù, an taillou divar Breiz oll a dlíe kaout meur a vaner e Breiz. Hini Coatloc'h, heb douetans ebet, a oa dezhan ha meur a hini all c'hoas, m'oar vad; rak d'ar mare-ze an hentchou a oa ker fall m'ho devoa an dud galloudek diskenn aman ha diskenn haont. Guelet hor beus kement all o vea guir evit sant Villiau hag he genderv Argant. N'eus fors : n'eus fors e peleac'h e chome peurvuia, Nomenoe, breizad e-unan, eo a zastume an taillou evit ar C'hallaoued.

Eur bloavez eun den gentil eus menez Arrhe a i eas da gas an taillou da Roazon. Pa oue pouezet ar sier arc'hant, e ouent

kavet re skanv. Ar Gall karget da velet hag ar pouez a ioa enno a reaz rebechou c'huerdo d'an den gentil a Vreiz, ha leun a fulor e tibennas ar breizad. He benn, en eur ruilla er valans, a lakeas just ar pouez enni. Nomenoe, evit doare, a expres mad, n'en devoa ket kasset ar gont. Ar c'helou trist eus a vuntr disleal an den gentil a redas buhan dre ar vro. Tad an den gentil dibennet a deuas da Goatlouc'h da c'houlou eus Nomenoe a beza ez oa c'hoas lezennou a justis var an douar, eun Doue en env, ha tud e Breiz. Nomenoe a zigemmeras mad an tad glac'haret, a gennerzas anezhan guella ma c'hellas hag heb lavaret oupen a gassas he servicheurien var an aot da zestum bilien-nou-mor. Karget e oue ar sier a vein eleac'h arc'hant ha kasset evelse da Roazon er bloas goude. An daou zac'h kenta a oue kavet ar pouez enno, en trede e vankas eun nebeut liuriou hag ar C'hallaoued da grial a nevez :

holla ! holla ! laeron ; aman adarre ne ma ket ar pouez. Nomenoe, eat ive da Roazon da heuill he servicheurien, a dennas raktal he gleze, a droc'has he benn d'ar Gall a ioa var dro ar valans, a dolas ar penn-ze ebars hag en doare-ze ive ar pouez a en em gavas leal.

Divar gement-man e savas krosmol etre Breizis ha Gallaoued. Eur stourmad spontus a oue etrezho, hag ar Gallaoued en dro-ma a renkas plega deomp.

An emgan ruz-se a oue gret e Bollon. Charles ar Moal, mab bihan da Charlemagn, a oa e penn ar C'hallaoued, Nomenoe e penn ar Vretouned. Fisians Breizis a ioa en ho bidiji bihan skanv, nerzus ha padus eus ar boan. Guintet var bep a inkane, stard a droad, dir ho divesker, kustum da c'halou-pad dre ar c'hoajou, ar bruk, al lanneier hag al laguinier, Breizis a oa gantho skoe-dou houarn, harnesiou houarn, ha birou skanv a vinte en ear evel plun ampoezounet.

Ar C'hallaoued, er c'hontrol, ho devoa kezeg pounner hag armou da laza a dost evel an hach hag ar c'hleze berr. Breizis a lammas varnezho evel al lion var an olifant. Skei a reant a gleiz hag a zeo, traon ha treac'h, ma na ouie mui ar C'hallaoued penos en em ziuall. Daou zevez leun e padas ar stourmad-se, ha bemdez ar C'hallaoued a renke kiza. Repos ebet nemet epad an noz. D'an trede dervez ar C'hallaoued a glevas lavaret e oa skampet kuit ho roue hag hi ive, m'ar gouient, da dec'het d'an daou lam var he lerc'h.

Breizis a jomas mistri eus Breiz-Izel ha Breiz-Huel, hag ar C'hallaoued a deuas neuze ho zro da grena dirak ar Vretouned (841). Diou verz koz eus a re gaera dastumet gant an Autrou de La Villemarque a gont deomp ar burzudou gret gant Lez-Breiz ha Nomenoe. Re hir e ve lakaat anezho aman; pep hini a hello ho c'haout el leor *Barzas Breiz*.

EIL LEOR

EIL PENNAD VARNUGENT

Guerz koz sant Moelar

An heur-vad am eus bet da gaout e Montroulez, e ti an Autrou Ledan, guerz koz sant Voelar eleac'h ma zeo merket he vuez penn da benn. Me zonch ez eo ar verz-se an darnvuia eus a vuez sant Moelar, skrivet e gallek gant an Autrou Yvon Arrel, bet persoun e Lanmeur ha vikel-vraz eus Dol. Levr an Autrou Arrel a zo bet moulllet e Montroulez e ti Georges Allienne, er bloas c'huezek kant seis varnugent (1627). Siouas ! ne m'eus ket gellet lakaad va dorn var al leor-ze. Mes aoualc'h a anavezomp eus buez sant Voelar

dre ar verz koz chomet ganeomp ha dre an
testeniou nevez kavet e Meaux, n'eus ket
pell, gant an den guesiek dom Plaine, eus a
urs sant Beneat. Ouspen-ze, an Tad Albert
en deus bet leor an Autrou Arrel dirak he
zaoulagad, hag e buez sant Mœlar, scrivet
ganthan, en deus lakeat ar pezh brassa eus al
leor-ze. N'en deffe eta netra da zeski deomp,
a goude ma ve kavet, leor an Autrou Arrel.

Cetu aman varlerc'h eul loden eus guerz
koz sant Vœlar. Re hir eo evit ma lakaffent
anezhi aman penn da benn. Ouspen-ze, kals
tud guesiek ne gavont ket anezhi din da
vea moulllet a nevez hed a hed. Aoualc'h
e vo eta kommeret ennhi ar c'houblajou
koanta, ar re a ro deomp anaoudegezh eus ar
pezh so c'hoarveet a gaera gant sant Mœlar.

Buez an Autrou sant Mœlar

Patron eus a ilis Lanmeur

TROET A C'HALLEK E BREZOUNEK ER BLOAS 1731

VAR TON : *Guerz an Autrou Sant Ian ar Biz*



C'hoant braz am eus gant gras Doue
Da scriva eur c'hantik neve ;
Da ziskleria, evit he c'hloar,
Buez an Autrou sant Mœlar.

Mab oa d'an Autrou sant Milliau
Prins ha roue eus a Gerneau ;
He dad hag he vam a veve
Ho daou e guir doujans Doue.

Ken santel e oa ho bue
Var ar bed-man dirak Doue,
Ma kreske bemdez ho madou
Hag ho furnez dre he c'hrasou.

Biskoas, epad ar seis vloas rên,
Ervez ar vuez e m'aoun o lenn,
Na eure en ho douaro
E neb fæson eur gaouad glaç.

Teureul a rent eost gousgoude
Er spas eus ar seis bloavez-se,
A bep seurt hed en abundans ;
Peger braz eo ar Brovidans !

Piou 'eta ne lavaro goude
Oa eur mirakl a re Doue ?
Dre eur c'hlizen eus an envou
E c'hour-glepie ho douarou.

Doue en deus, a bep amzer,
Roet grason braz hag heb niver
D'an nep her c'har a greiz kalon
Evel ma eure ho patron.

Sant Milliau, tad d'hor prins Mølar,
En devoa eur breur ken digar !
He hano a zo Rivodus.
Bet eo eun eil Cain malheurus !

Kement a boan a re ganthan
Klevet na guelel anezhan
Ne glaske ar fæson bemde
Nemet da gavout he vue.

Da vreur a oa karet gant Doue,
Abel guechal a oa ive,
Cain hen laz gant an drouk outha ;
Te ra ive ar memes tra.

Ar prins Mølar zo iaouankik,
Ne deo nemet eur bugelik ;
Dic'halloud eo eus a bep tra
Pa n'en deus c'hoas nemet seis vloa.

Quemennet en deus he brinset
Ar roue Milliau d'he gavet ;
Rivodus a en em gav ive
Er memes assamble ganthe.

Mølar, cetu c'hui reuzeudik,
C'hui epken c'hoas eur bugelik ;
Lazet eo, gant he vreur, ho tad
Lazet d'ar bopl eur Roue ker mad.

Ho mam, ar brinsez Aurilla,
Zo ken mantret ; mervel a ra
O velet hevelep darvoud
Eneb pep guir oc'h erruout.

Klevet a ran mouez ar brinset
Oll, a eur vouez, o lavaret :
Kenavo d'ho mestr ha d'ho roue
Oh ! pebes malheur, va Doue !

Eun darn a voalc'h gant ho dælou
He gorf sakr hag he c'houlou,
Darn all a zao divar an douar
Ar vam baour hag ar prins Mølar.

He niz pa n'hellas ket laza,
Rivod 'ordren trouc'ha dezhan
He droad kleiz, ive he zorn deo
'Vit miret na ve roue d'he dro.

Cetu c'hui, prins, mac'haniet,
Lammet diganeoc'h ar c'herzet ;
Mes eun Doue zo trugarezus
A rent, pa gar, an oll eurus.

Eun æl a ziskenn eus an env,
Ganthan eun dorn abers Doue,
Hag eun troad guerc'h, gret dudius.
Pebes mirakl, ôh ! va Jesus.

Mølar, ken humbl, ken vertuzus
Hag ous paour ken truezus
Etoues an dud a dremene,
Evel eun eal demeus an env.

Rivod, petra fell did ouspen ?
Petra c'hoas a ra did anken ?
C'hoas e renki, m'er goar ervad,
Ruia da zaouarn en he c'hoad.

Tec'homp, eme he vagerez,
Rivod a glask kaout ho puez ;
Va fried en deus touet dezhan
Digass ho penn azirazhan.

E kear Lanmeur ec'h erruont,
D'ar c'hastell monet a reont
Elec'h ma oa d'an amzer-ze
Commor, letanant ar roue.

Ar c'hout Commor hag he bried
D'ar prins ho devez lavaret :
Chomit ganeomp aman, Autrou,
Deoc'h eo hon ti hag hor madou.

Pa gleo Rivod pelec'h e oa :
Kerioltanus, emezha,
Er vech-ma e renkes ober,
Heb dale pelloc'h, an asfer.

He vagerez a lavaras
D'ar prins Mølar pa ho guelas :
Diouallit outhe, p'fins iaouank,
Aon am eus na vent daou dyrant.

Kenavo, va bugel, emezhi,
Er vech-man 'vo an disparti,
Me vel ervad, heb dale pell,
E renket e merzer, mervel.

C'hui pehini beteg vrema
Zo bet eur zant var ar bed-ma
O pet sonch en ho magerez
Pa viot eat da gaout an ælez.

Pa oa eat an oll da repos
Ha serret an dorojou kloz
E tibennas an daou dyrant,
Pa oue kousket, ar prins iaouank.

Pa ho devoa gret an torfet
Ober an tec'h ho deus sonjet
Da gass ar penn da Rivodus
An daou vuntrer malheurus.

Dre ma oa tenval an amzer
Hag alc'hoezet kloz ar persier
Instantus o vont en he rout
E tal an ti a dor he c'houg.

O pet souch eta, Lanneuris,
Pa antreit en oc'h ilis,
Eus a varo ar prins Mølar
Hag he vuez var an douar.

He gorf sakr en deus repozet
Pell braz en douar benniget
En oc'h ilis dindan ar c'hœur
Parrissionis a Lanmeur.

Eun arched mean a zo ennhi,
Elec'h m'eo bet o repozi
He gorf sakr goude he varo ;
Pebes tenzor eus an envø !

E Kemper-Kaourintin e ma
He benn benniget a vrema ;
Patron eo dec'h en ho parros
Oc'h alvokad er baradoz.

Gouel sant Mølar hag he offis
A vez gret bep bloas rekis,
En deis kenta a viz here
En he henor ha gloar Doue.

Da govez ha da sakramanti
D'an deis-se eo dleet ho pedi
Evit kenderc'hel en ho kalon
D'ho patron guir devosion.

M'hor bo oll goude hor maro
Digant Doue krouer an envø
Lod assemblez gant sant Mølar
Eus ar joausdet hag ar gloar.

Amen.

Lakeat am eus ar verz araok buez sant
Vølar evit ma c'hello an oll heuilla essoc'h
he vuez. En amzer goz ne errue netra gaer
heb na vije lakeat e guerz. Evelse ar bopl a
anaveze mad histor Breiz hag a greske bem-
dez he garantez evit ar vro en eur gana he

meuleudiou. Hirio an deis, ar barzet a ia var zigresk, da vihana ar barzed-red. Mæs an delen a zo dalc'het kouls a biskoas pe vell gant barzet desket. Reier Penmarc'h ho deus klevet meur a zon, meur a gantik dudius. An eccleo er C'hastellin en deus tridet ive meur a vech o selaou an delen. Oh ! nan, neket ar barzet a vanko c'hoas da gana gloar hag enor Breiz, da gana he nerz-kalon hag he feiz. Er Finister, e Costez-an-Nord, er Morbihan, e komzer eur brezounnek ken iac'h a biskoas. Bennos d'an dud a galon a ro harp da iez hon tadou ; harpa ar brezounnek, eo harpa hor bro ha miret divlam he feiz.

TREDE VARNUGENT PENNAD

Buez sant Vêlar

HE IAOQUANKIS

Ar roue Milliau, eur bloas arok sevel var an trôn, a gemmeras evit pried eur verc'h a renk huel ha kristenez vad, merc'h ar c'hont Judocus, kont eus an Domnonee. Ervez an Tad dom Plaine, an Domnonee a dape pemp eskopti : hini Leon, hini Treguer, hini Sant-Briek, hini Dol hag hini Sant-Malo. Ervez an Autrou Kerdanet, eus a Lesneven, an Domnonee a dape epken Kerne, Treguer ha Leon pe Breiz-Izel a bez.

Er bloavez kenta eus he zimezi, gant ar brinsez Aurelia, merc'h ar c'hont Judocus, Doue a roas da sant Villiau eur bugel ; ar bugel-ze a dlïe bea eur sant braz hag eur

merzer ken din a druez. Hanvet e oue Moelar. N'eus izom ebet da lavaret e oue savet ar prins Moelar evel ma sav ho bugale ar gristenien vella. He dad hag he vam a veve ho daou e doujans Doue, eme ar verz. Ho oll garantez a en em zestumas var benn ar mabik Moelar, rak n'ho devoue ken kraouadur nemethan. Eur mab unik a zo eur golladen etre daouarn kerent diskiant. Etre daouarn kerent vertuzus, nemet guelloc'h a ze e vo savet ar mab unik, rak essoc'h eo kelen unan epken eget kelen eur vanden.

Sant Villiau a roas d'he vab an deskadurez kristen en devoa resevet e-unan. Pep skuer vad a oa dirazhan, pep skuer fall pelleat diouthan, ha dre-ze eun natur dreist a graouadur evel Moelar ne helle beza nemet eur bugel fur. Moelar a oue ouspen eur bugel fur : abred e teuas da veza eur c'hraouadur santel ha desket braz. Estonus eo lenn ar sarmoun gaër a reas d'he vourrevien d'an

oad a seis vloas. N'eus ket a bar d'ar malheur evit kossaat buhan eur c'hraouadur ha sevel he spered etrezek Doue. Ar c'holl abred eus eun tad pe eur vam a zigor spered eur bugel da zonjou dreist he oad.

Sant Villiau, dre lignez (sonch ho p'eus), a oa kont a Gherne. Goude maro he dad, roue a Gherne, e teuas e-unan da veza roue, neket epken eus a Gherne, mes eus a Vreiz-Izel a bez. Leon ha Treguer a vije peurvuia gouarnet gant kontet en hano roue ar Frans hag a renke paea eun dra benak bep bloas d'ar vro-ze. Sant Villiau, dre he zimezi gant ar brinsez Aurilla, a deuas ive da gaout guir var Leon ha Treguer. Maner ar Veuzit e Lanmeur a oa dezhan. Ar c'hont Judocus, he dad kaer, a varvas arok sant Villiau : Leon ha Treguer a oue gouarnet var he lerc'h gant Commor, breur-kaer da sant Villiau.

Goude maro he fried e Quemper, ar brinsez Aurilla n'en em gave mui e savete er

ger-ze. Ar bopl, evit guir, a oa evithi, mes Rivod en devoa ive kals a dud fallakr a du ganthan. En he melconi ha gant aon, e kemmeras an teac'h gant he mab Moelar. C'hoant e devoa da guzat ar mab ous an hini en devoa lazet an tad. Daou dorfet, da gals so, ne goustont ket muioc'h eget unan.

Ne hellent ket ken nebeut lezel var ho lerc'h eun tenzor ken prisius a relegou sant Villiau. Ar vamm hag ar minor paour, as-samblez gant ar c'horf maro, a deuas eta da c'houlén skoazel digant ar c'hont Commor, dimezet da eur verc'h d'ar roue Budik, da eur c'hoar da zant Villiau. Commor a oa o chom e Lanmeur e maner Koat-Eon. Ho soursi kenta a oue da vezia relegou sant Villiau e cathedral Lexobi. Eun ilis cathedral ne oa ket re gaer evit rei leac'h a repos da relegou eur zant hag eur roue.

Goude beza rentet an henor diveza-ze d'ar roue karet, ar brinsez hag he mab a en em

dennas en eur maner e Lanmeur, e maner ar Veuzit, evit gouela didrouz ha tremen ho anken dirak Doue.

PEVARE PENNAD VARNUGENT

Miraki kenta Moelar

Ar brinsez Aurilla ha Moelar a veve eta e kaon e maner ar Veuzit, diouallet eno gant Commor. Moelarik, heb sonjal tam er gurunen tec'het divar he benn, ne glaske nemet ober joa he vam. Ar brinsez, uzet mui ous mui bemdez he ieched gant an enkreiz, ne oa ket he fenn ken nebeut o sonjal dont adarre var an trôn. Moelar, dous evel eun oan, laouen evel ar Spered-Santel, devot evel eun eal ha desket dreist bugale he oad, a lake dre he gestou karantezus eun nebeudik levenez etouez oll anken he vam. Kraouadur a seis

vloas epken, ec'h anaveze ar boan, e ouie lenn he foaniou var dremm he vam garet, hag e rea he c'halloud evit laouennaat eun ti leun a dristidigez.

Rivod n'hen devoa aon ebet da gaout a beurs eur baourez kez intanvez hag eur minor ker iaouank. Mes an dud fallakr, evel al laer, a zo ato var aon. Rivod a vele ar c'heus dispar en devoa ar bopl da Villiau, ar garantez a zalc'he evit ar brinsez hag he mab. Guelet a rea ive an disprich a reat anezhan; hag e oa ato var aon na deuje ar bopl d'en em drei eneb dezhan hag a du gant he niz. Evit miret na ziskennje biken ar gurunen var benn Moëlar, e lakaas dôn en he spered en em zizober anezhan en eun doare benak. An dorn en deus lazet ne ra mui van evit lakaat a nevez ar goad da redek.

Da genta evelato, evit kuzat guelloc'h a ze he fallagriez, e klaskas bea hanvet kulator da Voëlar. Evit se e testumas e Quemper ar

re genta eus ar rouantelez hag e c'houlenнас digantho ar garg eus ar prins iaouank. Lavaret a reas dezho an oll geuz en devoa eus maro Milliau, hag ar c'hoant en devoa da rapari he dorfet dre he vadelez e kenver he niz. Promessaou kaer a goust nebeut d'eur goustians faos; mes Breizis a anavezaz an tigr dindan kroc'hen an oan. Selaou a rejont guelloc'h mouez ar vam a zifenne lakaat he mab etre daouarn ar muntre. Aurilla ne devoe poan ebet o tifenn he guir; ar bopl a zonjas ne oa netra da ober nemet lezel ar minor gant he vam, hag ar brinsez a oue hanvet kulatorez ar prins iaouank. Oh! ardou fall ar fallagriez! Klask dilam he mab digant eur vam goude bea lazet he dad ha laeret he gurunen! pebes den divergont! pebes kourach fallakr! pebes kalon dreud! Ervez an histor Breiz, skrivet gant ar seurez Anna de Jesus, ar c'honsaill-ze eus an noblans, ar veleien, ar vourc'hisien hag ar

baizantet a oue dalc'het e Kastel-Paol. Muioc'h a leac'h so da gredi an Tad dom Plaine a laka anezhan e Quemper (1).

Rivod a guzas brao an dipit en devoa abalamour ne oue ket hanvet kulator d'he niz. Pa ne hellas ket kaout Moelar en he garg, ha digass evelse an oan dindan he gontell, e chenchas sonch; mes sonch vad ebet ne helle dont eus spered an den-ze. Sonjal a reas en em zizober eus Moelar dre ar poezon. A fors da rei arc'hant ha d'ober promessaou kaer d'ar servicheurien a oa en dro da Voelar, Rivod a deuas abenn da brena ho c'hous-tians. E-unan e roas dezho ar poezon a vije lakeat e boued Moelar evel p'hen divije aon da vankout he daol. Ar poezon roet gant Rivod a oa anaveet mad he vertus. An nep en deus c'hoant d'ober taol sur a glask ar

(1) Ar scridou koz kavet gant an Tad Dupaz a ro da gredi ive e oue dalc'het ar c'honsaill-ze e Quemper.

pez so krenva etouez ann oll poezoniou. Ar servicheurien malheurus a reseve bemdez testeniou nevez eus karantez ha madelez Moelar evitho, a dlle krena ho daouarn o lakaat dezhan poezon en he voued. Pa gavchont eta an tu, he servicheurien, gouneet dre arc'hant, a lakaas ar poezon da sant Voelar en he evach ha var he voued. Moelar, desket abred da heuilla ar gisiou kristen, a rea ato sin ar groas hag a lavare *Benedicite* arok kommans he brejou. An Autrou Doue, dre virakl, a ziskuezas e oa poezon en evach hag en dibri. A veac'h m'en devoa gret sant Voelar sin ar groas varnezho, ar veren a dorras, ar boued a zuas. Ar zant melconiet oll a zellas ous he servicheurien gant eur zell hag a rebeche dezho ho zorfet. Raktal hinthi a chenchas liou, a gozas d'an daoulin dirazhan en eur anzaou ho fallagriez hag en eur c'houlenn pardon. Prometti a rejont beza divlam en amzer da zont var bep tra. Moelar,

en eur zonjal e pardonas hor Zalver d'he vourrevien, a bardonas ive dezho a galon vad hag a zavas anezho divar an douar.

Dre ar mirakl-man anad d'an oll, Doue a ziskuezas pegen santel e oa Moelar ; rak Doue ne ra ket a viraklou nemet dre zaouarn tud santel. Mes siouas ! he boaniou ne oant ket c'hoas echu. Maro he dad santel a zigoras evithan hent ar C'halvar. N'en deus pignet c'hoas nemet var an huelen-genta eus an hent-se. Ma lez Doue ganthan ar vuéz, dre virakl, eo evit kaeraat he gurunen en eur hirraat he boaniou.

PEMPET PENNAD VARNUGENT

Merzerenti Moelar

An tirant Rivod o klevet lavaret e oa bet ar poezon dic'halloud e kenver buez Moelar a ieas mui ous mui e kounnar. An diaoul a ioa en he spered hag en he galon. Neket sonjou fallakr a vanko d'an den-ze, bezit sur. Sakreal a ra eneb ar servicheurien-ze, sod aoualc'h evit koll kalon dirak eur mirakl. Neuze e lez a gostez an ardou kuzet ; mont a ra er meas anezhan e-unan ; red eo dezhan kaout penn Moelar kousto pe gousto. N'eus ket da vare'hata ; en deis pe en noz, n'eus fors, an taol a renk beza gret. Difisians en deus brema eus an dud a zo en dro da Voelar. Ar re-ze, emezhan, a zo kalonou fall a dud, kalonou gedon. Ne ouzont ket labou-rat a zoare evit arc'hant mad.

Petra reio? Kass a ra eur vanden eus he dud e-unan desket ganthan da vressa ho c'houstians dindan ho zreid ha d'ober n'eus fors petra var ar ger. Erruout a reont e Kastell-Moelar, er Veuzit, e Lanmeur. An urs ho deus da zismantri ar c'hastell m'ar deo red ha da zigass da Rivod penn ar zant. Erruet er c'hastell, a zo eur c'hart-leo eus kear Lanmeur, el leac'h ma ema brema me-reuri ar Ruvarc'h, e c'houlennont koms ous ar prins Moelar. A veac'h ma zeo digoret an or dezho e krogont er porsier hag en he alc'huesiou, ha cetu hi da gambr ar prins. Moelar a jom sebezet oll o velet kement a dud armet o tiroll en he gambr en eun taol-kont. Kompren a ra raktal evit petra e teuont; guelet a ra adarre dorn he donton Rivod en affer-man. « N'ho p'eus brema, eme ar zoudardet, ken tra da ober nemet en em brepari d'ar maro. » Ar zant iaouank a reseo ar c'helou trist-se gant kourach eun den en oad

ha feiz eur c'hristen mad. Respont a reas dezho. « Pell zo, emezhan, e oan o c'hedal kement-man abers va zonton. Lazet en deus va zad; ne hellen ket sonjal en divije esper-net ac'hanon. Klasket en deus dija va distruja dre ar poezon; brema e renk dont din gant ar c'hleze. Kaout a ra dezhan e m'aon-me o klask dilam diganthen he rouantelez. Oh! nan; Doue en deus roet din ar c'hras da garet kement rouantelez an envou ma n'am eus izom ebet eus rouantelesiou an douar. Dont a rit da zilam diganen va buez; grit ervez ma zo lavaret deoc'h; mes da vihana lezit ac'hanon da govez arok reseo taol ar maro. »

Ar zoudardet, goude komzou ken tener all, hag e memor eus an tam-feiz ho devoa bet ho unan guechal, a roas d'ar zant he reked. Goulen a ra he confessor, beleg ar c'hastell, hag e ia ganthen er chapel da govez. Ar zoudardet a ziualle an or.

Etretant, epad ma rea he govession, he vam ar brinsez Aurilla a goezas d'an daoulin dirak kabiten ar zoudardet. Kass a reas an den-ze ganthi beteg he zenzor, diskuez a reas dezhan he arc'hant, he aour, he goalinier, hag e lavaras dezhan kemmeret ac'hano ar pezh a garje gant ma lec'hje ar vuez gant he mab Mœlar. An tigret-se a zantas eun espes kalon en ho c'hreis dirak daelou ar baourez kez intanvez, dirak dinamdet ha gened eur paour kez minor, mab eur roue. En eur zellet pissoc'h ous ar prins iaouank, e velchont ive deustu an henvededigez kaer a oa etre Mœlar hag he dad. Neuze, gant ar sonch eus madelezou ar roue Milliau en ho c'henver, ho c'halonou a deuas eun nebeudik da doma e kenver he vab. Ar c'habiten a gomzas evelhen ous he gonsortet. « Ken-vreudeur, emezhan, ar pezh a glask Rivod dreist oll eo derc'hel evithan ar gurunen. A ma lakaffemp Mœlar en hevelep stad na ve

biken mui goest da rên ? Rivod a ve kon-tantet en doare-ze ha var ar memes tro hor bezo sauveteat he vuez d'eur prins iaouank ken gentil hag heman.

» Troc'homp dezhan eur vreac'h hag eur c'har ; evelse ne hello mui na mont var varc'h na mania ar c'hleze, na mont d'ar vrezel. En doare-ze, heb laza Mœlar, ec'h hellimp derc'hel ar gurunen beteg ar maro var benn Rivod. »

An ali-ze a blijas d'ann oll hag e oue gret ar sonch da drouc'ha da Voelar he vreac'h deo hag he droad kleis. Kaout a rea dezho beza c'hoas anaoudek en eur ober an dra-ze epken. Tud so hag a gav dezho kaout mirit pa ne reont ket ker fall a ma c'hellont ober.

Goude beza echuet he govession hag he bedennou, sant Voelar a guittaas ar chapel evit dont er gambr. Pokad a reas d'he vam zantel gant teneredigez, lavaret a reas kenavo d'he servicheurien en eur sonjal ez ea

d'ar maro. « Prest on brema, emezhan, d'he vourrevien ; grit dinn ar pezh so gourc'hemennet deoc'h. Pardon a ran d'ho mestr ha deoc'h. » En eur lavaret ar c'homzou-man, e koezas d'an daoulin hag e plegas he benn dindan ar c'hleze. Mes ar zoudardet, eleac'h trouc'ha he benn diganthan, a grogas ennan, a astennas anezhan var eun daol hag a drouc'has dezhan he droad kleis hag he zorn deo. Epad eur verzerenti ken poanius, sant Voelar ne reas klemmaden. Klevet e oue epken he vuzellou o lavaret an hano dous a Jesus. Pebes skuer evidomp oll ! pebes kourach en eur galon ker iaouank ! En hor poaniou, en hon nec'hamant, galvomp ive d'hor sikour an hano dudius a Jesus, a lako dousder en hon daelou, ha mel en hor c'huerder.

Goude eur seurt torfet, ar vourrevien a gassas da Rivod ar memprou distaget eus ar prins iaouank, ha Rivod, eleac'h bea tenereat he galon dirak ar relegou-ze eus

he niz, a c'hourdrouzas he zoudardet. Buez Moelar, he benn eo a vanke dezhan, ha nan eul loden all eus he vemprou.

Pa deuas ar bopl da anaout an torfet nevez, e savas muioc'h a gounnar eget biskoas eneb Rivod. Rivod a zantas e oat prest d'ober dezhan affer fall. Relegou Moelar a grie vengians eneb dezhan e kenver an env.

Mes netra ne goust d'an dud fall evit en em denna er meas a affer. Taol a reont ar beac'h ken dizoursi a tra var gein ar re all. Rivod, evit trei he bopl a du ganthan, a c'halvas anezhan er ger a Gerhaës hag eno dirak an oll e lavaras ne oa evit netra e merzerenti Moelar. « Red eo, emezhan, kastiza stard ar re ho deus gret eun torfet ken spountus. Mes ma n'eus remed ebet mui eneb ar malheur-man, pa ne heller ket rei da Voelar ar memprou en deus kollet, da betra, emezhan, klask ober brezel etrezomp. Moelar ne hell mui ren, mac'haniet evel ma zeo. Ar

guella zo da ober eta, eme Rivod, eo saludi ac'hanon evel roue. N'eus mui nemed-hon eus a c'hoad ar roue Daniel. »

An hardizegez en devoa soken da c'houlen adarre beza hanvet kulator da Voelar. Kalon eur muntre a zo eur punz don a drubarderez. Me, eme Rivod, a ziuallo Moelar guelloc'h eget n'eus fors piou. Diskuez a rin anezhan d'ar bopl pa garo her guelet ; miret a rin na errufe mui drouk ebet ganthan.

Mes kaer en devoa an treitour kozeal brao, an oll a vele e klaske en em c'holo gant eul linser doull. Roet e oue da Voelar, evit kula-tourien, eskop Kemper, hag ar c'hont Kyol-tain, he yontr. Evit doare ar brinsez Aurilla a oa maro d'ar c'houls ma oue bet ar c'hon-saill-man e Keraës. Anez, hi eo a vije bet adarre karget eus he mab. He ankeniou, m'oar vad, ho devoa diverret he buez. Pep tra eta en em droe eneb ar minor paour. Ar groas epken a oa he heritach, mes dougen a

reas anezhi heb falgalousi beteg ar fin, evel hor Zalver Jesus hag ar Zent.

C'HUEC'HVET PENNAD VARNUGENT

Eil burzud

Doue ne zaleas ket da rei da anaout santelez Moelar dre eur burzud nevez. Pa oue pareet ar gouliou great dezhan en he droad kleis hag en he zorn deo, eun den a vicher, guesiek meurbet, a reas evithan eun dorn arc'hant hag eun troad arem. Dre eur mirakl abers Doue, ec'h hellas labourat gantho ken eaz a gant he vemprou naturel. Mania a rea an armou gant he zorn arc'hant, pignat a rea var varc'h gant he droad arem, kouls a pa vijent bet beo-buezek ha gret a gik hag a eskern. Ar pezh a oa c'hoas estonussoc'h eo ma kreske he vemprou prestet assamblez

gant he vemprou naturel. Ar mirakl-man a oue gulet hag anaveet gant an oll. Red e oa kredi ar pez a velet, ha goude tout n'eo ket diessoc'h da Zoue rei ar vuez da vemprou prestet eget rei ar vuez d'eur c'horf maro. Nac'h ar mirakl-man a ve diverra breac'h Doue, bihannaat he c'halloud, ha mont eneb an testeniou ar sklerra.

Sant Voelar a hellas eta, dre ar burzud-man a Zoue, deski kement a zo e dever eur prins, evel pignat var varc'h, mania ar c'hleze, ar goarek, hag ar valtam. Lakaat a rea ive he spered da labourat assamblez gant he gorf.

An Antrou'n Eskop a Gemper a gassas anezhan ganthan da eur gouent eleac'h ma vije alies e-unan o chom, da eur gouent e Quemper, me zonch. Eno sant Voelar a zeskas kement a dle eur prins da c'houzout. He vrassa plijadur a vije o lenn ar skritur zantel, o pedi, hag oc'h ober orezon gant ar

menec'h eus ar gouent. Ne oa ket devotoc'h evithan er gouent. He ene ne anaveze ket an drouk hag a zigore mui ous mui bemdez da reseo grasou Doue evel al lilien en draonien a zigor da reseo gliz ar mintin. Seis vloas e chomas er gouent-se, seis vloas a studi, a beden, a zantelez.

Eun devez ar zant iaouank a dolas eur mean c'huec'h ugent paz diouthan. Ar mean a goezas var eun tachad douar seac'h ha kaled, ha gousgoude ec'h antreas ken doun en douar-ze a ma vije eat er c'hoar bero. Pa oue dilammet ar mean eus an toull gret ganthan, eun eienen grenv a savas ac'hano.

D'an oad a bevarzek vloas, ar c'hont Kyol-tain eo a gemmeras dreist oll ar soursi anezhan. Ar bugel a greske evel eur blanten; dont a rea da vea nerzus, iskuit, hag ijinus. En despet d'he vuez kuzet, ar brud eus ar prins Moelar a greske bemdez etoues ar bopl.

Ar Vretouned, skuiz maro gant gouar-

namant an tirant Rivod, a gonte varnezhan evit rei dezho ar peoc'h, ar frankis, hag ar bonheur ho devoa kavet epad amzer ar roue Milliau. Siouas ! Rivod a ouie ive pegement e oa karet Moelar gant Breizis. Anaout a rea ar mirakl c'hoarveet ganthan hag a roas ar vuez d'he vemprou nevez. Dre-ze ar voarizi a drenke mui ouës mui kalon Rivod. Eur breur en deus dija lazet, eun niz en deüs mac'haniet evit kaout ar gurunen. Mes aon en deus adarre na jomfe ket ato var he benn. Moelar eta, erru da veza den aoualc'h, a renko ive prest rei he vuez.

Rivod a c'halv eun devez ar c'hont Kyoltain da zont da leina d'he balez. Kyoltain, fougennhan, a vale raktal da gaout Rivod. Rivod a reseo anezhan en doare ar braoa, a ra dezhan lein hir ha promessaou kaer. Kyoltain a renke bea den honest, p'eo guir e oue choazet gant ar bopl da gulator da Voelar. Mes karout a rea ive an henoriou hag an

arc'hant ; red e vije. Promettet e oue dezhan kals arc'hant, ar renk kenta goude ar roue, ha kement a zouar a helje da velet divar ar menez Frugy, ma karje rei taol ar maro da Voelar. « M'ar kirit, eme Kyoltain, rei dinn ha d'am bugale kement a zouar hag a hello va daoulagad da velet divar unan eus mensesiou Kerne, e klaskin en em zizober eus Moelar. »

Rivod a lakaas he zorn e dorn ar c'hont Kyoltain ; an affer a oa gret. Kyoltain a zizroas d'ar ger leun a joa da vea prestik pinvidik-mor. Gousgoude arok guerza ar minor fisiet etre he zouarn, e c'houlenнас kuzul digant he bried Barilia.

Houman e devoa pep ræzon vad da zistrei he fried divar an hent fall a gemmere ; rak ervez an histor hi a oa bet magerez da sant Voelar. E garet a rea kals ; mes an arc'hant ive zo ken tentus ! « Red eo, emezhi, pourvei da fortun hor bugale. Petra servich deomp

enebi ous ar roue? Da choas hor beus eta etre ar baourentez hag ar binvidigez, etre ar maro marteze hag an henoriou brassa. N'eus ket a leac'h da argila. »

Ar paour kez plac'h a ankounac'hea e devoa maget ar bugel Moelar evel he bugale e-unan. Ankounac'haat a rea ez eus eur bed all eleac'h ma vo rentet da bep hini ervez he œuvrou, ez eo guelloc'h bea paour eur pen-nad er bed-man ha pinvidik epad an oll eter-nite er bed-all eget prena leve gant priz guerz an ene.

Rei a reas eta ive he assant d'ar muntr. Kyoltaïn a oa bar he galon a joa. Evelato, ken diez eo muntra eur goustians honest, ma ia c'hoas da c'houlén ali ar c'henta barner eus ar rouantelez. Ar barner-ze, din eus an hano a Gaïphas pe a Bilat, a alias anezhan da gass he daol da benn. Neuze ne jomas nec'hamant ebet ken e spered Kyoltaïn. Mont a ra a nevez da gaout Rivod gant he vab

kossa Justin evit reseo an errhez eus he dorfet.

SEISVET PENNAD VARNUGENT

Maro Moelar

Epad m'edo Kyoltaïn ha Justin he vab e palez Rivod, Doue a deneraas kalon Barilia, magerez Moelar. Dont a reas keuz dezhi da vea guerzet eur bugel savet ganthi, eur mab d'ho madoberour.

Lavaret a reas d'ar prins iaouank kement e devoa klevet. « Kemmerit buhan an teac'h, emezhi, arok ma teui d'ar ger va fried ha va mab. Deuit d'am heuill da vaner ho yontr Commor, da Lanneur. »

Moelar, e-unan, a gemmeras da genta hent abbati Landevennec. Kyoltaïn ha Justin a erruas prest var he lerc'h er gouent. Evel ma tigoeschont en noz, ar menec'h a revusas

digeri dezho. En doare-ze Moelar en devoue amzer da gemmeret adarre an teac'h araok. Mont a reas kuit eus ar gouent dreist ar vogeriou, divar bouez eur gorden taolet dezhan en tu all. Epad an noz ec'h hellas ober eun tam mad a hent, ha da c'houloudeis, Kyoltain ha Justin negavchonter gouent nemet ar menec'h. Lavaret a reant evelato, dezho ho unan, e l'lie bea bet Moelar er gouënt hag e oa brema, a dra zur, var hent Lan-meur. Ar virionez a lavarent : Moelar, epad an noz, a valeas beteg Keraës. D'ar c'houlse e oa eun hent braz etre Keraës ha Lan-meur, ha guelet a rer ato tamou mad anezhan. Tremen a rea e kenver eur ger hanvet Guerlavrec, ha treuzi a rea ive an hent so hirio etre Plouigneau ha Bothsorc'hel, en arroud ma tizroer da vont da chapel Sant-Alar. Eno eo ec'h en em gave ar Zant, pa velas daou gavalier o tont d'an daou lam-ruz var he lerc'h. E oa var ar poent da vea

tapet. Ar Zant, goude bea gret he beden da Zoue, a en em astennas d'ar douar var bord an hent. Dre eur burzud nevez a Brovidans Doue, an douar a bladas dindannhan evel eur guele-plûn hag he enebourien a dremen-nas heb guelet anezhan. El leac'h-se ez eus bet eur chapel en henor da sant Voelar. A veac'h ma veler hirio ar plas anezhi, mes guelet avad a rer ato ar foz mirakulus hanvet guele sant Voelar, rak eno e pladas an douar dindannhan e furm he gorf.

Eur vech tremenet ar riskl, Moelar a zavas ac'hano, mes eleac'h kemmeret hent Lan-meur, ez eas a gleiz gant an hent a gass da gastell Koat-Eon, da vaner Commor. Arok liguezout, e teuas an noz varnezhan, hag e renkas goulén lojeis en eur maner hanvet abaoue Guer-Voelar. Anternoz vintin, mintin mad, skuiz maro c'hoas eus he veach en derc'hent, e redas adarre etrezek Koat-Eon, gant aon d'en em gaout re zivezad. En eur

vont er meaz eus Guer-Vøelar en devoa da zevel eur zao a seis pe eis minut bale. Ar zant a hellas, var he gourach, pignat beteg an neac'h, mes erruet eno, he nerz a vankas dezhan hag e koezas heb anaoudegez. El leac'h se ive so bet savet eur chapelik vihan hanvet Koat-Sao-Bell e memor a gement-se. Tud vad ha karantezus divar ar meaz a erruas ganthan hag a roas dezhan eur vølennad leaz d'en em grenvaat. Gant ar sikour-se ec'h hellas kenderc'hel he veach pe guellloc'h c'hoas he Bassion, evel a lavar tud ar c'harter. Ne oa mui nemet eun anter-leo eus Koat-Eon.

He donton, ar c'hont Commor, a resevas dreist he niz Moelar. Lavaret a reas dezhan chom ganthan keit a ma karje. En he di, emezhan, e vije e savete. Mes allas ! pe seurt surentez a zo evit eun den redet gant tud fallakr hag ho deus touet he laza.

Kyoltain ha Justin a glaske anezhan e pep

leac'h. Klevet a rejont prest e oa e maner Koat-Eon hag hi d'ar c'hastell var digarez guelet ho mestr. Lavaret a rejont dre ar barrez e oant ho unan ive o klask tec'het dirak Rivôd. Ne glaskent, emezho, ober drouk ebet da Vøelar, ar c'hontrol eo. Ervez lod all, Kyoltain a deuas da c'houlén pardon digant Moelare maner Commor. En em anza o a reas den fall, koeza a reas d'an daoulin dirak he vestr gant eur mor a zaelou : daelou eur bleiz, ha komzou eun oan. Ker brao e troas he gaoz, kement a reas a ardou fin ma roas da gredi d'ar zant ha da Gommor en devoa keuz braz da vea redet ar zant beteg eno ha guerzet he vuez evit arc'hant. Sant Vøelar, evel an oll zent, ne gavas ket poanias pardouni eur veach a vuioc'h. En em daol a reas etre divrec'h Kyoltain he gulator hag e pokas dezhan gant ar vrassa teneredigez. Kyoltain, eun eil Judas collet dre an avarished, ne zantas ket he galon o toma en he

greiz pa bokas dezhan ar minor santel gant komzou ar pardon. Ken kaled e oa deuet da veza ar galon-ze, ken kaled hag an arc'hant promettet dezhan. Ne oa mui digor nemet da garantez ar binvidigez hag an henoriou. E vean he bried Barilia, en em gavet ive var al leac'h, a goezas d'an daoulin dirazhan evit ober dezhan chench a zonch. « Va bugel eo, evel va re all, emezhi, p'eo guir am eus, maget ha savet anezhan. Da vab eo ive p'eo guir eo lakeat etre da zaouarn gant ar bopl. En hano Doue, na ia ket da skuilla goad eur zant ha da goll da ene. Ar goad-se a grife bepred venjans eneb deomp dirak Doue. »

Netra ne reas. Re zivezad eo brema da rei kuzulioù mad ar plac'h e devoa c'hoezet a ziagent tan an avariseded e kalon he fried, Kyoltain, eleac'h selaou, a c'hourdrouzas Barilia eus fin fall, ma teuje da lavaret grik var he zonch.

Evit ober ar van da ziella ar peoc'h etrezho,

Kyoltain hag he vab Justin a bedas Moelar da goania assamblez gantho. Drebi a rejont ous ar memes taol hag eva eus ar memes gueren e sin a beoc'h. Evelse ive Judas a goanias gant hor Zalver araok he verza hag a evas he gondaonasion eus ar memes kalur ganthan. Goude koan, evit rei c'hoas muioc'h a nerz d'ar mignoniach nevez savet etrezho, sant Voelar a gouskas er memes kambr gantho. Kement-man, eme parrissionis Lanmeur, a erruas en eun hostaleuri e kear Lanmeur. Kyoltain a fellas dezhan pellaat Moelar eus he gerent hag eus he servicheurien evit dont a benn didrousoc'h eus he daol fall. Ar zant a gouskas evel eun oan, e kenver an daou digr-se. Hor Zalver ive a varvas etre daou laer, evel ar re-man. Moelar a reas he beden-nou diouz an noz gant ar feiz hag ar garantez kustum, hag ez eas da gemmeret he repos evit dihuna er baradoz.

An daou vuntrere a c'hede, en eur ober ar

van da repos ho unan, ma vije kousket mad ar prins iaouank. Pa veljont he zaoulagad serret, he benn astennet ken peoc'hus var an oriller, he zaouarn kroasiet var he beul-trin hag eur c'housk deuet dezhan henvel ous kousk eun eal, e lamchont varnezhan evel daou gi arrajet hag e lac'hjont ar zant ken didruez a ma lazer eun aneval. Evelse e varvas, d'an oad a bemzek vloas, ar prins iaouank ha santel, esperans ar vro ha skuer he genvrois, er bloas seis kant nontek ha pevar ugent (799).

EISVET PENNAD VARNUGENT

Fin fall Kyoltain, Justin ha Rivod

Goude bea dibennet ho mestr hag ho roue, ar prins santel Moelar, Kyoltain ha Justin a lakaas he benn en eur zac'h ler gant ar sonch da gass anezhan da Rivod. Mes Doue ne zaleas ket da gastiza muntreurienn ken digaloun. Servicheurienn Moelar o velet ne zistroe ket ho mestr, a ieas da skei var dor ar gambr. Pebes spont pa velchont dirazho korf ar zant dibennet ha beuzet en he c'hoad !!

Kyoltain ha Justin a oa lammet dre ar prenest er meaz evit tec'het gant penn ar merzer. Justin, oc'h ober he lam, a dorras krenn he c'houzouk hag eus ar mintin e oue kavet he gorf maro er pors. Reseo a reas var ar plas ar beamant eus he dorfet. Kyol-

taïn, heb chom da c'hedal petra oa deuet he vab da veza, a boursuas he hent etrezek Quemper. Erruet e Kerlean e kenver Maël-Keraéz, bro dizec'h ha menek, d'ar c'houlse da vihana, e krogas ennhan ar zec'hed. Neuze e savas keuz ganthan. Oh ! emezhan, pegen malheurus on-me ! Daoust a mervel a rankin aman gant ar skuisder ha gant ar zec'hed ? Meur a veach e lavaras ar c'homzouze, en he anken. Pebes souez evithan pa glevas penn sant Voelar a oa en he zorn o koms outhan evelhen : « Kemmer da vaz, emezhan, fourr anezhi en douar, hag e savo raktal eun eienen da derri da zec'hed. » Kyol-taïn a zentas ; he vaz a gemmeras buez raktal, a en em c'holoas a vrancou hag a zeilou, hag eus troad ar vaz-se deuet da veza planten, e savas eur soursen a redas ato goudeze. Kement-man zo merket e buez sant Voelar skrivet e Bro-Zaos hag ive en eur breviel koz gret e Frans.

Kyol-taïn a evas, heb kaout eur guir gla-c'har, eus an dour mirakulus-se, hag henveloc'hous eun diaoul eget ous eun den, kennerzet dre c'halloud ar penn-maroc zouge, e valeas adarre etrezek Quemper da gaout Rivod. Rivod a resevas anezhan evel he vignon guella. Rentet e p'eus dinn, emezhan, ar vrassa plijadur. Brema me zalc'ho ive d'am promessaou. Kea eta var lein ar menez a gari ha me roio did an oll douar a helli da velet ac'hano. Mall ganthan da reseo ar priz eus he dorfet, Kyol-taïn a bignas var menez Frugy a zo azioc'h Quemper. Erruet var gein ar menez, e savas he zaoulagad da vuzura bro. Kerkent e collas ar guelet hag e oue skoet a varo trum. Eil taol abers Doue.

Pa glevas ar c'helou eus maroc spontus he gonsort, Rivod a gemmeras kement a aon ma koezas klanv, ha tri dervez goude, eme ar scridou, e collas buez ar c'horf assamblez

marteze, siouas, gant buez he ene. Trede taol a justis Doue.

Goude maro Rivod, e savas kroz e Breiz etre an dud galloudeka. Oll ho devoa c'hoant da veza mistri. Cetu ar pez e erru peurvuia pa ne fell ket da eur bopl soubla d'ar guir-vestr. Pa zilezer lezennou Doue hag al lealdet, e renker en em daol en dizurs. Mestrebet, an oll zo mistri ha pa ve an oll mistri, n'eus mui a sujidi, n'eus mui a lezennou, n'eus mui nemet lazerez ha laeronsiou. Ar bopl a Vreiz a baeas dre ar vizer, epad eur pennad mad a amzer, ar muntr eus daou roue ervez kalon Doue. Goad Milliau ha goad Møelar a goezas varnezho evel hini hor Zalver var ar Juevien. Gousgoude ar bopl ne oa ket kaos eus muntr ho roueet, mes ar bopl alies a renk paea evit torfejou an dud galloudek evel ar vugale evit torfejou ho c'herent.

O velet ar brinset a Vreiz oc'h en em

zrailla, Charlemagn a deuas da gemmeret eur vro eaz da c'hounid hag evit ar vech kenta Breiz-Izel a bez a renkas saludi ha paea roue braz ar Fransisien (799).

NAVET VARNUGENT PENNAD

Enterramant sant Vøelar

Pa glevas ar c'hont Commor hag he bried ar c'helou mantrus eus muntr Møelar, e ouent sesiet a spont hag a anken. Keuz ho devoa, mes re zivezad, da vea lakeat ho fisians e Kyoltaïn hag en he vab. « Oh ! va Doue, emezho, ho polontez a oa eta en divije ar mab ar memes maro gant he dad. »

Goude bea skuillet kals a zaelou var maro ho niz, ho zonch kenta a oue rei dezhan eul leac'h deread da repos. Dont a rejont prim da gear Lanmeur da lakaat sevel ha sebelia

ar c'horf maro. Tolet e oue a bep seurt c'huez vad en dro dezhan ha digasset da vaner Koat-Eon. N'ho devoa mui a c'hoant da vea pell eus relegou ho niz. An oll dud divardro, paour ha pinvidik, a en em gavas evit deis an enterramant. Eus Leon, Treger ha Kerne, oll mignonet ar roue Milliau a zirede. An darnvuia a lavare kass ar c'horf d'ar Yeaudet e kenver bez sant Villiau. Mes Doue en devoa eur sonch all. Da genta e oue diskennet e douar chapel Koat-Eon ; antronoz e oue kavet ar c'horf var gourre ar bez ha gousgoude ne velet ket e vije bet den ous henna ac'hano. Ar zant, emezho neuze, a fell dezhan bea enterret en iliz parrez. Ar memes mirakl a c'hoarvezas. Ar c'horf adarre a zavas eus ar bez var an douar evit diskuez ne felle ket da Zoue e chomje eno. Cetu ar bopl ken nec'het a biskoas. D'an trede guech e oue kasset da ilis Guimaëc, hag ar memes tra a en em gave ato. Ne ouiet mui na petra

da zonjal na petra da ober. Erfin unan benak a lavaras lakaat ar c'horf maro var eur c'har staget outhan daou daro gouez. Kement-man zo merket e buez sant Voelar, skrivet en abati Meaux var dro an navet kantved. Ervez an Tad Albert e oue staget ous ar c'har. goloet a voulds du, c'huec'h marc'h guenn. Ar pezh so sur eo e oue lakeat ar c'horf var eur c'har ha lezet ar c'har-ze goudeze da vont en avantur Doue. Kement all a zo bet gret c'hoas evit ouspen eur zant.

Eskop Dol a ioa e penn ar c'haon. Heuilla a rea a bell ar c'har en eur gana psalmou ar roue David. Var he lerc'h e teue an dud a renk huel hag ar bopl, mesk ha mesk. An daou daro gouez (ne oant ket bet stag biskoas) a deuas raktal da veza don hag a dreine ar c'har gant dousder hag evel gant respet. Mont a rejont eus maner Koat-Eon eleac'h ma oa dizroet ar c'horf, var eon-tenn etrezek Lanmeur. Erruet e kear, e chomont a za var

ar blasen vraz. Ar bopl ne gave ket deread al leac'h-se d'ober bez da relegou eur zant. Klas a rejont kass ar c'har var araok en eur ioual hag en eur skei var an daou aneval. Ho unan soken ec'h en em lakejont da heurta var ar rojou gant ho daouarn, ho divrec'h, hag ho diouskoas. Mes netra re ra d'ar c'har chench plas. Lavaret ho pije e vije bet plantet eno en douar. Ijin ha nerz, pep tra a oue vean evit lakaat al loened da vont larkoc'h. Neuze ar bopl, o velet dorn Doue en dra-man, a lavaras a eur vouez : « C'hui eo, Autrou, an Doue oll c'halloudek. C'hui epken a hell ober miraklou, c'hui eo eta a zalc'h aman relegou sant Voelar. N'hor beus ken tra da ober nemet heuilla ho polontez. »

Diskennet e oue eta korf ar zant eus ar c'har, lakeat e oue en douar, e kreis plas en Lanmeur ha savet eur bez kaer var he c'hourre. Divezatoc'h, var ar blasen-ze, evit

henori relegou ar zant hag al leac'h choazet ganthan, e oue savet eun ilis nevez. An ilis so hirio e Lanmeur a zo ive er memes plas hag eul loden anezhi, m'oar vad, a zo eus amzer sant Voelar.

Bez sant Voelar a oue brudet a bell prest goude he varo dre ar miraklou niverus a en em gave eno. Ar re dall a deue da velet, ar re vouzar da glevet, ar re gamm da gerzet, an oll dud klanv da gaout ar iec'hed. Pele-rinet a deue a vandennou hir eus Breiz oll hag eus Bro-C'hall da gaout bez ar zant. Roue ar Frans e-unan a roas arc'hant evit sevel eur chapel en honor da sant Voelar da c'hedal kaout eun ilis.

TREGONTVET PENNAD

Procezh ar relegou

Kement karter a oa e Breiz ho devoa c'hoant da gaout lod eus relegou sant Vølar. Eskop Quemper, goude maro Rivod, a hellas kaout penn ar zant. Lakaat a reas anezhan e tenzor ar gathedral hag eno e chomas eur pennad amzer. En amzer genta eus an Ilis e oa difenn da lodenna relegou eur zant etremur a barrez. Cetu perak Kernevis, Tregeris ha Leonis, evit ar memes ræzon, ho devoa c'hoant da gaout oll relegou ar zant. Kernevis a zalc'he penn ar zant, Tregeris a vire he gorf santel hag oll ho devoa mall da gaout an eil hag egile. Red e ~~ad~~ adarre goulén kuzul digant Doue evit lakaat fin d'ar c'hlemmou a bep tu. An oll Eskiptien

a Vreiz, ar menec'h, an noblans, ar veleien kals anezho, hag an dud kossa etouez ar bopl a en em gavas assamblez evit gouzout petra da ober, ha cetu aman ar pezh a oue kavet ar guella. « Greomp, emezho, tri devez iun ; goudeze Kernevis ha Tregeris, var ho zreid noas, a zigasso penn ar zant hag he gorf santel var lein menez Arrhe a zo o tispartia Kerne eus Treger ha Leon. Lakest e vo ar penn hag ar c'horf eun tamik pell an eil eus egile, pedi a reimp a greis kalon evit ma teuo ar relegou d'en em unani. Ma ia ar penn da gaout ar c'horf, an oll relegou a vo da Dregeris, ma ia ar c'horf da gaout ar penn, e vezint oll da Gernevis. » Gret e oue er gis ma oa lavaret. An daou bopl, Kernevis eus eun tu, Leonis ha Tregeris eus an tu all, a goezas d'an daoulin en eur bedi a vouez penn. Oll e leverchont ar *Bater* assamblez, gant eur feiz ha gant eur fisians e Doue ne gaver mui kals en hon touez. Doue a selaouas

pedennou ken kalonek ha ken birvidik a feiz. Dirak daoulagad an oll, pa ne oa den ebet tost d'ar relegou, penn ar zant a zavas en ear hag a ieas da gaout he gorf, a ioa lakeat eur pennad diouthan. Raktal e oue klevet kriadennoù a joa hag a driomph eus kostez Leonis ha Tregeris. Oll relegou ar zant a ioa dezho, ha digass a rejont gantho e triomph ar penn hag ar c'horf da Lanmeur en eur gana meuleudiou Doue, ha beuzet e daelou a joa dirak eur seurt mirakl. Kristennien Kerne dilamet digantho ho zenzor, dre varnedigez Doue, a zistroas d'ar ger gant an dristidigez ar vrassa. Eun dra gousgoude a ziboanie ho c'halon; relegou ar zant a jome e Lanmeur ha mont di ne oa ket pell d'ho bolontez vad ha d'ho feiz. Ma c'houlenner perak e choazas penn sant Vœlar dont da jom en tu-man da venez Arrhe, ec'h c'heller respont kement-man : E Kerne e oue bet lazeta ar roue Milliau, eus Kerne e

renkas tec'het kuit ar prins Mœlar hag e oue guelloc'h ganthan rei ar repos d'he relegou er vro e devoa roet goudor ha lojeis dezhan arok he varo.

Ar mirakl-man eus penn sant Vœlar unanet gant he gorf a erruas e mis mae. Evit derc'hel sonch anezhan, e oue savet eur chapel el leac'h ma oue c'hoarveet. Kernevis, Leonis ha Tregeris a en em sikouras da zevel anezhi, hag en doare-ze Kernevis a ziskuezas e talc'hent ar memes respet hag ar memes karantez, evel diagent, evit sant Mœlar. Bep bloas, d'ar bevarzek a vis mae, eun niver braz a belerinet a-deñe di gant offransou kaer evit goulenn sikour digant sant Vœlar. Ar c'hustum vad-se a badas eun nebeut bloavesiou; mes dont a reas eun amzer ma vije dalc'het an offransou gant an dud ho devoa roet douar da zevel ar chapel. Neuze ar bardoneurien a gommansas chom er gear, hag ar chapel, dilezet gant an dud

difeiz ha digoustians a lavare beza mestr dezhi, ne zaleas ket nemeur da goeza en he foull. An testou eus ar mirakl c'hoarveet e menez Arrhe, evit kenderc'hel eun testeni benak anezhan, en despet da volonteiz fall mistri ar chapel, a blantas daou bilier braz en douar en daou leac'h ma oue lakeat penn ha korf sant Vølar, evit barnedigez Doue. Ne veler mui pilierou sant Mølar savet e menez Arrhe ha n'ouzor ket d'ar zur e peleac'h e ouent savet. Douget on da gredi e ouent savet var douar Loc-Mølar.

Da vihana, abalamour d'ar mirakl-man, e meur a ilis dediet da sant Vølar e rear ar pardon e mis mae.

Lod all a ra ar pardon e miz du, e memor eus merzenti sant Vølar, c'hoarveet d'an eil a viz du, e fin ar c'hantvet eisvet.

En navet kantvet, e oue kasset eul loden eus relegou sant Vølar da abbati Redon hag eul loden all da abbati Lehon. Sant Con-

voyon, kenta abbat eus abbati Redon savet ganthan, a resevas anezho eus dorn Nomenoe (852).

En dekvet kantvet, pa deuas an Normantet er vro da zistruja pep tra, Salvator, eskop Aleth (hirio Sant-Malo) a gassas anezho da Baris assamblez gant relegou sant Samson, sant Malo ha sant Magloar. Hug-Capet, mestr er Frans d'ar c'houls-se, a lakaas ar relegeier-ze e chapel ar roue hag e kenver e savas eur gouent relijiuzet eus a urs sant Beneat. Eus Paris, eul loden eus relegou sant Vølar a deuas da Orleans, eul loden all d'ar gear a Veaux, en abbati an Itron-Varia. Ar brez da gaout lod eus relegou sant Vølar a ziskuez deomp an istim a reat e pep leac'h eus he santelez. En abbati an Itron-Varia de Chaage, e Meaux, e reat daou c'houel ar bloas en he honor : d'ar bevarzek a vae ha d'ar c'henta a viz ere. Ar gouel divezaman en devoa eun eisvet, da lavaret eo a bade eisde.

Missioneurien a Vro-Zaos a deuas e Frans netra ken nemet evit kaout eus a relegou hor zant. Ne oa c'hoant ebet da rei dezho e Lan-meur, hag evit miret na zistrojent e goull d'ar gear e kemmerchont e kuz eul lodennik anezho. Kass a rejont al loden-ze da gouent Ambresbury e Bro-Zaos eleac'h m'ho devoa eur mission da ober. Gouda ar mission, e klaskjont dilam divar an auter relegou sant Voelar, mes ar zant a fallas dezhan chom eno. Ne hellent ket distaga ar relegou eus an auter. Evelse e oue kastizet ar vissioneurien-man evit ho laeronsi devot. Seurezset kouent Ambresbury a oue laouen braz o velet ar zant o chom gantho. Lakaat a rejont laonennou aour hag arc'hant en dro d'ar c'hassedik a vire he relegou. Kement-se a binvidigez a dentas tud fallakr eus ar vro. Dont a reas en noz eur vanden tud dissakret hag avarisius da laerez ar c'hassed. Goude bea distaget an aour hag an arc'hant a oa

en dro dezhan, e toljont ar c'hassed en eun toull mengleuz etoues an drez. Antronoz vintin, eur beleg o vont da lavaret he offern, a velas eur sclerijen skedus var gourre al leac'h-se. Souezet oll, e tiskennas en toull, e kavas eno ar relegou hag ho digassas gant respet d'an ilis.

Eur pennad mad a amzer goudeze, eur sakrist eus an ilis-se, hanvet Godrik, a velas en eun huvre ar malheuriou prest da goeza var an ilis. Sant Voelar a gomzas outhan epad he gousk hag a lavaras dezhan : « Godrik, sao buhan ; toen an ilis so prest da goeza. Ar sakrist o kredi ne oa ket an huvre abeurs Doue, ne reas van ebet. An nosvez goude, memes huvre, memes komzou. Ne gredas ket muioc'h. En trede nosvez e renkas kredi. Sao buhan, eme skeuden ar zant ; kemmer ganez ar relegeier hag an ornamanchou ; an ilis so o vont da goeza. Godrik a savas prim, mes a veac'h e oa er meas ma koezas toen ha mogeriou an ilis.

Gant an amzer, ar brud eus santelez Mœlar a en em astenne bemdez mui ous mui dre ar bed. D'ar bevarzekvet kantvet e oa hano anezhan dre ar Frans oll, er Belgiq, e Bro-Zaos hag en Itali. Lanneur e deus bet ar bonheur da gaout epad pell amzer al loden vrasa eus korf ar zant. Er bloas c'huezek kant seis ha triugent (1667), Guyon ar Born, gouarner pe velli eus kear Lanneur, a scribe e oa c'hoas eno eul loden eus relegou sant Voelar. Ar memes relegou a veler ato e Lanneur, en eur vreaç'h arc'hant.

Breizis epken ho deus savet nao ilis pe chapel en enor sant Voelar. Cetu hi aman : Lanneur, Meilârs e kenver ar Pont, Loc-Mœlar-Sizun, Loc-Mœlar-Guiniventer e Breiz-Izel; Tre-Mœlar, Sant-Voelar an Dour, Sant-Voelar ar C'hoajou, Sant-Voelar Hede, Fegreac, ha Melrand e Breiz-Huel.

Bezomp eta joiaus, Breizis va c'henvreudeur, da gaout eus hor lignez, eus lignez

hon tadou hag hor roueet koz daou zant ken anaveet, ken henoret a bell ha ken galloudek e kenver kalon Doue. Bezomp da nebeuta ken karantezus e kenver sent hor Bro a maez ar C'hallaouet hag an diavezidi all. Pedomp sant Villiau ha sant Voelar en hon oll izomou. Eus bar an envou ho daoulagad a zo ato o para var douar Breiz.

Cetu aman eur beden hag a helfet da ober dezho ho daou : « Sant Villiau ha sant Voelar, choazet evit patrouned gant kement a barresiou e Breiz, servicheurien karantezus da Zoue adalek an oad an tenera, mirit ha kreskit ennhomp ar spered a feiz a ia siouas var ziskar en hon touez. Mirit karantez Doue hag eur galon divlam etoues ar iaouankis. Diouallit ac'hanomp eus an avariseded, eus ar voarizi, hag eus an oll ioulou fall. Pellait diouzomp al laeron, hag ar vuntreurienn. Lakit doujans Doue e kalonou an oll, distagit anezho eus madou an douar evit ma

c'hellimp evel doc'h tanva ha saouri epad an oll eternite madou an envou goude bea bizet dezho epad hor buez. »

UNAN HA TREGONT PENNAD

Lanmeur

Kement a vrud a zo bet hag a zo ato eus Lanmeur ma renkan merka aman eul loden eus an traou burzudus c'hoarveet eno. Komzomp da genta eus ar chapel a zo en douar dindan an ilis. Ar chapel-se, eme kals tud guesiek, a helfe bea bet savet en amzer an Drouizet, fals-beleien, er pebare pe er pempet kantvet. An Autrou Fremenville a gav dezhan eo guir kement-se. Pa deuas, emezho, ar guir relijion er vro, ar feunteun zo er chapel a servichas d'ober badiantchou. Sant Samson, eil eus an hano, a oue eus ar re

genta o prezeg an Aviel e Lanmeur. Arok bea hanvet eskop e Dol, e savas e Lanmeur eun abbati var dro ar bloas c'huec'h kant tregont (630). An abbati-se a oue distrujet gant an Normantet er bloas 878. Pa oue hanvet sant Samson eskop e Dol, e stagas ous an eskopti-ze Lanmeur hag he c'houentchou. Lanmeur a jomas stag ous eskopti Dol beteg ar Revolution vraz, goude beza e kreis eskopti Treger. Kement eskopti zo bet e Breiz a roas, gant an amzer, eur barrez benak da greski hini Dol. Eskopti Dol en devoa pevarzek ha pevar ugent parrez, diou hag anter-kant en dro d'ar gear Dol, ha diou ha daou ugent aman hag ahont en eskoptiou all. Eskopti Sant-Malo a roas nontek parrez da greski hini Dol, Sant-Briek daouzek, Treger seis, Roazon diou, Kerne unan, ha Leon unan (Locquenolé).

Lod a lavar ez eus bet eskiptien e Lanmeur. Arok ar Revolution an dud koz eus

Lanmeur a ziskueze e kenver an hospital pell, emezho, ar besiou eus an eskiptien bet e Lanmeur. Mes red eo en em entent. Lanmeur n'eo ket bet biskoas eun eskopti. Eskiptien Dol, m'oar vad, a deue da jom lod anezho da Lanmeur pe da vihana da dremen eun nebeut amzer bep bloas. Lod anezho, dre garantez evit Lanmeur, a zo bet falvezet gantho kaout ho bez e kenver sant Voelar. Eskiptien Dol ho devoa, a dra zur, eun ti e Lanmeur abalamour ma oa pell-pell ar gearze eus Dol. Divezatoc'h e oue lakeat e Lanmeur eur vikel-vraz evit ober afferiou ar parrosiou tosta stag ous Dol. Er bloas 1627, an Autrou Yvon Arrel, vikel-vraz eus Dol, a c'houarne ilis Lanmeur. An autrou-ze en deus skrivet ive buez sant Voelar hag eun c'holl braz eo evidomp ne ve mui kavet al leor-ze.

Mes dizroomp da chapel Sant-Voelar ha d'he ilis. Er chapel zo dindan an douar ez

eus eur feunteun. An Autrou Freminville a gred e rede ar feunteun-ze en amzer an Drouizet. An Autrou Kerdanet en deus eur zonch all. Ar feunteun-ze, emezhan, a zo bet gret evit badezi, rak guechal eleac'h skuilla dour teir guech var benn ar bugel, e vije soubet teir guech en dour. A blasou, e vije teir feunteun da zouba ar vugale evit ar vadi-siant, evel e Plouzeniel en ilis koz hag e Sant-Salver Brest, e chapel an Drindet. Eun oalet a vije ive e kenver evit toma ar vugaligou pa deuent er meaz an dour. An Autrou Kerdanet a gred c'hoas ez oa dediet ilis parrez Lanmeur d'an Drindet santel arok ma oue lakeat dindan hano sant Moelar. An testi eus a gement-se, emezhan, eo ma veler c'hoas chapel Kernitroun dediet d'an Drindet. Bep bloas, parrissionis Lanmeur, da genver gouel an Drindet, a ia di e procession evit an offern bred. Ar re goz a lavar ez ear di en deis-se evit pellaat eus an dour-beuz ;

rak kear Lanmeur, emezho, a dle beza beuzet da genver sul an Drindet. Guelloc'h e kavan kredi e ia di ar bopl da zul an Drindet e memor eus an Drindet santel, guechal patron ar barrez.

N'eus fors pe oad e deus chapel Sant-Voelar dindan ilis Lanmeur, cetu aman da vihana ar pez a gaver ennhi. Diskenn a renker var dro pemzek pazen, hag erruet en traon, cetu c'hui dindan bolsiou izel harpet var pilierou teo great a eur mean epken pep hini anezho. E neac'h d'ar chapel ez eus eun aoterik vihan ha varnezhi eur skeuden eus sant Moelar. Ar feunteun goz a gomzen anezhi bremaik a zo e kenver ar skalieroù. Guelet a rear var ar mean bennherez a ra an dro dezhi lizerennou koz-koz anter-zrebet gant an amzer. Curius aoualc'h e oan da c'houzout ar pez a verkent, mes eun anterdevez ne oa ket aoualc'h evit dont abenn d'ho dirouestla. Chans vad d'an hini a glasko dibuna ar guden-ze var va lerc'h.

En ilis parrez, e kostez an Aviel, e velis var eur prenest eur poltred var guer eus sant Voelar. En he zorn deo sant Voelar a zalc'h an dorn kleis trouc'het diouthan ; en he zorn kleis e man leor an Aviel. Var an aoter vraz ar pez so a brisiusa eo eul loden eus relegou sant Voelar. Eur baniel eus ar re gaera a zalc'h ive ar zonch er barrez eus ar zant patron. Var eun tu eus ar baniel ruzse e veler poltred sant Voelar ha var an tu all ar sakramant gant ar c'homzou-man : « Sant Voelar, patron benniget, pedit evidomp. » An ilis savet, a lavarar, en unekvet kantved, a zo hirio beac'hiet oll dindan pouez ar bloavesiou. Eun ilis nevez ne raffe ket a zizhenor da sant Voelar. Gousgoude kals a dud ne gavont ket dizoare an hini zo hirio, abalamour, m'oar vad, ma zeo ato ar gosni din a respet.

Kaeroc'h eo, d'am zonch, chapel Kernitroun, chapel e kroas savet en daouzekvet

kantved. En he c'henvere oa guechal menec'h o chom. Eun tamik pelloc'h, er memes tu da Lanneur, e veler hirio c'hoas an dourfojou eus maner ar Veuzit, maner Sant-Mœlar. N'eus mui netra anezhan nemet ar fosiou don-ze hag ho c'haout a rear e kenver tiegez ar Ruvark, eur c'hart-heur mad a vale eus Lanneur. Var an hent a dremen dre eun dourvez, e tiskuezer var eur mean ar roudou eus treid sant Mœlar, eme ar re goz.

Lanneur, araok ar Revolution, a oa gouarnet gant ar roue Frans. Ar justis a vije rentet e Montroulez en he hano. Etre Lanneur ha Locquirek, parrez stag ous Lanneur d'ar c'houlse, e savet daou vil den en oad d'ober ho fask. Ar maneriou a za hag en ho brud d'ar mare-ze e Lanneur a oa hanvet Coat-Coelter, Plougasnou, Penlan-Begars, Sant-Geord ha maner Koat-Eon.

An daou zen ho deus lezet ar muia brud anezho e Lanneur eo an Autrou Yvon Arrel,

vikel-Vraz a eskopti Dol, bet person e Lanneur, ha Guyon ar Born, gouarnour eus kear, den guesiek meurbet en deus skrivet eul leor prisius evit noblansou Breiz-Izel.

EILVED PENNAD HA TREGONT

Loc-Mœlar Sizun

Loc-Mœlar Sizun e deus bet meur a ræzon da gemmeret sant Mœlar evit patron. Da genta, sant Mœlar, d'am zonch, en deus bet douarou aleis er barrez-se.

Eun tiegez a zo ennhi hanvet Leztremcelar, da lavaret eo tiegez e kenver maner Mœlar. D'an eil, netra ne vir ouzomp da gredi (ar c'hontrol eo) ne ve bet c'hoarveet var douar Loc-Mœlar, mirakl penn ha korf sant Vœlar en em staget an eil ous egile. Loc-Mœlar a

zo tost aoualc'h da venez Arrhe. Ouspen-ze, ker splamm eo scultret buez sant Voelar en ilis parrez, ma c'heller sonjal gant guirionez ho deus bet parrisionis Loc-Moelar leac'h da gaout anaoudegez vad d'ho zant patron.

Mont a ran da verka aman ar pezh am eus gueleit en ilis-se evit ma c'hello Loumoëlaris kompren guelloc'h al labouriou kaer great enni. Var an aoter vraz e veler merzerenti sant Villiau. Rivod, doaret da vea glac'haret, a zell outhan hag a zalc'h penn he vreur en he zorn. Justin ha Kyoltañ a goez d'an douar goude bea lazet sant Moelar; Justin a dor he c'houzoug en eur lammet er pors.

E kostez an abostol, Moelar, liammet he zaouarn, a zo astennet var eun daol. Tud didruez a droc'h dezhan he vrac'h deo hag he droad kleis. Eno ive ar brinsez Aurilla, beuzet en he daelou, a vel disvembra dirazhi he bugel santel, he mab unik.

E kostez an Aviel, eun eal a zigass eus an

envou eur vrac'h hag eun troad nevez da zant Moelar. Er memes kostez, var eun dolennik vihan, e kinniger poezon da eva d'ar zant. Ar veren a dor pa ra varnezhi sin ar groas hag ar malheurus a glaske ampoezoni he vestr, a goez d'an douar spourounet oll. En tu deo, var eun dolennik all, e veler Rivod o rei pe o kinnig da Kyoltañ ar priz eus maro Moelar. E neac'h an ilis, skeuden vraz ar zant patron; eur fleuren, sin eus he santelez hag he burete, a lugern en he zorn; en dorn all e ma he vrac'h distaget diouthan. Guisket eo e ruz evel eur merzer ha var he benn e man kurunen ar roue.

Eun dra gaer da velet c'hoas en ilis Loc-Moelar eo a dra zur an or-tal great er bloavezh pemzek kant seitek ha triugent (1577). Scultret ha scultret koant-ta eo varnezhi, an darnvuia eus Passion hor Zalver, e tolennou bihan-distag an eil eus eben. En neac'h, d'an tu kleis, e ma hor Zalver barnet gant Ponce-

Pilat, izelloc'h Judas a ro dezhan pok an treitour, ha d'an traon eun eal a deu da gernerzi hor Zalver er Jardin Olivet. Er renkad kreis, e ma da genta maro ho Zalver var ar groaz, Jesus o tougen he groas, ha Pilat o voale'hi he zaouarn. Er renkad a zeo, communion Judas, resurrection Lazar, ha procession ar bopl a Jerusalem da genver ar zul Bleuniou.

Ilis Loc-Mølar a zo bet kempennet ha kempennet a zoare eur pennad so. Guell a ze deoc'h Loumølaris, rak ne goller mörse netra oc'h henori ar zent. Bezit sur a gementse : Sant Vølar ho paeo hag a roi deoc'h kant evit unan.



KANTIK NEVEZ SANT MILLIAU

VAR TON : *Sant Casimir*

D i s k a n

Meulomp hirio a vir galon (pe deis hor pardon)

Ar roue zo hor patron ;
Kurunet ez eo bet ive
Sant ha merzer gant Doue.

Pebes henor, va c'henvrois,
Deoc'h da gaout en ho parrez
Eur patron ginnidik a Vreiz,
Eur patron a huel lignez.

En he iaouankis e teskas
Karet stard he genvrois,
Ha karet ker kalonek c'hoas
He vam santel an Ilis.

Sant Villiau, epad he vuez,
So bet tad he sujidi,
Difennour guir an intanvez
Ha skuer vad oll dud he di.

Bepred harp evit an Ilis
E tifenne he vam ger,
Ha pa stourme an dud difeiz
He gleze a oa pounner.

Savet en deus gant hon tadou
Meur a ilis var douar Breiz ;
Deomp-ni brema, var ho roudou,
Da gendec'hel en ho feiz.

Goude maro he servicher,
Doue, evit hen digoll,
A vrudas hano hor merzer
E Bro-C'hall hag e Breiz oll.

E Landreger, e Ploumilliau,
Kerkouls hag en ho parrez,
Ne beder morse sant Villiau
Heb reseo grasou nevez.

Eus he c'halloud, en ho parrez
E kavit eun testeni ;
Pegen braz n'oa ket santelez
Eur zant so ken kaer he di.

Ilis Milliau zo rouanez
Etoues he oll c'hoarezet ;
En he c'hosni, hi zo nevez
Dre he c'hoantiri bepred.

Eus a bep renk, eus a bep bro,
Stank e teuer da velet
An Ilis savet da Villiau
Gant feiz koz ar Vretouned.

Oh ! c'hui roue hon tadou koz
Beillit var ho bugale ;
D'hon eneou roit ho pennoz
Ha d'hor c'horfou ar pare.

C'hui a bare ar gouliau
A ra deomp fulor ar goad ;
Pareit ive an oll vlessou
A ra 'r pec'het da bep oad.

Divar an auter en ilis,
En ho torn goalen ar roue,
Renit bepred ho Kenvrois ;
Grit deomp bale varzu Doue.

Lakit bepred ar vugale
Da garet ho Doue Salver ;
Ha da viret pur ho ene
Eus ar pec'het ne hanver.

Roit ar furnez d'ar iaouankis ;
Tenzor eo en tu all d'an aour ;
D'an dud en oad pep honestis,
Pasianted d'ar re baour.

En amzer fall a dremener
Etoues kals enebourien,
Ma teu hon heur da vea merzer
C'hui ziredo d'hor souten.



KANTIK NEVEZ SANT MËLAR

TENNET EUS AN HYMM A GANET GUECHAL E MEAUX
EN HE HENOR

VAR TON : *An Tolennou*

Diskan

Autrou Doue madelezus
A gurun oll dre zorn Jesus,
C'hui a gurun ar verzeurien
Dre ar skedussa kurunen.

Dreindet santel, oh ! ni ho ped,
Grit, evel guechal d'ar prophed,
Grit d'hor c'halon en em doma
Ha d'hor c'homzou en em dana.

Ni garfe meuli sant Mëlar
A zo brema savet e gloar,
A zo brema dreist ar stered
O rën e palez an Dreindet.

Ganet e palez ar roueet
Gant an hent stris en deus baleet ;
Henor, arc'hant, na plijadur
Ne oue treac'h d'eur galon ken pur.

He galon ken pur a lili
D'an env, iaouank, a rea avi ;
Evel eur goulm e oa dinoas,
Furroc'h bugel ne oue biskoas.

An noblans eus eun ene glan
Eo kaera noblans a velan ;
Fleuren lugernuz ar furnez
C'hui dâl mui eget aour, perlez.

Daoulagad, spered ha skiant
A jom mantret eus ar prezant
A resevas eus an envou
Pa gollas lod eus he vemprou.

Sklerder an env 'deuas da bara
En dro da gorf ar merzer-ma
Epad ma save he ene
Skedus en he eternite.

Var he beden, penn ar merzer
A dorras sec'het he vuntrer :
Torrit ive er c'halonou
Sec'het direol an oll visou.

Eur plac'h outhan 'n em erbedet
A viras divlam he guerc'hdet,
Hag an den fall a oue skoet
Raktal gant eun taol diremed.

Eun devez, en eur daol eur men,
A reas sevel eun eienen :
Evit hor Bro, eus an envou,
Bezit eur soursen a c'hrasou.

Karet am bije; Autrounez sant Milliau ha sant Moelar, ober deoc'h, en daou gantik nevez-man, bep a voked kaer eleac'h ma vije mesket ar fleur dudius eus ho vertusiou. Mes allas ! evel al labous ne hell ket sevel huelloc'h eget nerz he ziouaskel, an den ive ne hell ket ober netra en tu all d'he c'halloud. C'hui zigemmero gant madelez an daou testeni-man eus va bolontez vad, n'eus fors pegen dister int. C'hui zalc'ho kont, fisians am eus, d'ho servicher dic'halloud eus ar volontez en deus bet da rei muioc'h a anaoudegez ac'hanoc'h, ha d'ho lakaat dre-ze da vea muioc'h karet hag henoret. Sant Villiau ha sant Moelar, ho pennos, me ho ped, d'ho kenvrois ha d'ar Frans a bez, ho pennos d'al leorik bihan-ma savet en ho c'henor, ha d'ho servicher karantezus en deus skrivet anezhan.

J.-M. G.

TAOLEN

KENTA LEOR

Kinnig d'an Autrou Morvan, chaloni.....	v
Dorik al Leor.....	1
Taol lagad a dro var histor Breiz.....	7
Lignez ha iaouankis Milliau.....	17
Gouarnamant ar roue Milliau.....	25
Nerz-kalon sant Milliau.....	38
Maro sant Milliau.....	47
Kaon great da sant Milliau.....	56
Miraklou sant Milliau.....	64
Penos henori sant Milliau ha sant Moelar.....	73
Guerz-koz sant Milliau.....	83
Kustumou hon tud koz, c'hoas paianed.....	91
Kustumou hon tud koz en amzer Milliau.....	99
Ar Yeaudet.....	112
Guimilliau.....	124
Lambaol-Guimilliau.....	141
Plounevez-Porzay.....	153
Ploumilliau ha Plumeliau.....	163
Sant Thivisiau, eskop.....	170

Sant Herbot, hermit.....	180
Sant Yvi, avieler hag hermit.....	188
Lez-Breiz	196
Nomenoe.....	210

EIL LEOR

Guerz-koz sant Mølar.....	215
Iaouankis sant Mølar.....	225
Mirakl kenta sant Mølar.....	229
Merzerenti sant Mølar.....	235
Eil burzud sant Mølar.....	243
Maro sant Mølar.....	249
Fin-fall Kyoltaïn, Justin ha Rivod.....	257
Enterramant sant Mølar.....	261
Proccz ar relegou.....	266
Lanmêur.....	276
Loc-Mølar-Sizun.....	283
Kantik nevez sant Milliau.....	287
Kantik nevez sant Mølar.....	291

